

Diocèse de
Quimper & Léon


Document numérisé en 2015

BUE
SANT ERVOAN

LANDREGER.

AOTREADUR :

Eur-vad d'al levrik-man, ha d'ann hini en
deuz-han groet. Ma bennoz gant-he !



† AOGUSTIN

Eskop San-Brieg ha Lardreger.

San-Brieg, d'ar bevar war-n-ugent a viz Meurx 1867.



à Paris chez Bertin Editeur, 6 n. St. Sulpice
SAINT YVES **SANT ERVOAN LANDREGER**
 Priez pour nous Pedet evid-omp.

BUE SANT ERVOAN

LANDREGER

SKRIVET ENN BREZONEK

GANT.

Eur c'hoz Person Tregeriad

Esköpti San-Brick.



LANDREGER

TI AR FLEM, MOULER-LEVRER.

1867

Propriété.



18
249
6
YVE

Girio skrivet fall.

Pajen	Linen	
6	12	a zello, <i>lennet</i> he zello.
16	6	d'ar studio; <i>lennet</i> d'ar skiancho-ze.
23	11	brudet mad eo, <i>lennet</i> brudet mad e oa.
29	1	hag ap bersoned, <i>lennet</i> hag ar bersoned.
34	2	hag a skouer vad, <i>lennet</i> hag a roe skouer vad.
38	4	ha d'ann hanter vad, <i>lennet</i> hanter kanvad.
40	9	da ann noz, <i>lennet</i> e kreiz ann noz.
40	11	daz gant-he eo a, <i>lennet</i> daz gant-he e oa.
44	9	Ervoan Hatois; he-unan, <i>lennet</i> Hatois he unan.
49	9	e tlee, <i>lennet</i> e tle.
79	13	ken bruzuduz, <i>lennet</i> ken burzuduz.
83	13	he dud e reaz; <i>lennet</i> e roaz.
84	4	hag o vijiñ, <i>lennet</i> hag o viret.
85	14	teuaz gand he, <i>lennet</i> e teuaz.
88	15	walen mezer, <i>lennet</i> gwalennad mezer.
94	16	ma oe pe a dra, <i>lennet</i> ma oe peadra.
96	14	unan a weléz, <i>lennet</i> unan a welaz.
100	10	hag ar parkeir, <i>lennet</i> ar parkeier.
101	6	en em diskoe, <i>lennet</i> en em diskoe.
102	9	souezuz e oa dije, <i>lennet</i> e oa dije.
103	13	en em diskoe, <i>lennet</i> en em diskoe.
107	11	a da vered, <i>lennet</i> a d'ar vered.
113	15	a lezaz ive, <i>lennet</i> a lezaz he.

Sc, Sc, Sc

D'ann Otro David,

Eskop San-Mrich ha Landreger.

OTRO-'N Eskop,

Al levrik bihan-man, groet hep-ken enn enor da unan euz a Zent hon Breiz-Izel, ann hini anhe holl a denn, ar muian, pobl ann draouien-man d'he gaout, a deu da c'houlenn harb ho madelez ha bennoz ho torn zakr. Skrivet eo enn iez ar vro, iez ha na displich ket d'hac'h, pell ac'hane; bean 'vo etre daouarn ar Vretoned, er c'hous ha ma vo groet goel ar Zant a ro he hano d'ehan; ha karet en dije, benvek dister 'zo anehan, labourat, sioul ha freuzuz, da drein sperejo ha kalono breiziz d'ann douj, d'ar fians ha d'ar garante a fellfe d'hac'h gwelet o vont war greskin enn ho zouez, e-kenver ar Zant ho c'henvroad; d'he skouerio mad da vean heuliet kalz gwelloc'h gant-he, ha d'ann holl decho fall a ren enn ho mesk, da vont pell diout-he, rak stourmo int a eneb ar

graso a c'houlennont enn hano ho Sant ha dre he dellido pe he verito. — Mes allaz ! Otro-'n Eskop, evit bean ken talvoudek, en doa al levrik-man da vean muioc'h disif, hag enn-han he-unan, hag er brezonek a gaver enn-han. Rak-se ne ket war-n-ehan he-unan eo a fi, war vadelez ar Zant ha war hoc'h-hini c'houi eo.

Er stad m'aman, hen kinniger d'hac'h ho taou, hag ho peder d'hen digemer evel testeni euz a galon vad he berc'hen, enn ho kenver ho taou, hag e-kenver he vroiz. Pe c'houi a raio ann enor d'al levrik d'hen kemer dindan hoc'h askel, pe c'houi a zello evel re dijad da gaout ho kraso mad, hen, da vihanan, a imbanno dre holl en deuz poaniet, euz he wellan, evit rein da Dregeriz, gwelloc'h tu da anaout, enorin hag heulian ho Sant muian-karet, hag evit diskoe d'ann holl on bet dalc'h-mad, hag e vin da vikenn,

OTRO-'N ESKOP,

ho pelek humpl ha sentuz-mourbed,

H. A.

KENT-SKRID.

OSKRIVAN bue ann Otro sant Ervoan Vini-
get, n'hon euz nep c'hoant nemet da
lakaat holl bobl vad Breiz, da anaout mui
euz mui ann den santel en deuz enoret ke-
mend ar vro-man, dre he zantelez dispar
ha dre galz obero burzuduz. Enoret eo ive,
hen, gant he genvroiz, — ha dleet eo d'he
hen enorin; — war greskin e fellfe d'imp
ec'h afe c'hoaz ar fians enn Sant Ervoan,
hag ar skouer-vad hon euz holl da gemer
diwar-n-ehan. Evit-se, dreist holl, eo a roomp
he *Vue enn brezonek*.

Diboan eo bet kement-se evidomp, rak di-
goret ha pleneet eo bet hon hent arok d'imp.
Hon tammik labour hon euz groet diwar vue
vraz ann Otro sant Ervoan, bet skrivet hag
imbannet gand ann Otro Sijismond Ropartz,
advokad e kear Gwengamp. Euz ar gristenien
vad, kaloneg ha gwiek ar vro eo, ann Otro-

ze unan anhe; hag he bez labour, moulet e San-Briek, eunn trizek vla-so, a zo bet digemeret mad gant kement den a glasg, enn eul levr, fe vad, galleg a zoare ha komzo ar wirione.

Evidomp-ni, ouz bue ar Zant eo, ec'h omp en em staget, kouid a destenio hag a dreo all dic'hiz na dereent ket ouz hon levrik bihan.

Kaer ar c'haeran e kredfomp e vo eet ann dra gan-imp, mar teuomp a-benn da greskin ann enor a dle hon bro d'ann Otro sant Ervoan, ar fians hon euz da gaout enn-han, den karanteuz a zo anehan e kenver he vreudeur, ha dreist-holl, ann nerz kalon da heulian he skouerio zantel, evit ma'hellfomp, eunn de vo, mont da gemer gant-han hon lod enn eyurusded ann env, goude m'hon bo kerzet evel-t-han enn hent ar vertuio.



BUE

-SANT ERVOAN VINIGET.

PENNAD I.

Lavar war douar Kervarzin.

Ginivelez ha diskadurez gentan sant Ervoan.

Eur bevaren leo war-dro, e tu ar c'hreste diouz traouien Trekor, el lee'h ma teuaz san Tual, gweach all goz, da zewel eul leandi, ha ma weler hirie iliz vraz souezuz, ha kearbenn Eskopti Treger, e zo eunn iliz vihan vrao, lee'h santel ma zo unan er vro, hag enn dro d'ehi eunn nebeut tier ken koz, darn anhe, hag ar chapel; hen-nez eo kerik parrouz ar *Vinihi*, da laret eo, *repu* Landt-Treger. Beteg eno ec'h ee, enn amzer goz, ha neuze c'hoaz, barn trugarezuz-meurbed ar re c'houde pe susesored ann den Doue na c'houle ket

maro ar pec'her; rak mar bije laer pe veuntrer, pe den fall all, neuz fors piou, potr pe blac'h, mar bije evit tapout mont dindan dorn ann iliz santel, e-keit ha ma chomje war ann terouer biniget, n'en doa ann dud a lezen nep pcan d'ober d'ehan. Divezatoc'h e larfomp e pe doare e oe groet ar santual biniget-ze gant sant Ervoan he-unan.

Tost awalc'h da iliz ar Vinihi, o skein war du ar c'huz heol, e oa, breman zo eunn tri bla ha daou-ugent, eunn ti koz hag e oa enn-han daou bez braz diadraou, ha diou gampr vraz a uz. Hen-nez e oa koz vaner Kervarzin. Tolet eo bet ann ti kos-ze enn traou, rak daro e oa da gouean; hag enn he lec'h e zo bet savet, eunn daou-ugent vla zo, eunn ti merer, diouz marer anhe breman, re dister da sach war-n-ehan daoulagad nep diavezour. A uz d'ann or koulskoude, e zo eunn dablezen varbr hag eo skrivet war-n-ehi, enn lizerenno alaouret, eo bet savet ann netra-ze a di, dre urz ann Otro Hiasinth Kelen, Arc'heskob e Pariz, eeun war lec'h maner Kervarzin. Ma, maner Kervarzin-ze a oa, breman, 'zo c'houec'h kant vla, tra ha

ti eunn dijentil mad, a wir hag a goz noblanz, hag e oa he hano Helouri. Hag hano he dad e oa a ive hen-nez, pe oa ive hano he dud pe he hano bade, ne ouzer ket. Ar pezh a c'houzomp, eo e oa ann Otro Helouri Kervarzin mab da Danoic pe Dankred Kervarzin, marc'hek, anaveet mad evit bean den a vrezel nerzuz ha kalonek.

Ann Otro Helouri Kervarzin e komzomp anehan aman, deut enn oad da dimin, a gemeraz evit he bried mamzel Azou, merc'h euz a di ar C'henkiz, enn parrouz Peurid ar Roc'h. Ar priejo-man, a reng huel ho daou, e oa ive braz ho feadra hag ho danve; brasoc'h e oa c'hoaz ho fe hag ho doujans Doue; hag evit ho binigan enn ho dimi, e oe roet eunn tiad evuruz a vugale d'he.

D'ar seitek a viz Here, daouzek kant tri hag hanter-kant, e c'hanaz, enn eur gampr diadraou a vaner Kervarzin, ar bugel en doa da vean goude-ze sant Ervoan viniget, skouer ann dud a iliz, enor he amzer, tad ar bevien, ann intanvezed hag ar vugale diberc'hen, difenner breiz-Arvorik holl.

Bugale all en doe Helouri istr evit Ervoanik : Taer merc'h hag eur potr a oa c'hoaz. Katel a dimeaz da Ervoan ann Alan a barrouz Hen-goat, tri bla e doa war Ervoanek he breur, pac'h eo gwir e oa pevar-ugent vla, e bla tri-zek kant tregont, ma reaz he zesteni dirak kan-naded pe gomiserien ar pab, deut enn breiz er bla-se, evit ann enklask kent evit lakaat Dom Ervoan enn roll ar Zent. Evit ann diou blac'h all, ne ouzomp nag hano, na oad d'he, nemet ma dimeaz unan anhe da Rivallon Trakin, bourc'hiz a Landreger, hag eben da Ervoan Gonan. Dre digoueo ec'h ouzomp bezanz ar breur, ha nep tra all ken.

Hep nep mar ayad eo, e oa Ervoanik map henan ann Otro Helouri Kervarzin ; rak d'ehan e oa ar maner-ze : hag evel ma lared neuze, map henan eunn ti nobl e vo d'ehan ar c'hastel pe ar maner kentan, gant al leveo stag out-han.

Michans e teuaz enn penn tad ha mamm Ervoanik ober gant ho map henan, diouz giz ann noblans all, eunn den a vrezel, pe eur c'habiten evel he dad koz, marc'hek kalonek

Tankred ; mes Doue e oa sonjo all enn he spered war ar bugel-ze. Ann devodez Azou he vamm e oe diskleriet d'ehi, enn eunn huvre, e vije he mab Ervoanik eur Zant. Eaz e oe kredin da gomzo ar vamm, pa oe gwelet doareo souezuz ar bugel, evit ar studi, ar zantelez hag he spered dreist he oad. Evit sentin ouz gras Doue, Helouri a c'halvaz enn he vanner, da rein d'he vap kentelio kentan ar skiancho, eur c'hloarek iaouank a barrouz Pleuvihan, e oa Iann Gerangoz he hano. Ar vamm, evit kreskin beoder ar mestr hag hini he skolaer, e teue aliez gant-hi hec'h huvre, hag a lare ouz-penn, evel ar Rouanez Wenn d'he mab Louiz IX : O ma mab, — Beo 'ta e doare ma vi eur Zant. — Hen-nez eo ive ma c'hoant, a lare ar bugel, ha da-ze hep-ken eo a labouran. Hag evit gwir, dalc'h-mad e oa ar bugel gant-se, hag ha galon vraz. He holl blijadur a oa mont d'ann ilizo, bean enn overnio war gan, hag enn ovisé all ; plijout a re d'ehan servijin ar veleien ouz ann oter ; ann aviel ha levro all al lezen neve, ne skouize ket ouz ho lenn ; ar brezegenna a gleve, e poanie d'ho

heulian, enn eur gir, he amzer a daouhantere etre al levro hag ar beden. Aliez c'hoaz, ec'h ee gant he vamm da welet ar bevien glan diwar dro, hag he joa e oa rein gant he dorn he-unan, kemend a roe madelez he gerent d'ehan; adalek neuze e teuaz ann dud ezomek ha mac'haniel, da vean he vrasan minioned. Hag evuruz eo ar bugel a dremen evel-se he vlaio kentan dindan askel eur vamm hag enn skeud ann Iliz! C'hoaz hirie, enn kestel Breiz, eman ar c'hiz koz ha mad-ze; ha tridal a ra ann ine, o welet eunn tiad bugale, kenteliel, enn ti ho zad, gant eur belék santel, galvet gant Doue ha karget, dre eur c'hras roet d'ehan, da diskin ar re all, ha gant eur vamm fur, galloudek, war eunn dro, dre he c'halon, he fedenno hag he skouerio mad.

Setu Ervoanik enn he bevarzek vla, ha ken buan e oa eet er skiancho, ma en doa disket kemend a wie he vestr. Ne helled ket chom war-ze, na lezel hep rein d'eur bugel ken doareet kaer, ann holl diskadurez a oa evit he c'hemer. Helouri hag Azou e teuaz enn ho spered e oa red en em dispartian diouz ho

mañ hag he gas da Bariz, da varran ha da ber-ober he studio e oa ken evuruz he grok kentan enn-he; mes n'hen lezjont ket da vont heb he vestr kentan, den a ali fur, hag a galon vraz a oa. Iann Gerangoz ac'h eaz 'ta gant he skolaer; hen heulian a reaz e Pariz, enn Orlean, dre holl, ha war hanter e oe gant-hañ dalc'h-mad, evit he gampr, he wele, he studio. He vestr hag he gendiskibl, ann eil goude egile, kalonek dalc'h-mad, kenseurt Ervoan e oe hed he vue, ha koz awalc'h e vevaz, da dont e-penn ann holl desto a oe klevet, er bla trizek kant tregont, da rein d'he skolaer, stad enn-han michans diwar he benn — gant gwir e vije — daro e oa ann Iliz d'he zével, d'ar brasan enor a oufe den da gaout er bed-man, da rein, a laran-me, d'he skolaer ann testeni berr hag enoruz, en doa gwelet bepred Dom Ervoan, o kreskin, war eunn dro, er gwiegez hag er santelez.

PENNAD II.

Sant Ervoan e skolio Pariz hag Orléan.

O TIGUEOUT e Pariz, Ervoan hag he vestr-skol, evit bean tostan ec'h helljent d'ann ti ho doa da vont d'ehan, evit ho c'hentelio, ec'h eaz da chom e ru Fouarr; eno e oa, c'hoaz neuze, ar skolio braz evit skiancho ar spered. Ervoan en em dolaz d'ar studio, hag ho diskaz ken koulz, ma oe tremenet mestr enne.

Euz a skolaer, setu-han 'ta eet da vestr, ha skol ar skiancho huel e Pariz, e deuz zo-ken ann enor da gaout sant Ervoan e roll he mestro. Ne oe ket, gwir eo, evit pell amzer; kement-se na vir ket koulskoude n'ho deuz mestro ar skol vrudet-ze, ar gwir d'he zellet evel ho fathom ho-unan.

Ann doktor iaouank e oa bec'h d'ehan bean ugent vla neuze. Mar dije hen en dije roet

skouarn da alio a vrasder, e vije bet gwelet c'hoaz marteze dek kantcho skolaerien e peb oad, enn dro da gadeur eur bugel; mes Ervoan Helouri a wie rez-mad eo eaz kouean, goude bean bet huel zavet gant ourgouil ar skiancho, ha den braz ne felle d'ehan bean, nemet bean a vije, herve huyre 'he vamm, eur Zant braz. Kein a droaz 'ta d'ar skiancho risklus-ze, evit kregin gant ann Dheoloji ha gant Gwir ann Iliz, studio eo ar re-ze hag a zo garo ha fur. Ware eunn dro, e tilojaz euz a ru Fouarr, hag e teuz da chom tost d'ar skolio en doa da heulian. E Pariz, e kavaz kenvroiz, minioned, amezeien, koulz eo laret breudeur: Ervoan Suet euz ar Roc'h, bet er bla kenttan war hanter gant-han evit he gampr; Herri Fichet a Beurid ar Roc'h, enn henvel skol hag hen; Raoul Portarn, enn he gichen e skol Dheologi. E Breiz ec'h helled c'hoaz kredin e oad; ha ma oa diouer a dad hag a vamm, da vihanan ne oad ket evit ankoat ar vro c'han, nag er skolio, nag e kam-prik ar c'hloarek iaouank.

Goude holl, evel mac'h eo diboañ hengoud,

e-touez ar pemp mil skolaer war-n-ugent a oa e Pariz er c'houlzou-ze, deut di euz ar pevar avel, da derrin ho sec'hed e mammenno bro ar skiancho, ar c'henvroiz en em glaske bepred hag en em stage ann eil ouz egile, ha pep rummad broiz e oa renet gant he brokuler. Ar mestroman a wie e oa bagado tud noualen dreg-he, gant gwirio re vraz roet d'he, ha na blegent ket zo-ken gant ar rouane. E-desped da lezhno ann Iliz hag ar rouantelez, ar skolaerien, oad tud aliez d'he, mibien darn anhe da gabitened, ha zo-kaeroc'h da-gerent d'ar rouane, ar botred-ze a c'hoarie, eaz braz, ha kleve ha sabron, ha re alies e vije gwelet, enn ruio oa, ho goad o redek gant hini ann archerien hag ar ar vourc'hijen.

Gant ar gannerien-ze, kammed ne vije gwelet mab ann Otro Helouri Kervarzin; eunn hano all, ne oa ket hen-nez, a oa he hini e-touez he vroiz hag ar re hen anavee.

Euz ar skolaerien holl, e oa hen sellet evel ann hini a gare mujian Doue hag ar studi; ha lared a read na gouske ket enn eur gwele, mes war ann douar, gant eunn dornad plouz din-

dan-han, evit bean eur gwele mad d'ehan enn he gampr; ar re a genveve gant-han a lare ouz-penn e oa d'ar bevien a roe al loden gik a lekeed dirag-han, hag ec'h ee karante ha pinijen gorv, gant-han, war-eunn-dro. Evel-se eo e tennaz war he studio bennozo ann Otro Doue. Pegen-nebeud a zo, siouaz, euz he oad er skolio, da vevan evel-t-han. Ac'hane, evit ann darn vuian anhe, eo noazuz freuz gwehen ar skiant, evel ma oe evit hon tud kentan; ho daoulagad a digor d'he evit ann douar, hag ho dall evit ann env; c'hoant a ro d'he euz a dreo ar bed-man, ha fae euz a vado ar bed all; rag enn enep da zant Ervoan, ar beden a lezont hag ho holl dileado kristen.

Tremenet e oa ann dek vla, blaio a furnez hag a studi, aboe ma oa Ervoan Helouri ha Iann Gerangoz diblasat diouz maner didrouz Kervarzin. Krog e oa Ervoanik enn he bevar bla war-n-ugent. Hirie, d'ann oad-ze, e ve troet kein d'ar studio; er c'houlzou-ze ma oa eunn enor bean gwiek da vad, ha ma sklerie tud evel Albert ar Braz ha san Thomaz, n'ed ket ken buan diwar ar studi, da gemer aze barz

ar bed. Marteze ive, hag hellout a rear he gredin, ne wie ket c'hoaz ar Zant pe hent a oa he hini, den disfiuz e oa anehan he-unan. Da vihanan e krogaz stard e penn Iann Gerangoz hag enn he hini, distrein diwar studi ann Dheoloji, evit stagan a-grenn war anaoudegez al lezenno. Iann Gerangoz e plije kalz ar studi-ze d'ehan, — enn holl e oa gred evit-hi. — Doctor e oe enn-hi, ha goud a reomp en doa roet eur gentel-bennak da zant Ervoan war ar gwir a zell ouz tud eur vro, pe sivil.

Diwar neuze, ne oa ken e Pariz eo e tleent chom; rak er gwir sivil, e oa skolio Pariz ar re diyezan, evit-he da vean ar re gentan e skiancho oa.

E kear Orlean eo a oa, enn amzer-ze, ar vestro muian brudet war ar pezh a zelle ouz ann daou wir, hini ann dud, hag hini ann iliz; di eta eo e teuaz Iann Gerangoz hag Ervoan Helouri, da heulian kentelio ar vestro braz a dalc'he skol eno. E kear Orlean kouls, hag e Pariz, e kavaz sant Ervoan kenvroiz hag a dlee divezatoc'h rein testeni d'he furnez ha d'he zantelez. Daou anaveomp anhe; Ervoan

Tregoezel a Bleuvihan, bet mignon braz d'ar Zant e-pad pevar bla hanter, hep n'en deve bevet dindan he douen, ha Gwill ar Pierez, a oe vikel dalc'h-mad enn iliz Landreger, hag e-pad daou vla e kampr ar Zant.

Adalek neuze, eme ann test-ze, goude gwelet gand he daoulagad he-unan, e oa krog enn he binijenno; pa debrem্প-ni kig ha ma evemp-ni gwin, na re nag ann eil nag egile; iun a oa gant-han e pep gwener; he vrasan levenez a oa kaout overn, ha klevet prezegenno zantel. Da c'houlou de, e lare matinezo hag heurio ann Itron Varia. Bue ar Zent a oa bemde etre he daouarn, ha pa gouee war eunn tol a zantelez vraz, e poanie d'hen heulian euz he wellan. Biskoaz n'em euz gwelet anehan, me hag hen gwele bemde, me hag e vije dalc'h-mad gant-han, nann biskoaz, eme Will ar Pierez, n'em euz-han gwelet ouz en em veskan e c'hoario trouzuz ar skolerien; biskoaz len'am euz-han klevet oc'h ober, na dre Doue na dre ar Zent, nag eul leuskel nep gir fall; biskoaz gant-han n'em euz gwelet nep skeud a eneb ar gwerc'hded.

Evel-se enn eur c'horv-iaouank ha bresk, e veve Ervoan evel eunn el. Evit-han ne oa ken dindan daoulagad he vamm vad, ma oa, pell a oa hep-hi, ha c'houec'h ugent leo diout-hi, biskoaz ne ankoaaz he c'hentelio fur hag he skouerio zantel; trein a re diwar ar risklo en dije kavet enn tier, e-mesk iaouankizo re skan; hag ann diaoul, mar felle d'ehan dont war he dro, en doa lamp digant-han e pep krok; rak nerz ha kalon a gave er beden, er sakramancho, hag el levro a rilijion a oa magadurez he ine.

Perak e welomp-ni kel liez den iaouank, o koll ho fe hag ho urz-vad e skolio ar c'herio braz? Allaz! rak ma ankoaont abred ho mamm, ma tilezont ho dlead kristen, ha mac'h eont da heul kenseurtes divad, ha gant-he, da lec'hio hag e oa fall mont kammed enn-he. Ali omp d'ar iaouankizo-ze, ma lennoint bue sant Ervoan, ha ma he gemeroint evid ho skouer: ho ine a vo gwell a gement-se; ho iec'hed hag ho feadra ive, kouls hag ho mamm hag ho c'hoarezed, a c'houzany kalz diouz ho bue reuzeudik pe maluruz.

PENNAD III.

Sant Ervoan en em c'hroa den a Iliz;
da Varner eo lekeet da gentan enn Eskopti Rahon,
ha goude-ze enn Eskopti Treger.

SANT Ervoan a oe e penn he studio, d'ann soad a dregont vla; mestr e oa enn holl skiancho zakr ha dizakr ac'h ead da diskin, enn amzerio-ze, d'ar skolio ar re vrudetan; euz a Orlean e teuaz da Rahon, kear-benn dukach Breiz, he vro. Eno e oe anaveet abred he furnez hag he wiegez, hag hanvet barner ann Iliz gant arc'hdiakr ann Eskopti. E-keit ha ma oe er garg-ze, mestr Ervoan Kervarzin a vije gwelet aliez e ti zantel bugale San-Fransez Rahon; brudet mad eo ann ti-ze diwar-benn spered ar baourente hag ann izelled a rene ennhan. Eno e oa he blijadur bean, o selaou kentelio Doue, euz a c'heno eur manac'h paour ha kuzet ouz ar bed; eno e welaz ar zantelez huel e oa galvet gant Doue d'ehi; eno eo e lekeaz

don enn he spered en em dispartian diouz ar bed, evit en em ober belek. Ne oe ket heb enebin, eo e plegaz he ine da gement-se; ha divezatoc'h e larfomp pegen gorrek e sujaz he gorr d'he spered; ha michans ne vo den souezet evit-se.

Rak mar boa den, da hellout sklerian er bed, e oa Ervoan Helouri a oa. Gant-han e oa war eunn dro ginivelez, skiant, mado braz ha iaouankiz. Da dregont vla en em wele savet, e touez ann dud a lezen, d'eur reng enoruz-meurbed, e kear-benn ar vro a oa he hini, eaz d'ehan trein daoulagad ann holl, war-neh-an he-unan, ha war he diskadurez vraz. Ne oa ket dre epo eo e felle da Ervoan kerzet. Ar pezh a binijen en doa groet enn Orlean, a reaz ive enn Rahon; war greskin bepred enn santelez eo e felle d'ehan mont, ha kaer en doa he gorr termal war he binijenno, e oe red d'ehan ho c'houzanv, evel ar c'hrok kentann enn eur vue, hag e deuz da vont war c'har-wat bemde.

Alan Roc'h-Huon e tigouezaz d'ehan tremen dre Rahon, gant ann Otro Gwill Tournemin;

he vestr. Pedet e oejont ho daou da brejan gant ann arc'hdiakr. Kaset e oe Alan da gampr sant Ervoan, ha diskoet he wele d'ehan; — c'hoel 'ta, a oe laret d'ehan, gwele mestr Ervoan; aze e kousk barner ann Iliz; diwardro du-ze eo. — Eunn tammik e oe dizoloet ar gwele, ha ne welaz Alan enn-han nemet skolpad, eunn nebeut ploboro, gant eunn dornad plouz, hag eur c'hoz drulien lien kanab war var, da c'houlou holl.

Hag ann hini a lede he izili blonset war ar gwele-ze, e oa eunn dijentil a reng huel, hag e oa neuze perc'hen pevar pe bemp mil livr leve mad. Mes al leve-ze, ne oa ket d'ann Otro Kervarzin, d'ar bevien eo a oa.

Er c'houlzo ma oa Dom Ervoan barner ann iliz enn Rahon, e oa ive eno er skol eur potrik iaouank, Olier ar Floc'h, bet aboe kure, hed he vue, enn iliz vraz Landreger, ha mirer re-lego enn iliz-se. Eur c'hendiskibl e oa gant-han, eur breiziad evel-t-han, Derien Gwinia-varc'h, hag ac'h eaz enn urz San-Dominik.

Pep tri devez, e re Dom Ervoan d'ann daou skolaer-ze peadra da baean ho skol; ho fedin a

re da vernian gant-han d'ar goelio braz, d'ann Nedelek, Pask, Pentekost, d'ann Holl-Zent. Diouz ar goel e vije ar pred, evel ma eo ar c'hiz; pa vije savet ann tolio, e re Dom Ervoan digas ar meuzio, hag ho renkan war ann dol, evel pa vije ar brejerien azeet out-hi; gant ar meuzio a re lodenno, hag a lekee enn eur baner vraz, e karg Olier pe Derien, ha neuze a lare d'he: — Eet da glask ma zud. — Neuze e tigure ann or vraz, hag e teue ar bevien a vagado. Gant he dorn he-unan e roe d'he al lodenno en doa groet, ha diou wech da evan. Goude-ze, en em lekee ouz tol gant ann daou skolaer, hag e-keit ha ma tebre ar reman ha tud all ann ti, euz ann holl veuzio a oa dirag-he, sant Ervoan e oa awalc'h d'ehan eunn tamm bara c'hei ha louzo, hag eur bannac'h dour rik, ec'h ead da wit d'ehan d'eur fantan hanvet Gormoi. Awecho ive, e talc'he Dom Ervoan hini pe hini euz he daou skolaer, da dremen ann noz enn he di, hag hen lekee da gousket enn eur gwele mad ha kaer a weled enn he gampr; hag hen! Hen a c'hourvee war ann douar e-mesk he levro, hep diwiskan

neuden diliad; he voto zo-ken na leme ket euz he dreid.

Koulskoude ann Otro Helouri a oa tremenet dre ann holl urzo a gas d'ar velegiach. Pa zelle piz ouz ar garg huel ha zantel-ze, ec'h ee he ine leun a spont, ann den humpl e oa anehan; mes evel ma oa ive leun a zentidigez da alio ar manac'h paour en doa fiet enn-han he ren, e lezaz, eru eunn amzer, he ober belek. E pe lec'h e oe-han beleget, pe e Rahon, pe e Landreger, ar skrido ar re gwirionan — tra zouezuz, — gir e-bed na laront war ann digoue-ze euz a vue hon Zant. E Rahon koulskoude, war a greder d'ar muian, eo e oe savet da urz ar yeleien.

Diwar neuze, ne oe ken sant Ervoan pell e Rahon. Ma larer gwir, e krogaz enn-han klenved he vro, evel ma tigure gant holl vreiziz vad. El Landreger e oa ive vad da ober; Eskop Treger, Alan Bruk, e oa sant Ervoan d'ehan, evel o vean ganet enn he Eskopti, hag hen goulenne evel he dra. Ouz-penn da-ze, skouiz e oa Ervoan gant he garg divlaz ha difreuzuz, e-mesk pobl Rahon, hag oa neuze tud a

heg hag a gaojo, troet gant ann holl droio treuz. He garg barner a lezaz 'ta, evit distrein d'he vaner Kervarzin, ha levenez-vraz e oe gant kemend hini hen anavee. Eur marc'h en doe digant ann arc'hdiakr evit hen dougen d'he vro; hag adalek Rahon, e oe gwerzet ar marc'h gant Ervoan, ha roet ann arc'hand d'ar bevien.

Ann Otro-'n Eskop, Alan Bruk, hen hanvaz raktal he varner, ha dre eno Dom Ervoan ne ket garg eo a drokaz, bro hep-ken eo a oe; neuze ive e oe hanvet person da barrouz Tredrez, e-kichen Lomikel ann trez. Er bla daouzek kant pamb ha tri-ugent e oa ze. Er bla-ze eo a varvaz ann Otro-'n Eskob Allan. Enn he lec'h e oe hanvet da Eskopti Treger ann Otro Jofroi Tournemin; he-man a dal-c'haz sant Ervoan enn he garg barner, ha divezetoc'h, eiz vla goude, hen roaz da berson da barrouz Louannek, hag a zo brasoc'h evit Tredrez, ha tostoc'h ispisial da gear Landreger ha da vaner Kervarzin.

Enn diou garg-ze, a varner hag a Berson, eo ec'h eaz Dom Ervoan da zant. Gwall dano eo

bet bete vremen ann dud a lezen hag ap bersoned a ve bet douget gant ann Iliz war roll he Zent; ne ket laret e zo nebeud a dud zalvet enn ho zouez eo a rear; kalz muioc'h a ineo a zo er baradou, evit na zo hanoio Zent war al levro; lec'h a zo koulskoude, e kement-se, da bep-hini d'en em zonzal dirak Doue, evit, ha barnerien ha personed, kerzet war hent sant Ervoan, ho skouer holl, hag en em lakaat da vean Sent, o vevan evel ma en deuz bevet er c'hargo riskluz a reont war ann douar.



PENNAD IV.

Sant Ervoan Barner ann Iliz.

He nerz kalon da difenn holl gwirio ha frankizo ann Iliz.

Enn amzer ma veve sant Ervoan, bean barner ann Iliz e oa eur garg diez ha bec'hiuz-meurbed, ha seul vrasoc'h a ze e tlee bean dellid pe verit ann hini e fied anehi ennhan? Petra, goude holl, a oufed laret euz a zant Ervoan hag a ve enn he veulodi muioc'h evit ar berr gomzo-man bet laret anehan gant kannaded ar Pab?

En he garg a varner ann Iliz, e oe gwelet dalc'h-mad fur ha gwiek, leal ha rilijiuz, prim da ober lealded da bep-hini, hep sellet ouz doareo ann dud. Ne ket eur vicher da c'honid arc'hand eo a re euz he vestroniez, nag ive da vont pinvidik. Kalz a deue d'ehan diouz gonido ar ziel e lez Treger; gopr he garg

a oa ann drederen anhe; hag adalek ma en dije-he bet, ac'h ee raktal ann arc'hant-ze d'ar bevien.

He holl boanio a lekee da beuc'haat ha da unvanin ar re a deue d'he varn. Biskoaz ne oe gwelet na droug enn-han, na zo-ken trubuliet he spered, nemet pa deued d'he gad gant eur gaoz disleal-bennak; neuze ec'h ee eunn drouk santel enn-han, hag ar breutaerien pe blederien a fe fall, e oa red ma plegjent d'he gomzo zantel ha peuc'huz, ha ma en em unvanjent, kent evit mac'h ajent digant-han.

Rak-se, seped ar pezh a zelle ouz ar briedelez, pe ouz treo all er stumm-ze ma vije ezom eur varn, ann holl brosejo e oa echuet gant-han dre eunn intent vad etre ann diou gosteen; ha bec'h e oa d'ehan kaout da varn ann drederen euz ar prosejo digoret, kent evit mac'h ajed enn he vede.

Goude poanian euz he vellan, ma na deue ket a-benn da lakaat unvaniez ha peuc'h etre breutaerien penneg hag ac'heurtet, neuze ec'h ee ar belek santel da bedin, ha da gomz ouz ar Zalver karanteuz en deuz laret: — ma

feuc'h a roan d'hac'h, ma feuc'h a lezan gan-hac'h.

Raoul Portarn, ar c'hloarek a Lanveur a oa bet e Pariz kendiskibl da Ervoan Kervarzin, hag he vreur Jako Portarn a oa pell a oa e leui braz, diwar-benn treo tiegez ha zo-ken leveo, gant Jofroi ann Enez, a Blougano, eureujet, enn eunn eil dimi, da vamm breudeur Portarn; ha den na oa deut a-benn d'ho lakaat d'en em unvanin. D'eunn devez ma tigouee da Jofroi, d'he c'hroek ha da vibien he c'hroek, bean war eunn dro enn Iliz vraz Landreger, e laraz Dom Ervoan da Jofroi : — Jofroi, abalamour da Doue, groet ho peuc'h, c'houi hag ho kroek gant he bugale, ha me, mar plich ann dra d'hac'h, me a gempennno holl didrouz etre-he ha c'houi. — Dom Ervoan, e teuaz gant Jofroi, peuc'h all e-bed na c'houlomp, nemed ann hini a vo roet d'imp gant gwir ha lealded vad. — Mad, gortoet aze ma tistroin d'ho kad, a laraz Barner ann Iliz, o komz adarre ouz Jofroi hag he c'hroek; me a ia da laret overn ar Spered-Santel, hag a bedó Doue ma roo nerz d'hac'h da adskoulman etre-hoc'h

ere ar peuc'h. — Goude he overn, e teuaz ar belek santel a-neve etrezeg ann daou bried, ha ken troet ho c'havaz war ann tu all, ma ne oejont ket diwar-ze evit laret eur gir hep-ken a eneb ioulo pe bolanteo ar Zant, ha ma teuaz, enn enep, gant-he. — Otro, groet ouz hon frosez evel ma plijo gan-hac'h. — Goude-ze a lare Jofroi e renke kalon he c'hroek hag he hini bean bet troet gant peddenno ar Zant. Kemend all a digoueez neuze ive e spered Raoul Portarn hag he vreur; ha Dom Ervoan, o vean pleneet ar stourm da c'hrad ann daou du, e teuaz ar gerent-ze holl minioned ar re wellan.

Ken karanteuz ha madelezuz all e oa spered ar barner mad e-kenver eur rumm dud all e douget klemm d'ehan enn ho enep. Gwell e oa gant-han distrein ann dud fallan evit ne oa ho c'hasian, hag hen oc'h helloud hen ober, henvel enn-ze ouz he vestr Jezuz ne oa ket maro ar pec'her a c'houle, he distro d'ar mad eo a oa. Gant he gomz dudiuz, ha mui c'hoaz gant nerz he zantelez, e lekeé keuz e kalon ar gloer gabluz, hag ho suje da ober anhe he-

unan ar binijenno a deree ar gwellan out-he, ar re ho gwellae euz ho droug, hag a skouer vad d'ar bobl.

Evel-se eo e spurjaz a-grenn Eskopti Treger diouz ann dud a Iliz, re kalz anhe, hag a oa glac'har ar wir gristenien, tud divad e oant. D'ar c'houencho ec'h ee darn, darn all d'ar c'hoajo, e-mesk ar gerrek war od ar mor, darn all a reaz beacho hirr ha poaniuz, da veio ann Ebestel pe da lec'hio zantel all. Ha daou c'hant vla goude, a lared e weled c'hoaz, enn Iliz sant Tual freuz ann urz kaer a oa bet lekeet enn-hi gant sant Ervoan.

Eunn enor re vraz en doa Dom Ervoan evit lezenno ann Iliz santel, evit tol a hed hag a dreuz, evel ma read enn he amzer, kelenno hag eskumunugenno evit treo ha na zellent nemed ouz ann douar. Alies e vije laeret ed d'ehan euz he c'hrinelio Kervarzin; ha pa deued da laret d'ehan : — Otro, imbannet eta poanio a eneb al laeron ! — Lest anhe, eme-han, ha Doue d'ho gwellao; c'hoaz on pinvikoc'h evit-he. — Ha laret eo bet ne dougaz biskoaz barn, na weled he daero o redek hed he diou jod, dre

ar zonz e oa don enn he spered, e tlee eunn de bean barnet d'he dro.

Setu-aze eur gwir skouer d'ar varnerien, ha gant pep gwirione eo ec'h helled laret euz a zant Ervoan : — e oa Doue bepred gant-han. — Eunn testeni souezuz a daneveller pe gonter war gemeñt-se, ha setu-han aman, gir evit gir, evel m'he lenner el lec'h all.

Enn amzer ma oa sant Ervoan barner enn Iliz Landreger, em euz lennet e téuaz dirag-han eunn den iaouank da c'houlenn, evel groek d'ehan dre briedelez, eur plac'h iaouank ha na c'houle ket rein he gir d'ehan; ha koulskoude sant Ervoan a varnaz anehi da vean he c'hroek. Ho-man ac'h eaz bete kear Tour, dirag ann Arc'heskob en doa galloud war holl Eskoptio Breiz; hag ar Zant da vont ive da Dour evit harpan he varn, hag ann den iaouank ac'h eaz ive. Barner Tour, pa oejont dirag-han, a reaz d'ann Otro sant Ervoan azein enn he gichenn. Adgwelet e oe ar gaoz, ha klevet ann daou du; hag o vean ne oa netra hag a larje e oa gwir dimi etre-he, e c'houlennaz barner Tour digant sant Ervoan, piou

en doa-han aliet da dougen he varn. — Ar plac'h, eme ar Zant, e deuz anzavet he dimi ouz-in. — Neuze barner Tour, eno dirag ann holl, a reaz he c'houlenn digand ar plac'h, hag hi a nac'haz ann dra.

Ar Zant, d'he dro, a c'houlennaz vete digant ar barner, da ober goulennno out-hi dirag-han. — Ia, ia, groet, a laraz barner Tour. — War goulennno sant Ervoan, e ansavaz ar plac'h, d'ann holl da glevet, ec'h eo hi groek d'ann den a oa gant-hi. Ha barner Tour d'he zamall ha da laret d'ehi : — aman ec'h euz nac'het ann dra-ze, ha laret n'ho poa biskoaz kemeret anehan evit he pried! — n'em euz ket ive, e teuaz gant-hi. — Sant Ervoan a gemeraz ar gomz d'eunn eil gwech, ha war he le, e c'houlennaz out-hi evel-hen : — ma flac'h, n'ec'h euz-hu ket ansavet ouz-in ho poa-han kemeret da bried. — Ia, eme-hi, ma fried eo, ha me eo he c'hroek, hag e-keit ha ma vevo, nep pried all n'am bo nemet-han.

Barner Tour a welaz ar pezh a oa kuzet out-han; ha kelen o vean bet roet d'ehan war

zantelez Dom Ervoan, e anaveaz. ar burzud. Petra-bennak ma oa sant Ervoan eo en doa, evel barner enn iliz Treger, douget ar varn e oa galv diwar he benn, sant Ervoan eo a oe karget gant barner Tour da varn ar gaoz anevez, ha dalc'het e oe he varn gant barner Tour.

Mes ma oa lealded ha peuc'h stard mad, ann eil ouz eben, e kadeur-varn sant Ervoan; den mad e oa anehan; dirak daoulagad tud vraz ar bed, e tremene koulskoude Dom Ervoan evit eur barner didrue ha kendalc'huz; ia, er breujo a zo bet groet a viskoaz gant ann nerz goue a eneb ar wirione; hag eur gwir c'hloar eo mervel enn-he merzer. Pa vije da harpan gwirio ha frankizo koz Iliz Breiz, oh! neuze ar belek, ken sioul ha ken humpl a-hend-all, a vije gwelet nerzuz ha kaloneg, evel ma oa he dad koz Tankred Kervarzin war dachenno ar brezel, d'ann holl daoulagad da welet e oa leun he wazio a oad silet ar varc'herien.

Enn eur c'houls-bennak, ha diwar eunn digare ha ne hellan ket zo-ken he laret, e teuaz

e penn Roue bro-c'hall skein gant ann holl dud a Iliz, enn eskopti Treger, gant Eskop, chalounied hag all, eunn truach hag ac'h-ee d'ar c'hanved ha d'ann hanter vad euz ho holl vado na oant ket leve douar.

Dont a eure tud ar Roue da Landreger, evit sevel ann tas displeal-ze, ha raktal barner ann Iliz ha da zevel sonn, he-unan penn, dirag ar botred-ze. Bep noz, e kouske e sekreteri ann Iliz-vraz, paket enn eur c'hez vallin, war ann douar noaz, gant eur min hep-ken dindan he benn, evel eunn eyesiad bepred enn he lec'h, e-kichen al listri zakr hag ann tezorio all a oa da di Doue hag e ti Doue. Tud ar Roue a wele e oa enebet out-he gant sant Ervoan; e oa dalc'h-mad o stourm out-he, ha ne oa ket hep risk he vue, ha joa e vije gant-han mervel evit ken kaer tra. Divez awalc'h e oe unan anhe evit fellout d'ehan mont dre nerz enn Iliz; mes sant Ervoan a harzaz out-han; skoet e oe gant-han, goullet e oe he dorn ha sioul e c'houzanvaz kement-se. Eunn devez e kavaz, unan euz archerien ar Roue, he dro da gas gant-han, euz a varchosio ann Eskopti, eur marc'h du-kaer,

hag a dale kalz. Kouean a eure sant Ervoan war al laer er vered, hag hen raktal ha da lampat da gabestr ar marc'h, d'hen diframman a dre daouarn ann archer, ha d'hen kas da di ann Eskopti, en eul laret ne oa mann da gemer euz ar pezh a oa da zan Tual. Ann archer, war a larer, e koueaz war ann tol ar paralizi war-n-ehan. Brud vraz a oe gant-se e kear. Ar bevien hag ar bobl vihan a oa e tu barner ann iliz, ho mignon hag ho difenner; ar vourc'hijen spouronet na welent nemet dismantr a uz d'ho fenn. Gwill Tournemin tezorier Landreger, karget da zevel tas ar Roue, hag eur c'hloarek, bourc'hiz euz a gear, e oa he hano Iann Gerin, a wallgase Dom Ervoan gant ho mallozo, hag a gane pouil d'ehan, beteg enn iliz vraz; ann hanoio ar re wasan a roent d'ehan dirag ann holl, d'ehan dijentil, ganet euz a gentan tud a oa er vro: — den diwar ar meaz, fallakr, laouek — truillennek a zo ac'hanoud, a larent war boez ho fenn, daro eo bet d'id hon laakaat da goll kemend hon euz. — Evit-han, van e-bed na reaz; eo, mousc'hoarzin war

ho disterved, ha laret sioul d'he : — Doue da distolo d'hac'h ar pezh a laret aze. Eru gant-se, leret kemend a deuio enn ho penn ; ne harz-fet ket ouz-in da labourat, erdra hellin, evit difenn frankizo ann Iliz, e-keit ha ma chomoeur c'houeaden vue gan-in. — Neuze ee'h eaz ann den santel da ober he ward er sekreteri, hen, hag Olier a Lanveur, he gloarek. E-kreiz da ann noz, hag hi da glevet eunn drouz braz, evel eunn tol kurun, ha ken spontuz, ma kredaz gant-he eo a ann Iliz o kouean. — Deut gan-in, eme Dom Ervoan da Olier, ma welfomp petra eo ann drouz-man. — Beteg ann oter vraz ee'h ejont ho daou, eno e chomaz ar c'hloarek. Servijer Doue a dalc'haz da vont beteg al lec'h ma oa ar relego zantel ; hag eno, en doe kaoz gant unan-bennak. Dom Ervoan a gomze sioul hag humpl, hag egile e oa rok ha krenn he gomz. Ar c'hloarek a deuaz enn he spered ne oa hini all, oc'h ober kaoz gant Dom Ervoan, nemet san Tual e vije ; rak kredin a eure gant-han e oa eet sant Ervoan eeun d'al lec'h ma oa relego san Tual. Hirr e oe ar gozeaden. Sant Ervoan eru eunn

amzer e oe, a distroaz da gaout he gloarek, hag a laraz d'ehan : — groet eo ar peuc'h. —

Hag e-gwirione, e de war-lerc'h ar beure, e oa peuc'het pep-tra. Ann archer e oa bet mac'haniet he dorn, a deuaz da c'houlenn gras digant ar Zant, hag ar Zant a wellaaz d'ehan ; potred ar Roue e oa eet kout, hag eunn diner n'eaz ket gant-he euz ann truach. Gant ann holl e chomaz ar greden stard e oa enn-ze eunn dra-bennag a vurzuduz, hag ouz santelezh ar Zant, hag out-hi hep-ken, e oe staget ar burzud.



PENNAD V.

Sant Ervoan Advokad d'ar bevien.

BEAN 'zo tud a dibab hag ho deuz naon ha sec'hed a lealded, hag ann Aviel ho diskleri evuruz; sant Ervoan e oa gant gwir, unan euz ann dud-ze. Ne oa ket awalc'h d'ehan pleal gant ar prosejo a digouee gant-han, enn he garg a varner enn Eskopti Treger; he weled a read sao-tol o tougen ar gomz dirak barnerien all ar vro, hag he evurusded e oa kaout d'hen ober, kouit a bae, evit ar re e oa ar gwir mad enn ho zu, ha ne oant ket pinvidig awalc'h da baeann eunn advokad. En em roet e oa da difenner ha da dad d'ann intanvezed, d'ar vugale diberc'hen ha d'ar bevien. Aliez e oa hen eo ac'h ee d'ho c'haout da gentan, hag a lare d'he : — me a dougo dorn d'hac'h, abalamour da Doue. — Ho frosejo a gase beteg ar penn, hep nep

koust evit-he, ha pa vije da vont da Rahon, ha zo-ken bete Pariz; ha war dol na rate; rak Doue e oa bepred gant-han.

Er skrid ann enklask, e komzer, — hep kals digoue siouaz — euz a c'houec'h pe seiz prosez harpet er stumm-ze gant advokad ar bevien.

Richard ar Rouz a Dredrez, den a zoare, paour avad, e oa enn breujo gant abad ann Itron Varia ar Relek; ha dre ma oa eur paour keaz, ne oa ket evit heulian. Mont a eure da gad sant Ervoan, hag a laraz d'ehan : — abalamour da Doue, Dom Ervoan, beet true ouz-in; ann abad e zo deut c'hoant d'ehan da lemel ma zamm douar digan-in; n'on ket evit harz out-han, rak kollet eo gan-in, evit laret, ma holl danve; douget dorn d'in da gendere'hel ma gwirio. — Dom Ervoan a c'houlennaz out-han ha mad ha leal e oa he gaoz. — Kredin a ra gan-in eo, eme ar paour dijentil, ha me hen touo, pa vo karet. — Dom Ervoan hel lakaaz da douin, kent evit kemer he gaoz; testo zo-ken a glevaz hag a oa e tu Richard. Neuze e kemeraz he brosez enn

he gark, he gasaz beteg ar penn, hag he c'ho-neaz.

Kemend all a eure e mad intanvez Lenevez euz a barrouz Peurid; ho-man e oa eur Riwal Hardel, uzulier ive e Peurid, hag e felle d'ehan skrapan he liorz digant-hi. — A galon vad e kemeraz c'hoaz kaoz ar c'hlasker bara Kons-tritin, a enep tad Ervoan Hatois euz a Landreger; rak, war a lare Ervoan Hatois; he-unan, ar c'hlasker e oa ar wirione gant-han. — Eur paour all e oa e prosez enep da Olier Arrel marc'hek, euz a barrouz Pleuveur; Dom Ervoan hen difennaz, ha goude eur plede hirr, a deuaz a-benn da blegan ann diou gos-teen d'en em glevet.

Tri bla kent he varo, neuze ne oa ken barner ann iliz; en em gargaz euz kaoz eunn intanvez euz a Louannek, he barrosianez, a eneb eunn den iaouank en doa roet he c'hir ar bersan d'ehi, d'he c'hemer evit he c'hroek, ha na c'houle ken derc'hel d'he gomz. Ann den iaouank-ze, daoust da oad ha da stad zakr ar beleg enoruz, a gane pouil d'ehan, gwasan ma helle; eur fallakr hag eul laouek a re-

gant-han. Breur Per, abad euz a vanati Bear, a oa test a gement-se. Ne jalaz ket Dom Ervoan evit-se; gir na laraz, eur mousc'hoarz a reaz hep-ken. Kaoz ar c'hroek paour a wie e oa mad-mad. Derc'hel a eure d'he difenn, ha da ober kemend'e oa red; hag enn avani n'e doa ket peadra da baeen ar skrido, ec'h eaz hen-unan beteg ann dud a bluen a zelle ann dra out-he, d'ho fedin da ober ho skrido, abalamour da Doue, hag hen ober a rejont. Eur weach all, el lez pe lec'h-varn ann Otro Tourne-min, e tigouee da dom Ervoan difenn, a enep mab ar Prijant euz a Bleuzal, eunn intanvez baour euz a Landreger, hanvet Alis Hamon; eno Advokad ar gosteen eneb a ganaz d'ar Zant eur bern pouillo ar gwasan, Dom Ervoan na laraz nemed evel-hen: na bouillet ket ac'ha-non; kaer ho po; eman ar gaoz vad gan-in.

Ne ket hep-ken e Breiz eo e vije gwelet ha klevet Dom Ervoan oc'h ober he bledeo evid ann dud ezomek; aliez he weled o tont da Dour, dirag Arc'heskob ar gear-ze ha war-eunn-dro a Vreiz enn he fez, da genderc'hel ar zetanso en dije douget evel barner ann iliz e Rahon hag

e Treger, pa felle d'ar brosezerien mont hue-loc'h gant ho breujo; hag evel-se, den kalonek a oa anehan, evit ar wirione hag al lealded vad, euz a varner ec'h ee da advokad diouz ann doareo.

E kear Tour eo e tigueaz d'ehan ober eur plede ar c'haeran, ha siouaz, n'euz nemet-han da vean deut enn hon bede. Setu-han aman gant darn euz he digoueo. C'hoaz eo bet gwelet Dom Ervoan e Tour, er pennad a zo aze arok.

Lenn a rear e tigueaz eur weach all er gear-ze, diwar-benn eunn dimi etre eunn dijentil iaouank hag eunn dimezel; dija e oa bet ar re-man gant ho breujo dirak sant Ervoan barner ann iliz e Treger; mes ann dimezel na blije ket d'ehi barn ar Zant, hag e gasaz he c'haoz d'eul lez-varn hueloc'h dirak barner Tour; sant Ervoan ac'h eaz da heul ar gaoz, hag er veach-ze, e luc'haz kaer he zantelez.

Ann den santel, pa digoueo e Tour, a diskennaz e ti eunn intanvez a zoare, el lec'h ma en doa lojet c'hoaz diagent, hag he c'havaz glae'haret ha digalon-meurbed. — Perag oc'h-

hu ken poaniet, eme ar Zant d'ann hostizez? — Allaz, Otro! eur c'hroek kollët on, ha dis-mantret krenn gant eunn den fall en deuz groet eur plede em enep, ha warc'hoaz, e vin barnet da baean d'ehan daouzek kant pezaour, enn gaou hag heb ho dleout; ha n'on ket evit hen ober, hep gwerzan ma ziegez ha darn euz ma leve. — Itron, eme Dom Ervoan, beet fians enn Otro Doue, ha n'en em c'hlae'haret ket kement-se. Mar d-eo mad ho kaoz, ha mar teurveet fiout e madelez Doue, e chomo ho treo gan-hac'h; rak louzou a zo evit pep drouk, nemed ar maro a ve. Leret d'in, mar plij gan-hac'h, petra eo ho prosez, hag a galon vad me a bleo gant-han, erdra hellin.

Allaz! eme ann Itron, Otro keaz, tremenet eo ann daou viz ma teuaz aman da lojan daou ganfard, gwisket enn marc'hadourien, hag a vec'h deut enn ti, a roaz d'in da evesaat eur zac'hik ler ale'houeet, hag a oa gwall bounner, hag hi ho daou a laraz war-eunn-dro d'in na rojenn ket anehan da hini anhe ho daou, nemed egile a vije gant-han. — Otrone, groet e vo evel ma laret, ha ne oufenn nac'h

na ve bet ar gaoz evel-se. Pemp pe c'houec'h devez goude ; e oann aze war ma dor, pa dre-menaz ann daou den-ze, ha pemp pe c'houec'h marc'hadour all gant-he, e-biou d'ann or. Hag hi da laret d'in : — Ken a vremen, hostizez, ken a vremen, ozét eur goan vad d'imp. — Groet a vo, emon-me, hag hi ac'h eaz war draou gant ar ru. — Distrein a eure unan euz ma daou den, hag hen da laret d'in : — Hostizez, digaset hon zac'h d'in, mar plij, rak ar varc'hadourien all a welet aze hon euz da baeen. Ha me, o vont a fe vad hag hep nep sonj all, a roiz ar zac'h d'ehan ; hen he gasaz gant-han, ha biskoaz aboe n'em euz-han gwelet. Ar marc'hadour all a deuaz enn de-ze aman da noz, da c'houlenn digan-in ha gwelet am boa he genseurt. N'em euz ket gwelet anehan, emon-me, aboe m'em euz roet ar zac'h d'ehan. Neuze e stagaz da grial war boez he benn : Ah ! eme-han, ma zac'h ac'h euz roet d'ehan ; dimanstret on ha paour da wirvikenn. Ne ket hon-nez ar gaoz e oa bet etrez-omp, pa deujomp da lojan d'ho ti. Laret hon boa n'ho poa ket d'hen rein d'ann eil

hep ne vije egile war al lec'h, hag eneb oc'h eet ; ne c'houitin ket da dougen klemm d'ar barner enn hoc'h enep. Enn eur gir berr, dre hucher en deuz kaset ac'hanon dirag ar barner braz, ha touet eno e oa enn he zac'h ler daouzek kant pez aour ha lizero ha skrido talvoudek, pa oe fiet enn-on, ha ken buhon e ver eet gant ar prosez, ken warc'hoaz eo e tlee ar varn bean douget. Ah ! e teuaz gant mignon enoruz Doue, ann Otro sant Ervoan ! Ma hostizez, galvet hoc'h advokad, ma komzin out-han.

Ann hostizez a digemennaz d'hec'h advokad ; he-man a laraz d'ann Otro sant Ervoan doare prosez ann intañvez geaz, evel ma e doa groet hec'h-unan. C'hoant bean war-c'hoaz el lez-varn am euz ; eme ar Zant, ha zo-ken dougen ar gomz evit-hi. — D'ann de warlerc'h, ec'h eaz sant Ervoan dirag ar barner gant he hostizez. Pa oe, dre urz ar barner, galvet ar gaoz, ann Otro sant Ervoan a c'houlennaz, enn hano ann intañvez, gwelet-fas daoulagad he gosteen enep ; diskøet e oe d'ehan ; goude m'en doe gwelet ann den-ze,

ha ma oa bet lennet d'ehan ann doare ma oa ar prosez : rak ne vane ken nemet ar varn da dougen ; ann Otro sant Ervoan a laraz d'ar barner : Otro ar barner, eunn tol neve hon euz da disklerian dirag hoc'h hag a droc'h hag a dor krenn ar prosez-man, hag ann tolze, setu han-aman : kemend e deuz ann difennerez groet, a drugare Doue, o klask hag o furchal, aboe divezan gwech eo bet aman, mac'h eo bet kavet ar zac'h ler-hont a oa bet fiet enn-hi, hag he digas a raio d'hac'h da welet, adalek, hag enn de ma vo roet urz d'hen ober.

War-ze e c'houlennaz ann advokad enep ma tigasje ar zac'h eno raktal, anez na dalvee ket kemer lavar euz ann dra neve-ze, evit dilerc'han diskleriadur ar varnedigez. Neuze a laraz sant Ervoan : — Otro ar barner, ann dra gwirion hag anat, tamallet d'ann intañvez e komzan evit-hi, eo ma oe difennet out-hi gant ann den-man hag he genseurd, o rein ar zac'h ler d'ehi, n'he roje d'eunn eil anhe, nemet war al lec'h e vije egile ; ha gant-se d'ar goulenner a zo aman da digas he gen-

vreur aman ive, ha pa voint ho daou, a greiz kalon e roio ann intañvez ho zac'h d'he ho daou. Ar barner a dalc'haz da ze, hag a laraz na dije ann hostizez da diskoe ar zac'h, nemet pa deuje, ha pa vije ann daou genseurd war-eunn-dro.

Ar goulenner, o klevet ar varn-ze, a stagaz da grenan hag a iaz liou ar maro enn he gerc'hen ; spontet e oe kemend hini a oa eno. Ar barner, dre disfians, a reaz he dastum er prizon, ober he brosez, hag a gavaz e oa ar c'hanfard-ze eur skraper, kaset gant-han eur zac'h ler leun a goz houarn, evit kilian ann hostizez. Dre-ze e troaz ar gaoz a eneb ar goulenner, ha ken tost e oe dalc'het war-n-ehan, ma ansavaz, ha ma oe, war zetans ar barner, tri de goude, staget-ouz ar groug ha taget e kaer Tour. Hag ann hostizez a iaz gwenn ac'hane, bennoz Doue da sant Ervoan.

Ho ! gwellan advokad e oa sant Ervoan ! Roue advokaded he amzer, hag enn hon amzer-ni, ha kavout a raed he bar ? Nebeud a zo anhe hag a garfe tro ken prim, evit divec'hian ar c'hroek ann eeunan, hag ar muian di-

damall. Mes ive labour vraz ha studi boaniuz a oa koustet da zant Ervoan, kent evit kaout kemend anaouedegez el lezenno, eur spered kel lemm ha dam-diviner; birvidig e oa he ine gand ar garante en doa evit al lealded. Nann, ne oa ket awalc'h d'ehan bean groet studio hirr ha poaniuz e Pariz hag enn Orlean; enn desped d'he holl reuzio enn he garg a varner ann Iliz hag e Rahon hag e Treger, e kave c'hoaz amzer da rein d'al levro a zelle ouz he dleado, hag eunn testen a gement-se a weler el levro en deuz lezet, hag a oa karget a verko skrivet war ar gwenn anhe gant he dorn he-unan, hag a zo leun euz he spered.

Setu-aze bue sant Ervoan, hag he obero evel den a lezen ha barner. Setu-aze ann den-ze gant he skiant gan, ha spered Doue evit studian ar c'haojo, anaoud ar gwir diouz ar gaou; setu-aze he lealded vad, evit na zello kammed ouz doareo ann dud, na zelaouo ouz peden den, nemet da dennan ac'hane-sklerijen da varn ervad ar proseo; setu-aze he garante da unvanin ar prosezerien, kentoc'h evit d'ho barn herve krisderi al lezenno; setu-

aze he breder, he nerz kalon da vont da heul ar c'haojo en doa barnet, dirak brasoc'h barnerien, daoust d'ar beacho a vije da ober, ha d'ann dispinio braz a-deuje d'ehan; setu-aze he aket braz da ober he garg advokad, hep kammed en em gargan diouz nep kaoz na vije mad. Enn divez, setu-aze eur gwir difenn d'ar bevien, d'ann intanvezet, d'ar vugale dibere'hen, ha d'ar re holl a chome hep skoazel, pa na vije ket barner d'he, na karget anhe; kement-se holl dre garante Doue, evit enor Doue, ha brasan mad kristen he nesan.

Labouro hon spered, erdra hellfomp, da ober eur barner diouz ar gwellan, ne oufemp ket he welet gwelloc'h evit ne d-eo sant Ervoan; eur skouer eo enn Iliz Doue, da vean lekeet dirak daoulagad ha barnerien hag advokaded, d'he da heulian enn ho stad hag enn ho obero.



PENNAD VI.

Sant Ervoan Person.

He aket da brezeg ha da ober he holl dleado all.

MAR d-eo dleet d'ann dud a lezen sellet sant Ervoan evel ho fatrom, hag he heulian evel ho skouer, evit bean groet, e-pad eunn nebeut blavejo, ar garg a varner, ha dre garante, ann hini a advokad; ar re eo bet he holl vue tremenet enn ho labourio, goude trein kein da gargo hueloc'h, me a fell d'in laret ar veleien lekeet e-penn ar parroujo diwar ar meaz, hag a hanver personned, ar re-ze ispisial eo ho deuz d'he gemer evit ho skouer hag ho skoazel, enn ho obero ken poaniuz evit-he, ken talvoudek d'ar bobl; hag ann holl c'hraso ho deuz ezom, ann dro gwirion d'ho c'haout, a ouzont ervad eo hen enorin hag heulian enn he vue zantel,

hag ho goulenn ouz Doue enn hano ha dre dellido sant Ervoan.

Eur manac'h euz a gouend San-Fransez Gwengamp, breur Morel a oa he hano, o vean he-unan penn, e Kervarzin gant Dom Ervoan e oa klan neuze, a c'houlennaz out-han pe da goulz ha penoz e oa d'ehan bean deut da gemer ar vue zantel ha kri a weled anehan o vevan enn-hi. Gant kalz a boan e plegaz ar Zant da ansao out-han, e oa bet troet krenn e-keit ha ma oa barner ann iliz e Rahon. Neuze ec'h ee da gentelio eur manac'h santel a oa er gear-ze, e kouend bugale San-Fransez, ha diwar ar c'homzo kaer a glev e gant-han, e teuz da disprizout treo ann douar, ha da danvan treo ann env.

Aliez e save enn-han he-unan brezel vraz etre ar spered hag ar c'hory; hag eiz vla e padaz ar brezel-ze. E naoved bla, e oe trec'h ar spered war ar c'hory, ha dre he diliad e stagaz ar Zant d'hen diskoe; e dekved bla, o sentin krem ouz ar spered, e tiwiskaz he holl diliad pinvidik, hag ho roaz d'ar bevien dre garante Doue. — Hag evit gwir, ken-

tan tra a oe gwelet, eo ar c'hrec'hen blevek distaget euz ar saeo kaer a re ann Eskop d'ehan, abalamour d'he garg a varner, hag e teue er meaz, hag e valee, hep na oa ar c'hrec'hen enn dro d'ehan; aluzono en doa groet gant-he, ha war digareo all, e lare e tremene-hep-ze. Goude-ze, d'eur beure, e oe gwelet o vont e klandi Landreger, ha gant-han eur zae dindan, eunn all war hon-nêz, hag eur vantel glaz-ru war var holl, gant eur c'habel henvel mezer war he benn, hag ar c'hrec'hen blevek o vevennin ann holl bejo diliad-ze; enn he dreid e oa eunn heuzo.

Nebeut goude, e teuaz er meaz ar c'hlandi, hep na kabel, na zae, he dreid enn noaz; o vont a red d'he vaner Kervarzin, hag eur c'horn euz he vantel war he benn, e-lec'h ar c'habel. Ar c'habel en doa roet d'eur paour mac'haniel; d'eunn all krec'hen he wisk, he zae d'eunn drived, hag he heuzo a oa eet e treid eunn dall. A c'houdevez beteg he varo, evit holl wisk, e kemeraz eur zae dindan gant divrec'h hirr ha ledan, ha divouton, hag eur vantel gant eur c'hab, hirr ha dister-meur-

bed, groet holl a vezer fetiz Leon, hag a oa ar walen anehan evit eunn hanter-real. Enn he dreid e vije eur boto ler teo, prennnet gant koreo, ha nesan d'ehan, eur roched lien stoup euz ar rustan.

Dre ma en em wiske sant Ervoan ken paour ha ken rust, ec'h eo bet skrivet gant meur a vanac'h euz a urz San-Fransez, en doa hon Zant lekeet he hano e roll braz Trede-Urz San-Fransez. Eunn dra zouezuz eo gwelet ne ve ket kavet ann disteran merk, e nep lec'h, euz eunn digoue ken enoruz da Urz Sant-Fransez, nag e komzo hini ann testo klevet, kent disklerian Ervoan Helouri Sant, na zo-ken e testeni Breur Gion Vorel, manac'h e kouend ann Urz-se e Gwengamp. Hep diskred krenn, e larer ne oa ket gwisk sant Ervoan hini ann Drede-Urz; sant Ervoan e oa gwenn he diliad; re ann Drede-Urz a dro war ann du; sant Ervoan e oa he voto war goreo, e-lec'h solio dienep; kouriz sant Ervoan e oa glan, ha na oa e nep stumm henvel ouz korden diskiblien Sant-Fransez. Beet pe veet, diliad all kemeret gant ar Zant, war a lare he-unan,

a verkaz e oa deut d'ehan eur galon hag eunn
ine all ne oant diagent, hag ive ann amzer ma
savaz da gen braz santelez, ma krede gant tud
he oad; ne oa den par d'ehan, hag e-kichen
he vue, ann holl bueo zantel e vije gwelet leun
a sio enn-he, ha ma lare unan ann testo, gal-
vet war he gaoz, na vije ket bet, ha pa vije
roet kant teod d'ehan, evit kountan ann holl
obero mad en doa groet sant Ervoan, e-keit ha
ma oa bet war ann douar.

Er c'houls-ze e oa person e Tredrez. Ne
ouzomp netra distag euz ar pezh a reaz er bar-
rouz-ze; kredin a heller koulskoude na oe ket
eiz vla eno, hep na deuz gant-han eunn ne-
beud euz ann tolio kaer en doa da ober di-
vezatoc'h, e Louannek, hag ho deuz meur
a dest komzet anhe. Er bla daouzek kant
pevarzek ha pevar-ugent mac'h eaz Ervoan
Kervarzin da berson da Louannek, e oa ar
barrouz poblet ha bras-ze, muioc'h a gorbou
evit a c'hreun mad enn-hi. Evel morzet e oa
ann dud evit ar mad enn-hi; ne oa bue enn-he
nemed evit ho c'horv hag evit ann douar. Hag
adalek ma oe treid sant Ervoan enn-hi, raktal

e krogaz ar Zant da brezeg d'ann dud di-
henchet-ze komzo Doue kemend ha kement,
mac'h eaz abred war wellaat ann nebeud a oa
c'hoaz a dud vad ha fur enn ho zouez, ha war
hent ar zilvidigez ar bec'herien hag ann dud
fall a oe goneet gant he brezegenno ha mui
c'hoaz gant he skouerio zantel. Bean a oa
hiniennno diroll hag a wall skouer, uzulierien
anaveet gand ann holl, hag a blegaz da ober
pinijen, da lezel ho bue dizurzet, o lakaat
anhe da iun diwar bara ha dour, da dioue-
raat pep diliad lien, ha da ober pire'hirinacho
hirr ha poaniuz. Eur galloud ar brasan a oa
he hini war-n-he holl, dre he skiant, he gen-
telio sao tol, he zantelez hag he obero mad.

E-mesk ann ditroio burzuduz, e lekeed hini
eur Jofroi Krabanek, bet arok eunn den al
lousan, hag anaveet gant ann holl evit ar pezh
a oa. Gwell aliez e oe klevet Dom Ervoan ouz
he damall hag alian da drein diwar ar vue
ac'h heulie. Eunn devez koulskoude, Jofroy
Krabanek a roaz he c'hir d'ar person santel;
derc'hel a eure, hag a c'houdevez, e-pad he
vue a oe hirr, rak e trizek kant tregont e

oa beo c'hoaz, e oe eunn den mad, ha fur he obero.

Bean a oa c'hoaz e Louannek, eunn di-jentil pinvidik, Derien Kersilvestr, hag a dremene evit eunn den ar fallan e-kenver ar groage hag ar merc'hed; eur muntr zoken a damalled d'ehan. Ken brao e oe troet ann den-ze gant Dom Ervoan, mac'h eaz da Rom war droad, o welan d'he bec'hejo, hag oc'h ober pinijen hed ar veach. Pa distroaz d'he barrouz, e oe braz ann aluzono a re d'ar bevien, ha bemde, beure mad, a lare ann oviz, evit-han da vean dimeet.

C'hoaz ouz-penn e komzer euz eur paour keaz kloarek — Autret Rimenton e oa he hano — hag e oa he vue pell braz da vean diouz he stad. Hen-nez ive, distroet gant prezenno person Louannek, ac'h eaz anehan he-unan da Rom, ha groet he veach gant-han, bepret war ali Dom Ervoan, e oe savet d'ann urzo zakr. Pél e vevaz goude-ze, roet dalc'h-mad d'ann obero zantel, hag he holl c'hoaraizo a dremene, o iun diwar vara ha dour.

Euz a brezegeerien he amzer ne oa hini par

da zant Ervoan dirak daoulagad ar bobl; herve lavar unan euz ann testo, evit unan ac'h aje da glevet eur beleg all, ann Eskob he-unan, ec'h aje tregont ha tremen, da glevet person Louannek. Hag evit gwir, ganet gant mouez ha teod kaer, ar belek santel e oa enn-han holl doareo ar brezegeerien vad. Dre he studio braz e oa deut a-benn da rein digor ha kresk d'ann danve mad a oa enn-han. Istr evit ma oa ganet enn eur reng huel — ar pezh a roe muioc'h a boez d'ehan da gomz ouz ar bobl. — Dom Ervoan a oa ive eunn den kaer ha neuet euz ar gwellan. Gwelet anehan a oa awalc'h evit bean douget d'hen enorin; eunn tan e oa enn he daoulagad, hag a verke punnez he ine hag he gorr, hag a droe he holl zelaouerien d'he garet, ha d'en em stagan ouz he gomzo.

Eskop Treger, pa re tro he eskopti, a roe urz da zant Ervoan d'hen heulian dre holl, evit prezeg, dirag-han hag evit-han, komzo Doue d'ar bobl. Bepred war droad e vije ar Person santel oc'h ober ann troio-ze, evit-han da gaout, anehan he-unan, peadra da vean eur

mac'h mad dindan-han, ma ne vije ket bet ken troet d'en em ober bihan hag izel : ha pa vije kaset d'ehan gant ann Eskop eur marc'h otro euz he varchosi, ar Zant hen mire evit he gloarek ac'h ee war he gein, hag hen a gerze enn he gichenn, evit hellout prezeg hed ann hent; rak ann hini en doa klevet anehan eur weach, a oa chadennet ouz he gomz, hag ac'h ee war he lerc'h euz eur barrouz d'eben, evit he glevet a-neve.

E de unan ar pardonio braz a zo anhe c'hoaz — siouaz hep mar — enn eskopti Treger, e tlee ar Zant prezeg; diredet e oa eur bobl ar yrasan a bep tu, evit klevet prezegen Dom Ervoan. Daro e oa da binial er gadeur, pa dremwelaz enn iliz daou vanac'h a urz San-Dominik; ne gredaz ket e vije mad d'ehan prezeg, hag hi eno, hag he reng a lezaz gant-he. Hag ann dud a oa eno, hag a oa enn gortoz da gaout prezegen ar zarmoner a blijed d'he dreist ar re all holl, e oe daro d'he dirollan, ha red e oe da zant Ervoan implian he holl c'hal-loud war-n-he, evit ho flegan da zelaou sioul prezegen bugale San-Dominik.

E brezonek pervuian eo a brezege, e latin aliez, e kuzulio ann dud a iliz, ha kammed e galleg d'ar bobl; ne oa ket evit hen heulian mad awalc'h enn-iez-se, mui evit n'eo c'hoaz ebremant.

Kent evit kregin enn he brezegen, e weled anehan o pedin kalonek, war he daoulin ha jun-tret he daouarn, hag a-wecho, pa zave enn he za, e vije daero holl he daoulagad. Aliez, e kreiz he zarmon, e weled daero c'houero o redek gant he diour jod; diwar-ze ec'h ee tener ar re galletan, hag ann holl e save difronk enn iliz gant-he.

Ann Abostol santel kammed na skouize; enn eunn de e prezege e liez parrouz, ha tammo mad a hent etre-he; bepred e vije war droad, ann aliesan war iun, evit kalz tud o c'hoantaat ann enor d'he gaout ouz ho zaol; rak ken kalonek hag aketuz e oa holl gant al labour zantel hag abostolik da brezeg, ma anskoae dibrin hag evan, ha ma vije d'ann noz, goude prezeg hed ann de, ken dinerzet ma ne vije ket, koulz eo laret, evit derc'hel enn he za. Digoueet eo d'ehan, o vont euz a Ger-

varzin d'ar beure, komz, enn eunn de, er Roc'h, enn Pleuzal hag enn Plouek Pontreo; enn eunn devez all, e prezege enn iliz vraz Landreger, enn Tredarzèk hag enn Pleuveur. Ouz-penn da ze, d'eur gwener ar groaz e prezege gloazio Hon Zalver e Pleuvihan, hag a lared, e-mesk ar bobl, e oa hon-nez ar seizved gwech e komze e de-ze; ha petra 'ta? Goude ar brezezen divezan-ze a reaz e Pleuvihan, e oa ken torret he gory, ma ne oa mui evit en em dougen, ha ma oe red d'ehan kemer harp war brec'h he goz kendiskibl, Ervoan Tregoezel, a oa deut da chom e parrouz Pleuvihan.

Ne ket enn eskopti Treger hep-ken, enn eskoptio all hag ispisial enn iliz vraz Kemper hag e Kerneo holl, e prezege ive hon Abostol santel, enn ilizo, war ann hencho, gant grad vad ann Iskibien. Noblanz Pestien eo hen sachaz enn Kerneo; kalz e enorent ar belek santel, ho maner Gwezet a oa er vro-ze, ha mado braz all.

Er bla trizek kant daou, eur zadorn, e miz Est, e oa Dom Ervoan o vont war droad, gant noblanz Pestien ha re all, euz a vaner Gwezet

da gear Kemper, e pirc'hirinach enn enor da zant Ronan.

War ann hent e welaz Dom Ervoan e oa skouiz ann itron Pestien, hag e chomaz enn eur c'hroaz-hent da brezeg komzo Doue. E-keit ha ma oa gand he brezezen, e tigouez d'eunn den a vrezel — Otro Koad-Pont a read ane-anehan — tremen dre eno, hag eunn di-jentil all gant-han, hag hi ho daou war varc'h. Ann dijentil-man a diskennaz diwar he varc'h, den a fe a oa anehan, da zelaou ar brezezen zantel. Ann Otro Koadpont, nebeut c'hoantek da glevet sarmon, a dalc'haz gant he hent, ha sant Ervoan a laraz a vouez huel : — C'hoel hen-nez a zo o tremen aze; leun eo he galon a izinio diaoulek. Mar bije bet aman peder blac'h penno skan, n'en dije ket c'houtet da chom gant-he; ha da glevet gomz Doue, n'euz ket prizet hen ober; pedin a ran Doue ma raio evit-se pinijen enn he gik, kent evit ma varvo. — Ac'hanta ne oa ket tremenet ar pempzek te, ma oa ann Otro Koadpont skoet a baralizi, ha gouryeet war he vele, ha tremen eur bla e chomaz tachet war-n-ehan. E-keit-se, e

teuaz eunn niz d'ehan da ober bizid d'ann Itron Pestien, hag a c'houlennaz out-hi hag hi n'anaveje ket eul louzou-bennak ouz kleved he contr. — Eo, a laraz ann Itron e teuaz enn he spered ha komzo sant Ervoan hag ann holl digoueo all e oa bet test anhe, hag hen aliaz d'en em westlan da zant Ervoan. Redeg a eure ann niz da laret ann treo-ze d'he contr. Ar c'hlanvour en em westlaz da Doue ha da zant Ervoan a oa maro war-benn neuze : he c'hira roaz da vont war ve ar Zant gant he gory he-unan ; mont a eure, hag eno e teuaz iac'h.

Enn eur veach a reaz ar Zant enn enor d'ann Itron Varia Kintin, gant Derrien Koad-saliou, dijentil a Germaria-Sular, hag eunn toullad all euz he barrisioniz, ne baouezaz ar Zant da alian ha da brezeg he genbeacherien hed ann hent, ha kemend a eure, ma teuaz unan anhe, Tomaz Kerrimel ha ne oa ket, war a larer, gwerc'h he daouarn a uzulierezo, d'en em ober manac'h enn Abati Bear.

Goude holl ar Zant a brezege ken aliez ha ma kave tud d'he zelaou. Er parkeier, e stalio labour, e-kreiz ar vichererien, d'ann holl ha

dre holl, da unan kouls ha da galz, e oa he galon holl drugareuz digor da rein konfort, sklerijen ha dudi. Eunn devez e oe gwelet enn eur c'hoz ti bihan paour, o laret komzo santel ann Otro Doue d'eur c'hroek koz, hanvet Hilion, glac'haret braz da ne ouzonn pectore koll e doa neve c'hroet. Evel-se e kerze Dom Ervoan Helouri war wir hent ar Pastor mad, hag ankoaet gant-han he wiegez hag he gomzo kaer herve ar bed, e tiskenne beteg ann dud izel ha bihan. — Nag a freuz ho doa komzo eunn den hag e prezege holl enn-han. — Rak-se ar Vretoned na reant anehan nemet *belek santel Doue*.

Ne oa ket nebeutoc'h aketuz evit ar re glan, evit e-kenver ar re iac'h. Adalek ma tie goud e oa klan hini pe hini enn he barrouz pe war dro, raktal e rede d'he welet. Dre he gomzo santel ho lakae da govesaat, ha da digemer ar zakramancho, hag a gase ann Otro Doue d'he enn eur c'haer a glozennik arc'hant a louge dre enor enn he c'houk, bet d'ehan gnt ann itron Rostren. Nouin a re he glanvouerie pa vije red, ha goude bean ho c'hreveet

gant siel sakr Jezuz-Krist, e tiskoee d'he n'ho doa mui aon da gaout rak ar maro. Neuze evit ober ann diou aluzon, hini ar c'horv gant hini ann ine, e c'houlenne e ti ar bevien glan hag ezom a oa eunn dra-bennak, hag ho fede d'hen disklerian heb aon, rag a greiz kalon hen roje d'he.

Ar belek santel e krede gant-han e oa mouez Doue he-unan eo hen galve, dre he vadelez, da benn-gwele ar glanvourien, ha gant netra e-bed, ne vije distroet diwar eunn dever a gen braz karante. Eunn devez e Landreger, e tremene er ru ec'h eo hec'h hano hirie, evel breman zo pemp kant tri-ugent vla, ru ar glujiri, gant eur bourc'hiz braz euz kear; eunn den a deuaz d'ho c'haout hag a laraz : — Dom Ervoan, abalamour da Doue, deut da govesaat eur paour klan a zo daro da vervel e ti-man. — Hag hen raktal da distrein diwar he hent, ha da vont e ti enn eul laret : — Mar souzfenn diwar eur c'hlanvour, e tizent-fenn ouz Doue. Ken prest e oa Dom Ervoan da zelaou he barrisioniz e kadeur ar binijen, harive da rein d'he, gant ar brasan fe ha doujan,

sakramant ann Oter ha sakramancho all ann Iliz. Aliez e vije gwelet beuet enn he daero; tener-meurbed e oa war zempladurezo ha glac'hario he nesan, hag ispisial war ar pe-c'hejo a ansaved out-han er govizion; ha gant he daero a garante, e tigore kalon ar pec'her hag he wakae, beteg hel lakaat he-unan d'he dro da skulian daero a c'hlae'har hag a geuz d'he dizurzo tremenet.

Kemend hini a dostae d'ehan, ho gonee, ho stage holl out-han, gant a vihan hag a zantel e oa da welet, hag e oa e-gwirione. C'hoant a vije bet da chom bepred gant-han, hep kammed ken pellaat diout-han; bean a oa enn dro d'ehan evel eunn ezen a c'hras hag a vadelez, hag a re vad d'ann holl chom enn-hi, hirran ma hellent.

Ar Zant a lekee kement-se da dalveout, evit sevel d'ann huelan santelez ann ineo dibabet hen kemere evit ho ren.

Eunn devez, eunn divroad, leun a c'hoant d'ehan, diwar vrud vad ar belek santel, d'he welet ha d'he anaout, a deu da Louannek, hag a govesa gant-han. Goude he govizion, ann

den-ze — war he lerc'h eo-hel larer aman — e teuaz enn he galon eur glac'har euz he bec'hejo hag eunn doujans Doue souezuz, hag a stagaz da welan erdra a helle; ha war-eunn-dro da garet sant Ervoan gant eur garante divuzul; ha netra all ken na c'hoantaaz nemet kerzet war he roujo ha bevan evel-t-han. E-pad daou vla, e teuaz aliez da welet mignon he ine da Gervarzin ha da Landreger; hag eunn devez, war ann ali a roaz sant Ervoan d'ehan, n'en doa ket tro welloc'h ha diriskloc'h da ober he zilvidigez, evit ne oa mont enn urz bugale Sant-Fransez, e roaz ann den-ze he hanv war roll soudarded ar baourente hag ann disterved.

Aliez e prezege a enep pec'hejo ar c'hik, hag a uz d'ar sio mad all, e veule meurbed, gant he gomzo hag he skouerio zantel, gwer-c'hded ar galon ha dinamded pe purete ar c'horv.

E kear Landreger e oa diou baourez, kollet a enor, Alis ha Rodelin — Rodelin ann Iliz a read euz ho-man; — divezatoc'h e vijert hanvet ho diou C'hoarezed a urz sant Ervoan,

rak ho distroet en doa d'eur vue fur ha zantel.

Kalz a dimezeled a reng huel — enn ho zouez ec'h hanved Azelisia c'hoar d'ann Otro Mur, — a lekeaz da drein kein d'ar pinvidikan dimio evit chom gwerchezed. Priejo zo-ken a vevaz, diwar he gentelio zantel, evel breur ha c'hoar. Eunn Alan ann Thomaz hag he c'hroek ho doa, war ali ar belek enoruz, groet ar gwestl-ze, hag hen a douaz ho doahan, hen hag he c'hroek, miret gant aket e-pad pemp pla war-n-ugent war-dro. Ken brudet e oa he wiegez hag he zantelez, ma teue ann dud ar brasan, evel Itron ann Otro Iann Pestien, da glask he alio, ha da fellout d'he he gaout da govezour, ha da rener ho c'houstians.

Gwir zo-ken eo laret en doa bet graso dispar evit ren ann ineo; e oa en-han eur skelrijen zouezuz, hag a roe d'ehan anaoudegez euz a donan distroio ar c'halono. Arc'heskop Tour en em gave e Landreger; oc'h ober lie dro e oa; eur plac'h hag a oa koz vatez da Dom Ervoan, he bedaz da c'houlenn ouz ann Arc'heskop eunn nebeut graso evit ar manac'h

klostret, Denez a oa he hano, a veve enn eul lec'h distro tost d'ar Roc'h. Sant Ervoan, o sellet ouz ann env, a chomaz pell evel enn peden, ha neuze e teuaz gant-han: — Ar manac'h-ze en em daono; re e plij ann ar c'hant d'ehan. — Hag evit gwir, goude maro sant Ervoan, Denez a lezaz he lec'h-diwall, hag en em dolaz d'ar bed.

Enn tu-hont d'ar sklerijen-ze da welet meur a dra kent evit ma c'hoarveent; hag evel ma c'hoarvejent, Doue a enoraz c'hoaz, e stumm all, santelez ha nerz kalon he zervijer; ha petra-bennak mac'h eo war ve sant Ervoan eo e oe gwelet he vurzudo stankoc'h ha muioc'h skeduz — burzudo hag hel laka e renk ar zòuezuzan burzuderien — enn he veo zo-ken e zo eunn nebeut tolio dispar, hag e oufer ho zellet evel burzuduz, hag a dougaz ar bobl da gredin mui-ouzmui e oa Dom Ervoan gwir den Doue enn ho c'henver. Setu aman eunn toullad anhe, da glozan ar pen-nad-man. Ar re all a gavo ho gwir lec'h er pennado a deuio war-lerc'h.

Eunn tan-gwall a oa o tevin ti eunn Hamon

a Louannek. Sin ar groaz a reaz ar Zant war ann ti-ze, en eul laret: — Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel; neuze e tolaz eunn nebeut takenno leaz war ann tan, ha raktal e varvaz ann tan.

Dom Ervoan a oa o veachin war droad gant Hamon ar Berr he vevel. Ster Lev a oa da dremen, ha beuet e oa ar pont gant ann dour braz. Dom Ervoan a iaz enn dour; mes gant nerz ann dour-red e oa groet, e daou benn ar pont, daou doull ken don, ma ne oa den e-bed evit tremen diriskl. Kregin a reaz dom Ervoan e dorn he vevel, hag he sach a eure d'he heul; neuze e reaz sin ar groaz war ann dour, ha raktal ann dour a rannaz hag a zouzaz, hag eaz e oe mont war ar pont. Goude bean treuzet ar pont, Dom Ervoan a reaz a nevé sin ar groaz, hag a rannaz ann dour adarre, hag ann daou veacher a dapaz ann tu all hep nep drouk. War ann heur, e stagaz ann dour da redek evel arok; Hamon ar Berr a chomaz eno evel eunn den batet, hag e teuaz enn he spered e oa Doue gant he Otro, hag a re burzudo enn he genver.

Er bla trizek kant unan, eunn den euz a Goatreven, hanvet Ervoan Kergwezoned, en doa gret marc'hat, diwar he dispin ha risklo, da ober ar Pont-Losket, war hent Landreger da Lannuon. Siouaz d'ehan, ar c'hilvizien, o kempenn ar pejo koad a dlée mont er pont, a oe ken diwiek pe didu, ma troc'hjont ann treusto re verr; kaer e oa ho mentan peder ha pemp gwech gant tud anaoudeg el labour-ze; eunn hanter troatad re verr e oant holl, ha barnet e oejont da chom er meaz, evel divad krenn. Ann ijinier a oa eur gwall dol hen-nez evit-han, hag a wic'he, hag a c'hounare a eneb ar c'hilvizien, pa digouez, e-mad ar paour keaz den-ze, da Dom Ervoan mad tremen dre eno; kemer a eure ar Zant true out-han. Goude bean groet eur beden domm da Doue, e ventaz he-unan ann treusto, ha daou droatad hirroc'h e oejont kavet holl. Dindan daoulagad eunn toullad tud eo e c'hoarvez ar burzud-ze; maro e oa darn anhe war-benn ann enklask; Herri Kergwezoned beleg, mab ann ijinier reuzeudik, hag Olier ann Teriat euz a Landreger, a douaz ho daou, holl digoueo ar

burzud, enn testo hag ho doa-han gwelet gant ho daoulagad ho-unan.

Daou pe dri bla kent he varo, e klevaz sant Ervoan e oa enn Treo-Tregignek, tost awalc'h da Louannek, eunn den hag a read Alan ar C'hoz anehan; hag a lared e oa tree'het gant ann diaoul. Hag evit gwir, skoet en dije gand ann dud all, mar bije bet evit ober; diframman a re he diliad beteg ho lakaat e drulio; euzuz a grie, ha kammed na gouske. Gwech ha gwech all, en em rulie war ann douar, ha war boez he benn e teue gant-han: — Perag am foaniez-te, diaoul? Diaoul, perag am foaniez-te? — Enn he di he-unan e oa bet red hen dere'hel dastumet dalc'h-mad; he voed a dremenet d'ehan dre eur prenest bihan: nebeud a debre, hag aliez he vara a vastare gant he gac'h, hag hen debre goude. He-unan a lare e oa enn he gorr eunn diaoul hag a gomze out-han. Sant Ervoan a gasaz Ervoan Auspis, he gloarek, da gere'hed ann den keas-ze, gant urz d'hen digas d'ehan. Ar paour-ze, diagent ken diboell, a deuaz war he lerc'h, ken sioul hag eunn oan, ha pa oe

eru enn iliz Louannek, e c'houlennaz ar Zant digant-han : — Ha gwir eo e zo eunn diaoul enn-oud ? — Ia, eme-han, gwir eo-ze, hag aliez a vourreo ac'hanon hag a gomz ouz-in ? — Lakaat a eure sant Ervoan anehan da govesaat, ha goude hen kasaz d'ar presbital, ha dirag he gloarek, meur a dra a c'houlennaz digant-han, ha dreist holl, ha komzet en doa c'hoaz ann diaoul out-han. — Ia, a laraz ann den, ha gourdrouzo braz en deuz groet d'in, enn eul laret : Perag e teuz-te digaset ac'hanon aman ? Gwaz d'id-he, fenoz ! Gwaz d'id-he, fenoz ! Te a vo tenn war-n-oud, fenoz, da vean ma digaset aman. — Laret a eure sant Ervoan d'ann den trec'het : — Lekeet e vo ar gaou enn he c'heno ; he eo hen paeo, ha na vo ket c'houi ; breman e tebrfet eunn tamm, ha fenoz e kousfet em-zi. — Da noz e reaz ar Zant ober eur gwele, tost d'al lec'h ma kouske he-unan ; dour biniget a strinkaz war ar gwele ha dre ann ti ; hag aviel sant Iann ha pedenno all a laraz a vouez huel. Neuze e reaz d'ann den trec'het mont da gousket, hag hed ann noz, e chomaz he-unan war

ar bale, o lenn hag o pedin. D'ann de war-lerc'h, e c'houlennaz ouz ann den keaz, hag eet mad e oa bet ann noz gant-han ? — Oh ! ar c'haeran, a laraz, ha tri bla'so, n'em boa bet noz par d'ho-man. — Ha komzet en deuz c'hoaz ann diaoul ouz-hoc'h, eme sant Ervoan ? — N'euz ket, a laraz ann den ; enn enep, eet eo kouit diouz-in. — Trugareket 'ta Doue, evel m'hen trugarekaan ma-unan, e teuaz c'hoaz gant ar Zant. Eet breman d'ar gaer, groet obero mad, eet aliez d'ann overn ha d'ar zarmon, roet ann aluzon d'ar paour, bet eunn den mad, ha miret gourc'hemmenno ann Iliz, gant aon na distrofe ann diaoul enn-hoc'h, ha na ve groet gwaz d'hac'h evit beteghenn. —

Raktal ec'h eaz ann den enn he dro, gwelleet d'ehan ha frankeet krenn war-n-ehan. Pempzek vla e vevaz c'hoaz goude bean bet pareet, ha biskoaz mann na deuaz ken euz he drouk d'he gae.

S

PENNAD VII.

Karante sant Ervoan.

PENOZ oufe eunn den laret e kar Doue na wel ket, ma ne gar ket he nesan a wel e peb heur ! Aboe ma eo deut ar c'homzo pouner-ze da wall-vrudan ann Ipokrizi n'e deuz karante nemed evit-hi hec'h-unan, karante evit ann nesan a zo bet sellet bepred, enn Iliz gatolik, evel merk anat gwir karante Doue enn eur galon. E stumm pe stumm, eo bet ann holl Zent, evel Jezuz ho mestr, madobourrien ann dud all, bete sant Visant a Baul e kredfe eunn den a ve bet karget gant Doue da urzan, kouls eo laret, ar garante barz ar bed. Diagent ar Zant-ze, e zo' nebeut d'en em c'hortoz da gavout na tier, na breuriezo savet evit ann obero a garante. Enn amzerio a fe ec'h ee pep-hini gant he benn hag he galon he-unan; ar fe a zo deut da vihanaat, siouaz; ac'hanta, diner ann den dife a deu aluzon ar

garante gristen, o tremen d'ar paour dre daouarn ar gristenien vad en em garg d'hen rein.

Sant Ervoan a zo bet eur skouer zouezuz euz ar garante a labour hec'h-unan-penn, a ro kemend e deuz, hag en em ro hec'h-unan. Dija, hag adalek pajenno kentan al levr-man, eo bet gwelet ar Zant, bugelik c'hoaz, o lemel diwar he voed, da rein d'ar bevien; o westlan leveo he garg a varner ann iliz da obero a vadelez; er pennad man, e fell d'in das-tum, evel enn eunn tronsad, obero he garante ken bruzuduz, ar re a estklammaz kement tud he amzer evel kaeran perlez a zo er gurunen lugernuz lekeet gant ann Iliz gatolik war he benn, pa e deuz roet anehan, d'he bugale evit he enorin, hag heulian he skouerio. Enn he galon e oa evit pevien Jezuz-Krist eur garante divuzul; euz ann env e teue d'ehan, hag enn he disteran obero en em diskulie.

Mar bije o vont gant ann hincho hag ar ruio, izeleet he daoulagad ha dam-guzet dindan he gabel, e stoue humbl da gemend-

hini a gave ; pa digouee avad eur c'hlasker bara, e oa donoc'h c'hoaz he stou. Aliesoc'h e vije kavet e-mesk ar bevien, evit e-touez ar binvigen. Biskoaz da baour ne oe gwelet o tinac'h ann aluzon. Mar kaye war he hent bugale, intanvezed pe dud ezomek all, ar re-ze a lare d'he mont d'he di, ha lod a roe d'he euz ar mado en doa bet digant Doue. Pe e vije enn he bresbital Louannek, pe enn he vaner Kervarzin, he di a oa bepred leun a bevien. Eur c'hlandi bihan a reaz sevel tost d'he vaner, da digemer kement paour a oa digaset d'ehan gant Doue. Kent evit mernian he-unan, e re ann aluzon d'ar bevien e vije ouz he dor ; eunn toulladik anhe a dalc'he da vernian gant-han ; ho lakaat a re da azein stok out-han ; he-unan a roe d'he ann tamm bara c'hei, al loden biz pe fao poac'het enn dour gant eunn nebeud holen ha bleud, hag ar werenned dour a re he holl bred ; he holl brejerien a eve gant ar weren ma eve he-unan ; ha goude mern, e roe da bep-hini eur pezh bara, braz awalc'h da hellout ober gant-han beteg ann de war-lerc'h.

Mar bije gant-han pevien namet, mac'ha-

niet, koz pe glan, d'ar re-man a re bravoc'h ; rein a re d'he gwin ha madigo all a dinac'he didrue out-han he-unan ; ho dere'hel a re da gousket, ho daouarn a walc'he he-unan d'he ; kemend a oa a wellan enn he di a oa evithe ; he-unan a re ho gwele, ha dorn a roe d'he da c'hourven enn-han.

E-touez ar venec'h, e oa bugale Sant-Fransez ha bugale San-Dominik eo a enore ar muian, rak pevien a oant ha klaskerien vara dre ho c'hrad vad ho-unan. Ar re ze e oa pedet aliez gant ar Zant da dont d'he welet, ha vad a re d'ehan rein eur pred mad hag eur bannac'h gwin d'he, e-keit hag hen, hep na wie ar venec'h vad, e oa trewalc'h d'ehan he vara du, he biz pe he fao, hag he vannac'h dour rik.

Ar bevien holl, ne oa fors piou, ho doa dalc'h-mad dor digor e ti Dom Ervoan. Eur paour a digoueez divezad e Kervarzin ; ne gredaz ket skein war ann or ; war ann treuzo e c'hourveaz hag eno e tremenaz ann noz. Sant Ervoan ac'h-eaz er meaz beure mad, hag hen kavaz eno : — Deut enn ti, eme ar Zant — neuze e roaz d'ehan he diliad he-unan da wis-

kan ; rein a eure d'ehan da vernian , da goanian ervad , eur gwele mad da gousket , hag ar Zant a iaz da c'hourven el lec'h ma en doa kavet ar paour , hag eno e tremenaz ann noz war-lerc'h , evel pa vije fellet d'ehan ober fall d'he gory , abalamour ne oa ket en em digoret he dor anehi hec'h - unan dirag eur bugel da Jezuz-Krist.

Kalz a dud paour a oa digemeret bemde gant-han. Herri Fichet , kloarek euz a barrouz Peurid ar Roc'h , hag e oa bet , e Pariz , kondiskibl d'ar Zant , a iaz da Gervarzin d'he welet , hag a dremenaz ann noz eno ; hag a welaz e oa naontek paour eno o kousked enn nos-ze. Enn de war-lerc'h , e laraz sant Ervoan ann overn d'he ; ha neuze , ar bara o vean c'houtet , e roaz he skudellad vleud da bep-hini da gas gant-han.

Eur paour keaz furlukin , eur Rivallon dre he hano , ginidik a barrouz Priak , enn Eskopti Gwened , a deuaz , er bla daouzek kant daouzek ha pevar-ugent , da gouean , — ne ouzonn na perak , na penoz — war di Dom Ervoan , gant he c'hroek ha pevar bugel. Ar

belek mad ho c'hemeraz holl da vugale d'ehan , ha beteg he varo , da lared eo , hed eunnek vla , ho miraz enn he di hag a bourveaz d'ho holl ezomo.

Eunn devez e teuaz da Gervarzin kabiten eul lestr braz — eunn Normand a oa — gant eunn toullad euz he vourd , evit en em erbedin da Dom Ervoan , rak , war a lare , fians vraz en doa enn he bedenno , abalamour d'he zantelez , hag a roaz d'ehan eiz kwennek , arc'hant Breiz. Raktal e lekeaz ar Zant ann arc'hant-ze enn bara , ha dirag ar c'habiten hag he dud e reaz ar bara d'ar bevien. Evel-se e re gant kemend en doa , hag aliez e tigouee ne chome mann a-grenn gant-han , nag evit-han , nag evit tud he di. Ar re-man neuze a gemere aon hag a glemme , hag ho mestr a lare d'he : — Beet fians , evit bara ac'h euz. E dilost ar pennad-man , e larfomp ar burzudo a reaz Doue he-unan e-kenver fians he zervijer.

Ne vije ket krok mad ann est mac'h haste sant Ervoan ober dornan he ed , evit he rein d'he bevien geaz ; aliez zo-ken ec'h ee gant-he diwar he dram. Sant Ervoan n'en doa

ket ed koz war he c'hrinelio. Eunn amezek d'ehan, Alan, a laraz d'ehan eunn devez e oa displed braz en em dizober euz he ed e kerz ann est, hag o virit anehan eur pennadik, e tennje mui diout-han. — Ha piou a oar, eme ar Zant, ha me a vo beo neuze. — Da benn ar bla a laraz Alan d'ehan en doa goneet unan war bemp war ann ed en doa miret. — Ha me, a laraz ar Zant, e kred d'in em euz groet kalz gwell gant ma ed am euz roet enn est. — Ia, Sant braz, kant evit unan ac'h euz goneet hag ar vue a bado da vikenn.

Eur gernez vraz a oe enn Breiz, enn amzer ma oa c'hoaz Dom Ervoan person e Tredrez. Eur c'houlz vrao a oe hon-niez evit-han da greskin he aluzono. Da oel ar Vadelen, ne oa ken mann enn he di; holl a oant er meaz; koulskoude e kouee pevien e Kervarzin. Eunn devez, e oa eur bern anhe, ha sant Ervoan a laraz d'he : netra ken n'am euz da rein d'hac'h; eet d'am liorz ha sellet ha hen eo mad ar fao a zo enn-hi da debrin, ha mar d'int mad, kaset gan-hac'h kemend a garfet; c'houi, tud a bell, digaset aman ar plusk, ma

voint poac'het, ha c'houi, tud kear, kaset anhe gan-hac'h du-ze. D'ann deio war-lerc'h ne c'houitaz na pevien kear, nag ar re diwardro da dont d'ar fao, hag e tri pe bevar de goude, e oejont skubet holl, ne chome ket unan anhe.

Ne chome mann ken gant sant Ervoan nemed eur marc'h labour evit he douaro; ann anv a oa, mes ne oa ket echu ann est, ha hepred e pade ar gernez. Mont a eure da Landreger da gaout Rivallon Trakin a oa dimeet d'he c'hoar, hag hen da laret d'ehan : — prennet ma marc'h digan-in. — Evid enn dro-man, teuaz gand he vreur kaer, eo red ma ve kollet ho penn gan-hac'h, da gaout c'hoant da werzan ho marc'h, evit kaout arc'hant da rein a-darre d'ar bevien. — Van-ebed na reaz ar Zant euz ar c'hros-ze, ha ken tenn a dalc'haz ma brenaz Rivallon he vare'h digant-han. Dom Ervoan, adalek ma oe krog enn arc'hant, a bedaz joauz braz he c'hoar da brenan bara gant darn ann arc'hant, hag a distroaz da Gervarzin, gant e-leiz a bevien war he lerc'h. Eur mevel ac'h eaz da gerc'hed ar bara gant

eur baner, ha raktal e oe roet he damm da bep paour.

Eur weach all, e teuaz ar bevien enn dro d'ehan da astenn ho dorn, ha n'en doa ket eunn diner da rein d'he; he gabel a lemaz diwar he benn, hag a roaz enn arrhez evit eur bara a rannaz raktal etre ar bevien. — Kammed ne domme he-unan; koad koulskoude a oa enn he di, prenet gant-han evid ar bevien; hag ive tan braz ha dalc'h mad enn he glandi Kervarzin, hag ar glanvourien na oant ket evit en em stlejan beteg ann oaled, hen ho dougo he-unan d'he gichenn.

Eur bla-bennak e oe gwall ien ann amzer, hag hep distag e-bed, adalek Nedelek beteg ar C'hoaraiz: daro a oa ar bevien da vervel gant ar riou; a vagado e teujont d'en em glemm da sant Ervoan; mann n'ho doa da domman d'ho izili sklaset, ma n'en dije ket hen true out-he. — N'em euz ken a goad da rein d'hac'h, a laraz ar belek mad d'he; mes eet d'am lannek, leun eo, ha kemeret pep-hini kemend ha ma plijo d'ehan, nann avad e tu-hont d'he ezom; rak divezatoc'h e teuo re

all hag e vo red lezel ho lod gant-he. — Hag al lannek a oe skubet evel ann dachen fao-hont.

Amzer hag amzer, hag ispisial er gouan, e prene pe e re prenan mezer da wiskan pevien Jezuz-Krist. Er Roc'h, enn de marc'had, — eur gwener neuze evel breman, — e welaz Iann Pestien anehan o prenan c'houec'h pe seiz pezh mezer fetiz. Groek Rivallon, ar furluskin, eo a wrie ann diliad, ha Dom Ervoan ho roe da bevien Louannek hag a lec'h all. Ne c'hortoe ket zo-ken dont d'ho goulenn. Eur mignon d'ehan a oa eno, pa gase ar Zant da Lannuon evit prenan mezer, hag Dom Ervoan a c'houlennaz out-han ha hen na oa ket enn dro d'he di pevien hag ho dije ezom a diliad: — eo, eme ar mignon, — mad, eme ar Zant, digaset-he d'in. — Daou a deuz, hag ho daou e cejont gwisket penn ha troad.

Meur a weach e tigouez d'ehan rein he diliad diwar he gory he-unan, evit ho rein d'ar bevien a kave war he hend. Euz a beder gwech, eruet e doareo dishenvel, hag ansavet ho feder gant testo mad, unan a gemeran. D'eur gwener ma tistroe sant Ervoan euz ar Roc'h, el lec'h

m'en doa prezeget enn de-se, e welaz o tont d'he gaout eur paour, noaz pil, hanter varo gant ar riou, hag a c'houlennaz ann aluzon digant-han. — Deuz d'am zi, eme ar Zant, ha me a roo bara d'id. — Allaz, a laraz ar paour, ne ket bara eo a glaskan; na venn ket evit hen debrin, eunn tammik mezer eo am bije ezom d'en em c'houlou, evit na varvin ket gant ar riou. — Ha Dom Ervoan, tenereet gant ann drue, ac'h eaz enn eunn ti nez, hag a diwiskaz he zae wenn; neuze e c'halvaz ar paour hag he roaz d'ehan. Ac'hane e redaz da Gervarzin, hag e kasaz eunn den da Landreger, da di Rivallon ar Floc'h, da gerc'het taer walen mezer gwenn, da ober eur zae neve, rak n'en doa nemed ann hini a oa war-n-ehan. Karanteusoc'h e oa evit sant Martin he-unan; eunn de ma oa Kervarzin gronnet a bevien, ha ne oa mann ken da rein d'he, sant Ervoan a dremene evit bean lemet kement neuden diliad a oa war-n-ehan, ha groet rein anhe d'ar bevien, ken brao ma chomaz noaz beo, ha ne viraz d'en em bakan, nemed eur c'hôz vallin a vije perliesan war he wele.

D'eur weach all, evel mac'h ee da esan eur zae neve flamm digaset d'ehan gant he gemener, o trein he benn, e welaz ouz toull ann or eur paour a Louannek, na oa nemet trulio, koulz eo laret, enn noaz. Gervel a eûre anehan: gwisk, eme-han, ar zae-man, ha me a welo war da chouk, hag hi a zo groet mad. — Ar pillennek, joa ha mez gant-han, a digaree hag a lare: — Otro person, piou on-me da wiskan ho soutanen? — Hen gourc'hemennin a ran, e teuaz gant ar Zant. — Ha pa oe ar zoutanen war diouskoa ar paour: — Laka ar c'habel ive, eme ar Zant; neuze a laraz c'hoaz: — brao-braz int diouz-id; mir anhe; kea gant-he, ha gant bennoz Doue da c'honit da vara, ha tol ple da bec'hin. Hag ar paour a iaz kouit, evuruz-meurbed, gand ar zae hag ar c'habel.

Doue na oe ket sich gant burzudo, e-kenver eur garante ken souezuz. Er bla trizek kant, diou c'hroek a Lanveur a lekeaz enn ho fenn mont war-eunn-dro e pirc'hirinach da seiz Sant Breiz. Fe braz a oa gant ann dud er veach zantel-ze, enn amzer sant Ervoan, ha setu-

aman ar veach-ze, evel ma read anehi neuze. Ar seiz iliz vraz hag ar seiz Sant a oa : Iliz san Kaourentin e Kemper, hini san Pol e Kastel-Leon, hini san Tual e Landreger, hini san Samson e kear Dol, hini sant Patern e Gwened, hini san Briek hag hini san Malo, enn diou gear a doug ho hano. War hend Landreger ha Lannuon, en em gavaz ann diou bir-e'hirinez gant sant Ervoan.

Joa vraz a oe gant-he euz a ze, rak klevet ho doa e prezege ar Zant e pep digoue, komzo Doue gant gwiegez vraz ha nerz kalon. Stouan a rejont 'ta dirag-han, ha kerzet troad ouz troad gant-han, o selaou ouz ar c'hentelio zantel a glevent euz he c'heno. Goude eunn nebeud hend groet war-eunn-dro, e kavjont warveven ann hend eur paour gourveet dindan eunn dislao enn zoul, hag a c'houlenne ac'ha-ne ann aluzon digant ann dremenedi. Distrein a eure sant Ervoan, ha tostaat d'ar paourze; he-man he bedaz da zellet a drue out-han, enn eul laret e oa maro gand ann naon. Sant Ervoan a oe eur pennadik o kozeal izel gant-han, ha neuze e tennaz he gabel hag hen

roaz d'ehan; — Kemer he-man, eme-han, rak evit breman n'on ket evit rein ken d'id. — Derc'hel a reaz gant he hend diskabel hâg enn eul laret he oviz. Ann diou c'hroek a oa bepred enn he gichenn; ha d'eunn hanterleo pelloc'h, o sevel ho daoulagad war ar Zant, e weljont e oa war he benn ar c'habel en doa roet d'ar paour. — Otro Jezuz-Krist, eme sant Ervoan, war he daoulin, jûntret he daouarn e-kreiz ann hent, Otro Doue, me ho trugareka euz ho tonezon. — Ha neuze e skoe war boull he galon. Stagan a eure ar groage da welan, erdra ma helle ho daoulagad, estlammët evel ma oant gantar burzud a oa neve c'hroet dirag-he; hag ar Zant a laraz d'he : Eet ha dalc'het war hoc'h hend gant bennoz Doue, groet ar mad ha Doue hen paeo d'hac'h. Ha neuze, dre eunn hend distro ec'h eaz da Gervarzin.

Eunn de, e Kervarzin, en doa roet eur forniad vara a bez d'ar bevien. Ervoan Suet, he goz kendiskibl, e oa gant-han o vernian enn de-se. E oa o vont ouz tol, pa deuaz eur paour, euzuz he welet, hag hanter-noaz. Ar Zant a

reaz d'ehan azein dirag-han, ha debrin enn he skul gant-han. Ar paour a debraz nebeut hag a zavaz diouz ann dol; ha diwar ann or, e troaz etrezeg ar Zant hag he vignon, hag e teuaz gant-han e brezonek : — Kenavo, Doue da vezo gan-hac'h. — Ha raktal ar c'hasker-ze, ken euzuz ha ken divalo o tont enn ti, ac'heaz ken lugernuz a c'hened, ha gwisket gant eur zae ken skeduz ma skleriaz ann ti holl gant-han. A hed ann de, ne c'houlaz mui sant Ervoan debrin ouz ann dol-ze, hag eur mor a daero a redaz gand he diou jod : — Ah ! eme-han, sklear hen gwelan breman : unan a ele Doue eo a oa hen-nez, hag a deue d'hon gwelet.

Er bla ar gernez, e oa ken bihan ar bara ma ne oad ket evit kaout, hag ar bevien ac'h ee bete lonkan douar, evit kousket war ho naon pe evit hen dallan. Sant Ervoan a oa neuze person e Tredrez hag e oa eunn toullad tud pedet gant-han da vernian; he gure a oa unan anhe. Ne oa er presbital nemed eur bara. Eunn nebeut tammo e fellaz da zant Ervoan rein d'ar bevien diout-han; hag ar c'hure, ne oa eet war a lare tamm bara daou

de oa enn he c'heno, a glemmaz huel hag a laraz d'ar brejerien all. — Beomp war evez, pe e roo ar bara tamm ha tamm, ha ni ne chomo beged gan-imp. — Dom Ervoan a roaz ann hanter ar bara d'ar c'hure; he-man he c'hlenkaz hep mez; ha divezatoc'h pac'h eaz d'he c'herc'het, n'he c'havaz ken; kredin a eure gant-han e oa eet gant eunn all-bennak; sevel a reaz he droad ha drouk braz enn-han. Diouz-tu ma oe eet arok, e oe gwelet o tont enn ti eur c'hroac'h vihan evel eur gornandonen, hag a laraz evel hen : — Dom Ervoan em euzklevet ne oa ket a vara enn he di, ha na gave ket evit arc'hant, hag e teuan da digas d'ehan. — Hag e lekeaz war ann dol taer vichen paket gant eul lien gwenn, ha neuze ec'h eaz da azein enn eur c'horn. Mont a eure ar brejerien ouz tol; mes kaer e oe klask ar c'hroegik vihan, evit rein he lod d'ehi euz mern, e oe estlammet ann holl n'he c'haved ket, eet e oa kouit; souezet ec'h eaz ann holl; eur burzud e oa kement-se, war a gredent; hag evit gwir, ne oejont ket evit kavout ann hanter vara en doa ar c'hure lekeet enn he gichen,

kentan tra ; ha d'ann eil, ne hellaz den gout tro ann hini goz, da vean en em dennet evel ma e doa groet; rak prennet e oa ann or, na digoret ne oa ket bet, ha kement hini a oa enn ti hen touje diouz red. Ar pezh a oa gwir eo ma oa ar gornandonen-ze disanav d'ann holl; ne oa bet biskoaz gwelet er vro gant den nag arok na goude.

E-pad ar gernez c'hoaz, war-dro ar zun wenn, e teuaz, enn eunn tol, da dor person Tredrez, tremen daou c'hant den reuzeudik da grial war ann naon. Ne oa enn ti a vara nemed evit nebeud a arc'hant, nebeud a vara 'ta, rak ker-meurbed e oa; koulskoude ar bara-ze ec'h eaz etre daouarn ar belek santel da gel liez a vara all ma oe pe a dra da rein ho aluzon d'he holl, bete d'ann divezan. Eur weach all e Kervarzin, gant eur bara a netra, e roaz ho gwalc'h da bevar baour war-n-ugent.

Eunn devez e laraz Dom Ervoan d'he gure ha d'eunn all euz he di, mont da gerc'het gwinniz en doa leket enn eur arc'h braz evit he aluzono. Pa erujont gant ann arc'h, he gavfomp digrogennet ha dam-c'houllou. Dont a

rejont d'hel laret d'ar Zant: — N'ho pet nep nec'h, a laraz d'he; awalc'h e zo, mar tigor Doue he dorn. — Mont a eure gant-he d'ann arc'h, ha leun e oe kavet. Ken berr e oe ann amzer da vont ha da dont, ma ne oa nemet da dorn Doue e oa dleet ann ed-ze.

Mes ar belek santel, Ervoan Helouri ne oa ket hep-ken he garante true eunn den ouz poanio eunn den all; eunn drugare intentet mad ha santel eo a oa he hini, eur vadelez evid ann holl, da ober vad d'ho c'horv evit digouevout gant ho ine; muioc'h ezomek e wie e oa ine meur a baour evit ne d-eo ho c'horv, ha perliesan n'eo ho c'horv reuzeudik nemet dre m'aman ho ine dihenchet diwar ar mad. Ze oa da Dom Ervoan prezeg, evel mare, gwir aviel ar bevien dre holl ha d'he holl: N'en em nec'het ket, eme-han d'he, gant ho paourante; kemeret anehi a galon vad, ha douget-hi sioul; keret ha doujet ann Otro Doue, heb en em damantin gant treo all; rak bresk eo enor ha pinvidigez ann douar, ha pell ne badont ket. — Euz ann eil diek paour ec'h ee d'egile, gant ar c'helenno zantel-

ze ha gant he aluzonio; he dro a re ive enn he vanati bihan Kervarzin, ha pep tro d'ehan a oa eur brezegen. Dre he vue kouls ha gant he gomzo, e poanie da huelaat dirag ho daoulagad ho-unan pevien geaz ann Otro Doue, o tigas d'he sonj euz ar baradoz ken hirr ha ken kaer a zo groet evit-he. Gwelet hon euz anehan o vean mevel dindan-he, o louzaouan ho goullo, o tougen anhe d'ann oaled, o lakaaat anhe enn gweleo ken kouls groet hag a raje eur vamm evid he bugel. Eunn devez e oa eet da welet, enn he vanati bihan, liez a bic'hirin paour a oa deut di da dremen ann noz; unan a welez hag ac'h ee, war a lare, da zant Jakez Spagn, pe da seiz Sant Breiz. — Eur boto mad a zo aze gan-hac'h, eme ar Zant d'ehan. — Gwir eo Otro, a lar ar paour, eunn tamm lard koulskoude ac'h afe gant-he. — Hag ar belek santel a eure kerc'het lard, ha gant he dorn he-unan e lardaz boto ar c'hlasker.

Pa varve pevien e klandi Landreger, hen a roe al lienenno, ho liene he-unan, hag aliez e vije gwelet, enn eur c'horn d'ann arched, o

tougen anhe d'ho be. Eunn test braz euz a obero mad ar Zant eo breur Gion Vorel, manac'h Sant-Fransez e kouend Gwengamp, d'ehan da vean bet taer zun e Kervarzin, gant eunn drouk a oa deut enn he c'har. He-man a welaz ar Zant enn dro d'ar bevien a dizouee a vagado, hag he stumm da bleal gant ho ine ha gant ho c'horv. Eur paour namet e teuaz d'ehan mervel er maner; hag hed ann de, ne deuaz ket ar bevien di, evel ma oa ho giz, gant aon na vijent lekeet da walc'hin ar c'horv maro, — eur fleir euzuz a oa gant-han, — ha d'he dougen d'ar vered. Ma! Dom Ervoan ha breur Olier Purgoit a oa gant breur Gion, a walc'haz doujuz hag humbl ar c'horv maro, a wriaz al lienenn enn dro d'ehan, hag a droc'he war lavar ar breur, ann neuden gant he dent; neuze hi ho daou a dougaz anehan d'ar vered hag he diskennaz enn he ve.

N'eman ket aze c'hoaz kemend a re a obero mad; mar kave bugale baour, minoro pe diberc'hen, ha danve enn-he da vean skolerien vad, ar re-ze ho c'hase d'ar skolio, ho beve hag ho gwiske, hag e pae evit-he. Evel-se

e reaz — evit henvel daou — da Hamon Enkosker ha da Ervoan Auspis. Ne oe ket Auspis digar; daouzek vla a roaz da zant Ervoan da vean kloarek enn he di; ha pa varvaz he vestr mad, en em dennaz da vevan he-unan-penn enn eur repu mogeriet a grenn, tost da bont Gwengamp. Eunn all, Hamon Tolleflam, deut da vean mignon d'he vestr, rag den fur hag eeun e oa, ac'h eaz ive da vanac'h klostret hag a oa brudet evel eur Zant gant ann dud. E Rom e oa bet d'ar Jubile braz a oe er bla trizek kant; eur veach all e oa bet e sant Jakez Spagn, hag euz eur veach divazan da seiz sant Breiz e tistroe, evit bean war varo sant Ervoan. Jofroi Jupiter eo red c'hoaz d'in laret eur gir anehan; pemzek vla e oe he-man e ti Dom Ervoan; beleg e teuz da vean, ha person e Treduder. Setu-aze ann dud a veve ar beleg enoruz gant-he, hag a roe dorn d'ehan er garg holl garanteuz enn doa kemeret anehan he-unan; ann tostan e oant d'ar Zant, hag ar re gentan enn he vadobero re dalvouduz evit ma oufe den ho frizout.

E kemend a lennomp aman groet gant sant

Ervoan, red eo hen ansao, n'euz netra gwell neve, evit piou-bennag a ineo bro Breiz-Izel, nemed he galon vraz, ar zantelez huel hag he ankoaz anehan he-unan. Rein repu d'ar bevien, ho mernian, ho c'hoanian, kaout enn eur gir karante gristen, e oa arok sant Ervoan, a zo bet enn he c'houde, hag a vo c'hoaz ac'hann da bell, a drugare Doue, unan euz a gaeran gizio ar vretonek. El lec'h all eo dispriset hag argaset ar bevien; e Breiz n'eo ket eunn dismegans bean paour; gant ma ver fur hag honest, e ver enoret hag harpet e peb ezom.

Hirr e ve listren ar re ho deuz, war douar biniget Breiz, roet brud d'ho hano, dre ho c'harante evit ann dud, adaleg ebestel gentan bro ann Arvor bete vreman.



PENNAD VIII.

Bue guzet sant Ervoan. — He binijenno. — He doujans Doue.

Skrivan a ra bleunio ar Zent.

« **E**NN eul lilien, eme san Anton a Badou
 « d'ar boblo en em starde en dro d'ehan
 « da glevet he brezegenna zantel, enn eul
 « lilien e zo tri zra, nerz, gened ha c'houez.
 « Ann tri zra-ze a gaver enn dud paour ho
 « spered, a drec'h ho c'horr dre ar binijen,
 « hag ho ourgouil dre wir izelded; ho gened
 « eo ar gwerc'hded, hag ho c'houez eo ann
 « hano pe ar vrud vad. Al lili-man eo lili ar
 « parkeier, hag ar parkeir eo ar bed, diez
 « hag enoruz d'eul lilien chom beo ha fresk
 « enn-han. »

Eunn den, o lenn ar gentel-ze tennet gant
 san Anton a Badou diouz al levro zantel, a
 c'houlenn digant-han he-unan hag hen na
 wele ket ar Zant-ze, gant daoulagad he spered,

hon Zant ni, sant Ervoan, dindan he vantel
 hirr mezer gwenn, he binijenno, he werc'h-
 ded hag ann doujans zantel a viraz e-kreiz ar
 bed hag he risklo.

Kalon didach ha dinam hon Zant evu-
 ruz en em diskoe ken skler enn he zello,
 komzo, obero, hag enn he holl doare, ma
 n'en dije kredet den sevel ann disteran mar
 war-n-ehi; ha ken brudet ha kredet stard e oa
 gant ann holl a hend all, ma ne oa ket eunn
 den hag e vije bet divez awalc'h da laret eur
 gir, da ober eunn dra, eur mousc'hoarz hep-
 ken dirag-han, hag a vije displeal ann nebeutan.
 Setu-aman war kement-se daou desteni berz
 hag a gemer hag ha skleria bue guzet sant
 Ervoan war hec'h hed. Iann Gerangoz, bet
 ar garg zakr gant-han da evesaat gant aket
 iaouankiz gentan ar Zant, he oad eil iaouan-
 kiz, ann oad ma tivun ann techo er galon, hag
 a lar he-unan eo bet he lagad, dalc'h-mad
 ha didrue, digor war he skolaer, Iann Geran-
 goz en deuz touet n'en doa biskoaz gal-
 let anaout enn-han nep tra a eneb ar gwerc'h-
 ded. Ha Jofroi Loanno, person ar Roc'h,

bet klevet gant-han kovizion holl vue sant Ervoan, tri de kent he varo, a laraz ive dre le n'en doa biskoaz ar belek santel pleget da gastr ar c'hik, na groet nep pec'het marvel.

Breman eo red d'in laret ar binijenno spou-ronnuz ho doa lekeet ar Zant mestr a-grenn d'he gorr ha d'he skiancho. Hirr ha gloazuz e oe ar gourenno, diouz ma lare he-unan da C'hion Vorel. Souezuz e oa dije he binijen e Pariz, kriskin a eure enn Orlean, hag e Rahon ec'h eaz c'hoaz war vrasaat; ne baouezaz nemet gant he vue, ha zo-ken enn he dremen van pe agoni, ne fellaz d'ehan na disteraat, na lemel netra euz he vourreviez e-kenver he gorr e par ar maro.

Ne oe evuruz awalc'h da vean merzeriet na gant iudevien, na gant paganed, na gant falz kristenien: d'ar binijen e oe merzer, hag he-unan a oe he vourreo; hag e-lec'h ne bad poanio ar verzerien all nemed eur pennadik, ha c'hoaz ne vent ket heb eunn diskouizbennak, sant Ervoan e oe he boanio hed he vue, hag hep paouez. Lien stoup neve e oa he roched, ha garo d'he groc'hén, evel eur c'hreiz-

reun; pa deue da dic'harwat, dre vean bet douget, ne c'houle ken anehi hag he roe d'ar bevien. Goude ma vije bet gwalc'het, n'he leze ket da zec'han; he zol a re war he gein, goude ma vije didouret, ha gant ann diliad gleb-ze war he gorr, e chome dindan ieneon ann noz. Ar roched a oa war-n-ehan, pa varvaz, a oe lekeet e-mesk relego iliz vraz Landreger.

Sant Ervoan e oa ive war boull he galon eur gwir greiz reun ardu; gant aket avad he c'huze ouz ann holl daoulagad; ha mar tigouee da den he gwelet, en em diskoe poaniet gant-se, ha raktal a digase he diliad d'he c'hoach. Ar gouris-ze a dougaz herve, hed he vue pe dost; er pemzek de divezan ma vevaz, e oa red mad d'ehan he lemel awecho evit eunn de, rak ne oa ken evit gouzany ann diez a re d'ehan. Enn divez, pa welaz e oa o vervel, pe e teuaz c'hoant d'ehan da ober eul leaz d'eur mignon, pe e krogaz aon enn-han ne vije bet goufet e touge ar benvek-se a binijen; evit ann eil dra pe eben, hen roaz dre guz da unan euz he dud, gand urz d'he gas d'ur

manâc'h e oa klostret tost d'ar Roc'h ; mes ar mevel hen roaz da Abad Bear, hag enn abati Bear hen mired evel eur releg.

Sant Ervoan a gouske nebeut ; ann noz a dremene, dam war hec'h hed, o pedin, o lenn, pe o komz a dreo zantel ; pa ne helle a gen, brevet ha meo gant ar gousked, neuze e azee enn eur gadeur, kroajet he divrec'h war boull he galon, harpet war he levro, gant he benn pleget eunn tammik, hag er stummze eo e kouske.

Pa c'hourvee, e vije war eunn dornad plouz, gant eul levr pe eur min dindan he benn ; war var ar gwele kalet ha paour-ze, e oa eur c'hoz vallin mezer teval war he diouskoa ; kammed na diwiske he diliad, na zo-ken he voto nemed eur wech-bennak pell ha pell.

C'hoaz hirie e weler e Kervarzin eur c'hoz gwele dero, hag a dremen pell a zo evit bean bet gwele sant Ervoan. Liez laeronsi a zo roud anhe war-n-ehan ; c'hoant ar bic'hirined eo kaout eur skilfennik anehan, e pep gwech mac'h eont d'he welet. Eur gwele kloz eo gant he vank tosel, hag henvel a-grenn ouz ar re

a zo e tiegezo diwar ar meaz e Breiz-Izel, gant eunn digor groet evel prenest eunn iliz goz.

Pa vije sant Ervoan e Louannek, eo enn iliz, he-unan gant ann Doue kuzet enn he arbél, eo e plije d'ehan tremen ann noz. Ha mar teue d'ar gousked he diskar e-kreiz he beden, neuze eo war vin eur be, enn iliz, eo e c'hourvee, pe en em denne dindan eunn doen harpet ouz ann iliz ; eno e kave eur gleud groet gant barro gwe leun a skoulmo, ha gweet ann eil gant egile ; eunn tammik plouz hag eur c'hoz vallin e vije tolet warn-he ; hen-nez e oa he wele ; eur grusufi e oa e-penn ar gwele paour-ze.

Herve Goatreven, regester iliz vraz Landreger, a oe war-hanter gant Dom Ervoan evit ar c'houisk lec'h-ze ; kalet e oa evel ar min. Ann daou vignon, kent evit gourvein war-n-ehan, a chome war vale eul loden vraz ann noz, da lenn levro kaer ha da gozeal war dreo zantel. Herve ne oa ket he c'hiz chom hep kousket, hag e kredaz d'ehan ec'h ee sant Ervoan kentoc'h da gousket evit diouz he gustum, gant true out-han. Evit mont d'he wele, n'en

doa ar Zant da ober nemet lemel he zae war var, en em voutan enn-hi evel enn eur zac'h, da gaout he dreid e toull ann divrec'h. Taer pe beder noz e oe Herve Goatreven er gis-ze, ha war-benn neuze, e oa kouet gloazio ken kre war he diou groazel, e oa ken brevet, ma oe red mad d'ehan mont arok; re c'haro e oa ar vue-ze diout-han; ne oa ken evit pad enn-hi.

Pa vije sant Ervoan enn-hent evit prezeg, neuze e vije o lojan e tier gwellan ar vro. Eur gwele mad a gave bepred er gampr e oa kemennet evit-han; ar gwele-ze avad ne ket ar Zant eo a gouske enn-han, Jofroi Jupiter a vije gant-han perliesan, eo hen kemere. Hag hen a groge enn he bedenno, ha neuze en em lede, hep diwiskan neuden, war ann douar ien da gousket; abred e vije war vale, hag e stage da bedin adarre. Mar bije ar Zant hep den all gant-han, ec'h helled en em c'hortoz, e de war-lerc'h, da gavout he wele, evel ma oa bet groet enn de diagent.

Eunn noz, goude bean bet e pirc'hirinach da Zant-Ronan, gant eunn den a vrezel d'ann

Otro Pestien, Mauris Mont e oa he hano, e chomaz enn eur vourc'haden vraz, war ann hent. Roet e oe eur gampr d'he; Mauris e krede d'ehan e oa eet sant Ervoan da gousket, pa oa eet he-unan, hag a oa krok da gousket, pa glevaz a-benn taer gwech eur vouez hag a lare: — Sao, eman ar Zant gourveet war ar min. — Mauris a divun enn eull lamp, hag a glask enn dro d'ehan, ha Dom Ervoan e-bed ne oa eno. Sevel a ra buhan hag ec'h a da vered; er vered-ze e weler eur min braz louaret, hag e zo bet santelet gant sant Telao, manac'h enoruz, dre kalz kasti ha piniñ groet d'he gorv. War ar roc'h e oa gourveet sant Ervoan, hag eno, ken garo out-han he-unan ha sant Telao, e kouske maro.

Souezuz e oa he vijel hag he iunio; ne ket kemend evit bevan eo e tebre, evel evit harz ouz mervel. Adalek ma oa e Pariz, pevarzek vla e oa neuze, e roe d'ar bevien he loden gik; pa oe pevar bla war-n-ugent, e lezaz krenn ar gwin hag ar c'hik, hag e oa iun gant-han pep gwener. Ne oa eno nemet tolio esan euz

ar binijen vraz e vevaz hag e varvaz enn-hi. E daouzek vla divezan he vue, e oe iun diwar bara ha dour gant-han, ar c'hoaraiz war he hed, amzer ann Avant, ann dek de arok ar Pentekost; ann daouzek deio, ann de arok goelio ar Werc'hez hag ann Ebestel, hag holl deio iun gourc'hemennet gant ann Iliz. Taer gwech ar zun, ar merc'her, ar gwener hag ar zadorn, e iune ive diwar vara ha dour. Enn deio all na re nemed eur pred ha petore pred? Eunn tamm bara zegal, kerc'h pe c'hei, pe vrenn, gant eunn toullad piz, fao, pe irvin poac'het enn dour gant eunn nebeud holen, hag eur weach-bennak, pell ha pell, eunn dornadik bleud, hag eur weachik mar-teze, eunn tamm amann, pa vije diavezou-rien ouz he dol. Kammed n'eo bet gwelet o tebrin na kik, na pesked, na fourmach. Da zul Fask, hag evit herzan ar goel, e tebre eunn u pe daou. He holl evach e oa ann dour, hep kammed evach all e-bed. Hen-nez e oa he vevans er gear, e ti ann Eskop hag el lec'h all, e ti noblanso ar vro hen anavee, hag ozet e vije he bred diout-han. Pa vije e tie dianav

d'ehan, e kemere euz ann holl veujo, mes na debre euz hini anhe; tammo bihan a re diout-he, ha neuze, sioulan ma helle, ho ruze e-mesk ann nemoranco a vije evit ar bevien. E pemp pe c'houec'h digoue, war bedenno stard ann Eskop, pe minioned vraz all, e oe gwelet o ruian he dour gant eunn nebeut gwin, kemend a ma laka ar belek a dour er gwin, pa ve oc'h overnian.

Ken tenereet e oe ann Itron Pestien gant ar binijenno zantel-ze, ma lekeaz enn he fenn tremen hep kik da verc'her e-pad ar bla; hag hen ober a eure hed he bue.

Doue a enoraz gant daou vuzud pinijenno he zervicher, hag a diskoeaz skler e plije ar binijenno-ze d'ehan.

Eur gwener e oa sant Ervoan o vernian e ti ann Otro Jofroi Tournemin, hag herve he c'hiz, e oa iun gant-han diwar vara ha dour. Ann Itron Tournemin a oa klan, ne ouzonn ket ped vla oa. Sant Ervoan, enn dour e oa gant-ha da evan, a zoublaz eur genoad vara, hag he roaz d'ann Itron. Bec'h e oe d'ehi bean debret ann tamm bara-ze, ma wellaaz euz

he c'hlenved, ha ma vevaz ouz-penn ugent vla c'hoaz, hag aliez e komze euz ar burzudze gant plijadur.

D'eunn devez all ma iune adarre sant Ervoan diwar vara ha dour, e kasaz Hamon Tolleflam da ober eunn dro e bourk Louannek, da glask eur bara; rak ne oa tamm er presbital. Hamon a distroaz gant eur bara, hag e oa herve kalz re vad evit ar person, rak larat a eure d'he vevel: — Lipouzerez, war a gredan, a teuz c'hoant da gaout; ne teuz-te kavet bara torz? — Nann, eme Hamon, nemed eur bara brenn ha na dal mann da vevan tud. — Kas ar bara gwenn-ze d'ar gear, ha digas d'in ar bara brenn. — Neuze ec'h eaz sant Ervoan ouz tol, gand ar bevien e oa eno enn dro d'ehan. Ha setu raktal eunn evnik bihan o tont dre ar prenest hag o vont war skoa ar Zant: — Sellet 'ta, Otro, eme Hamon, ann evn en em stignet war ho prec'h. — Sant Ervoan a grogaz enn evn, hag hen dalc'haz pell amzer enn he dorn. Ken gwenn hag ann erc'h e oa he c'houg hag he gov; he gein e oa glaz ha lufr evel eur berlezen. Sellet

a eure ar Zant piz mad' out-han, ha goude e laraz d'ehan: — Kea rok, enn hano Doue. — Ann evn a nijaz kouit, ha gant kemend hini a oa eno, e chomaz ar greden stard e oa abeurz Doue, enn digoue-ze, eunn diskleriadur euz a zantelez ar person; rak biskoaz den n'en doa gwelet enn ti-ze, nag e nep lec'h er vro, na kent nag aboe, eunn evn evel hennez; hag e tuont da-ze, sant Ervoan e oa digor he dorn gant-han, hag ann evn a chome war he dorn, ken na oe roet urz d'ehan da vont enn he dro.

Evel-se, e oa ken braz pinijen sant Ervoan ha ma oa he gorr evit ober, ha brao ne oa ket bean korv d'ehan. Er beden e oa he nerz. He vrerial a laraz bemde gant douj eunn El; ha kammed hep-han ne vije kavet; dindan he gazel e vije gant-han. Gwelet a rear, e sekretiri iliz ar Vinihi, levr oviz ar Zant, kalz a folenno a zo eet diout-han. Diez e ve kavout eul leyr oviz euz he amzer hag e ve ken dister, ha muioc'h dereet ouz paourent e hag izelder ar beleg enoruz en deuz-han santeleed, en eul laret hag o tougen anehan.

Bemde, nemet klan pe harzet braz e vije, e sa-
ve sant Ervoan ouz ann oter da overnian. Kent
evit kemer ar gwiskamancho zakr, e vije gwe-
let o vont ouz troad ann Oter, hag eno war
he daoulin, digor he divrec'h, pleget he benn
dindan he gabel, e vije hirr he beden. Kle-
vet e vije oc'h hirvoudin; redeg a re he dae-
ro gant he diou jod treuteet, bete war he di-
liad. Tol ha tol a lare : — O Jézuz, map da
Doue — hag aliez c'hoaz ar c'homzo-man
euz ar psalm *Miserere* : — Krouet enn-on eur
galon c'hlan, ma Doue, ha lekeet da vont
beteg enn donan ac'hanon spered hoc'h eeune-
digez. — C'hoaz e wele o laret ar *Gonfiteor*,
goude bean gwalc'het he viziad; ha pa blege
war ann oter evit kregin er pedenno arok ar
gourreo, neuze e kreske he daero. Er gour-
reo e tride he galon gant ar garante hag ann
douj, bete mont da huanado ha d'ann di-
fronk; ho mougán hag o c'huzan ouz ar re
a vije enn overn, e vije fellet d'ehan, rak den
humbl a oa anehan, n'en dije ket goulet dis-
kuil ar graso hag ann domder a garante a
vije enn-han; kaer en doa, ne deue ket a-

benn. Eur weach, pa oa o laret ar c'homzo
zakr war ar speso zantel, e oe gwelet eul lu-
c'heden o tont enn eunn tol da sklerian ar
c'halei, ha da ober enn dro d'ehan eur gurunen
lugernuz, ha raktal, goude ma oe bet ar gour-
reo, al luc'heden a iaz kouit.

Eur weac'h all e oa regester Landreger o
senin ar c'hloc'h evit oviz ar beure, ha sant
Ervoan; tremenet ann noz gant-han er zekre-
tiri, a deuaz d'ann tol kloc'h kentan hag ac'h
eaz da daoulinan da droad ann oter; war ann
heur e welaz ar regester eur goulm skeduz a
skleriaz ann iliz vraz a-bez gant-hi, o tont euz
ar zekreteri, hag o vont war-du ann oter ma
oa ar Zant o pedin. Ar c'hloc'her a lezaz ive
gleier eno, hag a redaz enn he estlamm da
welet ar burzud a dostoc'h; mes gweladurez
ha sklerijen a varvaz raktal, ha sant Ervoan,
goude bean krozet d'ar c'hloarek da vean
senet nebeutoc'h evit kustum, a c'houre'hem-
mennaz d'ehan prennan he c'heno war ar pe-
z a oa digoueeet dirag-han.

Sant Ervoan a vije bepred enn peden. Komz
nebeud a re, seped a Doue hag a bez a zelle

ouz silvidigez ann ineo; pa ne deue ket ar garante da digerin he c'heno d'ehan, he amzer a oa da bedin sioul a galon pe a c'heno. Awecho e prenné war-n-ehan enn he gampr, hag e chome eno, hed ann amzer, hep na debrin na evan. Eur weach e oe evel-se pemp devez, ha seiz eur weach all. Tud he di a iaz nec'het war-benn ann amzer-ze, a gredaz gant-he e oa maro, hag a iaz da laret ho nec'h da Eskop Landreger. Dont a eure ann Eskop da Gervarzin, hag eunn nebeut chaloniét gant-han; mes, o vean ne oad ket evit digerin ann or, Ervoan Gonan, breur kaer e oa d'ar Zant, a dorraz ar prenestr, evit gwelet petra oa c'hoarveet. Sant Ervoan e oa gant-he beden. Gwall c'hlaç'haret e tiskoeaz e oa da vean bet lemet diwar he beden, ha d'he vreur kaer a laraz evelhenn : — Me a garje e vije deut, evit hirie, eur c'hlenved braz da derc'hel ac'hanoc'h er gear. — Hed ar seiz de-ze e oa bet, hep nep mar, maget gant ann Ele euz bara ann env, rak da welet d'ann holl, e oa freskoc'h ha flammoc'h, evit pa vije bet bemde o tebrin

ouz eunn dol karget gant ar gwellan mieujo.

Kement tamm amzer a chome gant ar belek santel goude ober he garg, pleal gant he bevien hag he bedenno, a oa holl evit ar studi hag al labour. Bueo ar Zent e plije dreist holl d'ehan lenn; historio a denne anhe evit he brezegenna, hag evit-han he-unan skouerio mad da heulian. Goud a reomp zo-ken, dre desteni skler abad Bear e oa Per he hano, en doa skrivet eul levr hanvet *Bleunio ar Zent*. Didalvean tud a oa re ann amzer-ze, da vean lest da vont da goll eul levr *Bue ar Zent* groet gant eur Zant! Evit kalz e karjenn e vije adkavet levr sant Ervoan. Eunn dalvoudegez vraz e kred d'in e oa el labour-ze. Eur gir ar gwellan eo he-man laret gant sant Zenon : — Dre levro ann dud koz, ec'h anaveomp ho doareo mad, ha dre ho doareo mad, ar re euz ho levro hon euz kollet.

Setu-aman eunn testeni hag a ro da anaoud e berr komzo, bue guzet sant Ervoan, gwelloc'h evit hini all e-bed, hag a laka dindan

hon daoulagad, heur hag heur, ann obero mad e oa leun he devejo gant-he. Jofroy Loanno, person ar Roe'h, ha Jofroi ann Abati, prokuler Iliz Landreger, a laraz stard ann eil d'egile, tri bla kent evit maro sant Ervoan, hag e-pad ann tri bla e tale'hjont ho daou d'ho gir, e teujent bemde, seped ar zadorn hag ar zul, pep hini dre he hent, da Gervarzin, evit klevet, a c'heno ar Zant, eur gentel war ar Skritur sakr, ha kemer skouer diwar he gomzo hag he vue zantel, da vevan gwellan a helljent evel-t-han. Sant Ervoan a overnie gwell veure; goude he overn, e re d'ann daou Jofroi ho c'hentel war al levro zakr; ann aluzon a roe neuze d'ar beyien a vije eno, ha bete kreste e prezege komz Doue d'he. Da greste e re he bred treut ha kri, ha goude ec'h ee d'he gampr da lenn ha da bedin. Da heur ar gouspero e teue e traou; he vreurial a deue da laret war-enn-dro gant he vinioned, ha bete noz e roe d'he he alio hag he brezenno skoueriuz. Ha pa vije ar c'houlz d'ar re all da vont da gousket, evit-han e kroge amzer ar beden hag ar zao

kalon etreze Doue, beteg en em goll enn-han.

Devejo leun e-gwirione eo ar re-ze, hag e oa ann Ele hag ann dud da vean souezet gant-he, rag ne oa nep pennad anhe na vije da Doue pe da nesan.



PENNAD IX.

Sant Ervoan a laka iliz vraz Landreger e stad vad.

Eur Chapel a zao e Kervarzin, ha leveo a stag out-hi.

He Destamant.

ENN amzer sant Ervoan ne oa ket iliz vraz Landreger eunn iliz gaer, pell ac'hane; gwall fall e oa deut da yeon; a-hend-all e oa bihan, groet er c'hiz koz, teval ha volzet gant plunken; sant Ervoan a re poan d'ehan he gwelet, hag a lekeaz enn he benn ober eunn all gant-hi. Goab a re kalz anehan; hen avad e oa he holl fiars e Doue hep-ken, hag ho lezaz da laret. Mont a eure enn dro, da di ann Duk, Otrone he balez ha da di Otrone all ar vro; ho alian a re d'eunn dra ken kaer; ann Eskop, ar chalonied, personed ha beleien ann eskopti a c'honeaz ken brao ha ken kaer ma ne oe den, na braz na bihan, na roaz he damm gant grad vad; a bep tu e oe galvet miche-

rourien, hag e berr amzer e oe gwelleet ann iliz-ze, ha Doue a reaz eur burzud braz da diskoe e plije kalz d'ehan al labour a read: Sant Ervoan a deuaz da c'houde e oa gwe ar re gaeran e koajo Rostren; raktal ec'h eaz da gaout ann Otro Per Rostren, da c'houlenn out-han eunn toullad gwe, ha vete en doe da gemer ha da dibab ar pezh a we en doa ezom.

Sant Ervoan hen trugarekaaz hag a iaz d'ar c'hoad; dibab a eure meur a ween gaer, ho diskar hag ho merkan a reaz ive. Per-vuiñ eo leun ti ann dud vraz a dud hag eo fall ho zeod; eunn nebeud euz ar re-ze ho doa klevet ar Zant oc'h ober he c'houlenn d'ann Otro, hag e vije bet ho c'hoant ma vije dinac'het out-han adalek neuze ar pezh a c'houlenne, hag gant komzo kaer kaset d'he vro; dirag ar Zant ne gredjont ket digerin ho geno. D'ann de war-lerc'h avad e larjont d'ann Otro: — Gwall diaviz oc'h da lezel ann trufler-ze da laeraz ac'hanoc'h er stumm-ze; hen-nez, digare sevel iliz Landreger, a ra ialc'h diwar ho koust; e tu all eo eat d'ar

vete e oa roet d'ehan; ha diou weach mui a we, hag ar re gaeran e oa er c'hoad, en deuz diskaret, evit ne oa ezom evit ann iliz-ze. — Re vuhan e kredaz ann Otro da c'hevier ann dud diroll-ze; droug ac'h eaz enn-han enep d'ar Zant; ha pa distroaz d'hen trugarekaat, e oe krozet rust gant ann Otro, kanet zo-ken pouil d'ehan, hag e komzo direiz-meurbed.

Sioul braz ec'h eaz ann heskin-ze gant ar Zant; gir e-bed na laraz, nemet ma roe ann Otro, evit enor eunn Doue a oa pinvidik ha galloudek d'he baean, ha kammed na c'houite da baean ann dud a gare rein evit sevel ilizo d'ehan hag ho greian; a-hend-all ne oa ket gwir ar pezh a oa laret d'ehan, hag enn de war-lerc'h e tiskoeje d'ehan n'en doa ket kemeret eur wehen hep-ken mu? evit ne oa ezom evit ann iliz, da lavar ar vicherourien a oa gant-han. D'ann de war-lerc'h, goude ma oe bet overn e chapel ar c'hastel, setu sant Ervoan hag ann Otro Rostren da vont d'ar c'hoad, tud all hag ar vicherourien ouz ho heul, ha da welet ar gwe a oa bet diskaret ha merket; ha war

gev ann holl we a oa bet troc'het enn de diagent, e kavjont — tra vuzuduz — e oa deut enn nos-ze taer wehen all kaeroc'h kalz evit ar gwe a oa bet troc'het; ha mar boa bet diskaret ugent gwehen, e oa bet savet tri-ugent enn ho lec'h. Ann Otro Rostren test euz ar burzud-ze, en em dolaz da dreid sant Ervoan, a c'houlennaz he c'hras digant-han, hag a laraz d'ehan kemer gwe, ar pezh holl en doa ezom. Ken braz burzud hag hen-nez a c'hoarveaz e-kenver ar mestr kalve en doa marc'had da ober iliz vraz Landreger: he holl dreucho ha pejo koad all en doa troc'het daou droatad re verr; diwar-ze setu ar paour keaz kouet e dizesper, ha c'hoant d'ehan d'en em grougan. Enn he anken vraz ec'h eaz da gaout sant Ervoan, ha dirag ar Zant hag eur bobl vraz, eur weach ha diou e lekeaz he neuden war he goad, ha ne gave anehan nemed evel m'en doa laret. Sant Ervoan hen dic'hlaç'haraz, hag o vean izeleet he benn eunn nebedik, e pedaz Doue evit-han hag e laraz d'ehan: — Ma mignon, kemeret ho neuden, ha sellet eur veach c'hoaz; marteze oc'h eat

a dreuz. — Sentin a eure ouz ar Zant, hag he holl bejo koad a gavaz daou droatad hir-roc'h evit ne oa red.

Meur a verk all a roaz sant Ervoan euz he aked hag he galon vad da enorin ann Otro Doue, ha dreist ar re holl, ar chapel a reaz da zével war douaro Kervarzin, dindan patroniach ann Itron Varia ha san Tual. Sant Ervoan he-unan eo en deuz lezet gan-imp histor ar chapel-ze enn he destamant. Alan Bruk a oa enn amzer-ze Eskop Landreger, hag hen eo a ziellaz ar pezh a oa bet groet gant ar Zant. Ann iliz vihan, ha ti d'ar beleg a dlee bean staget out-hi a oe savet gand dinero ar Zant, war eunn douar hag a deue d'ehan lod a du he dad, ha lod all a du he vamm, hag ann Eskop, goude bean kavet mad ann treo evel ma oant bet lekeet gant ar Zant, ac'h hanvaz ar Zant he-unan da veleka d'ann iliz vihan-ze.

Setu-aman ann testamant ken doujuz ha ken humbl en deuz ar Zant lezet gan-imp.

« Me Ervoan, mab da Helouri, belek
« daoust d'am disterved, ann divezan a ve-
« velien Jezuz-Krist, oc'h ober ann testamant-

« man, a fell d'in; hag a ro ma grad vad, ma
« vo ar chapel, bet groet ha staget leve out-hi
« gan-in enn enor d'Hon Otro Jezuz-Krist,
« d'ar Were'hez Evuruz Mari, he Vamm, ha
« d'ann Otro san Tual, gant ann ti a zo tost
« d'ehi, hag am euz savet ive gant ma dinero
« ma-unan, enn eul loden douar digoueeet
« gan-in a beurz ma zad Helouri, al loden
« douar-ze hag eunn all a zo deut d'in a du
« ma mamm hag a dalc'h ouz eben gentan,
« lec'hiet ann eil hag eben e parrouz ann
« Otro san Tual, ar Vinihi; douaro hag
« am euz dre wir digoue herve al lezenno
« hag ar c'hustumo a ren parrouz ar Vinihi,
« (hep na oa, oc'h harz ouz-in a-hend-all, na
« lezen Roue, na lezen parrouz, na kustum
« vraz ar vro, ar c'hovizour evuruz san Tual
« o vean bet frankiz a gement-se gant gras
« Doue); douaro hag am euz hanvet dija evit
« ho stagan ouz ann iliz vihan bet kaoz anehi
« hueloc'h, enn amzer ha gant otre Alan Bruk
« (Doue da veo gant he ine) Eskop Landre-
« ger, hag en deuz dre lizero sklear, c'hoaz
« lekeet, gant ann douaro-hont, ar somm a

« dregont livr da gemer diwar deok douaro
 « ar C'henkiz, hag a roan a neve, evel ma-
 « maint hirie ann de, gant ann douaro han-
 « vet arok, ha gant al leveo hag ann treo all e
 « teurveo, e mad ho ineo, tud all hag ho
 « digemeran da gaout ho lod er mado spe-
 « reduz a dle bean groet el lec'h hanvet aze,
 « e teurveo ann dud vad rein evit kendalc'h
 « ann iliz vihan hag he beleien, ha kendalc'h
 « am ovis santel enn-hi da vikenn; ma vo,
 « a laran-me, ha ma chomo ann treo-ze, evit
 « bikenn, da veanevit ar pezh int roet. »

« Me a fell d'in ive, evit enor braz san
 « Tual, ma vo Eskop Landreger a evez, evel
 « ma hen goulenn he garg out-han, da gen-
 « derc'hel ann donezon-ze a enep kemend
 « hini a oufe stourman out-hi, neuz fors piou
 « a ve, kar pe estren, ha ma kemero war
 « beadra san Tual, evit kreskin, mar kav
 « mad hen ober, gopro ann dud a iliz a gargo
 « da ober ann oviso zantel el lec'h-ze, bete
 « ma voint evit bevan diouz ho stad, ha ze a
 « zo dleet striz. Ouz-penn da ze, mar chom
 « netra war ma lerc'h (n'on ket e gortoz a

« chomo nemed eunn toulladik levro a viran
 « evit skouer vad ar bobl gristen), me hen
 « ro d'ann iliz vihan-hont ha d'he beleien,
 « hag a ra d'he, gant m'ho do ar gopr lekeet
 « d'he aze arok, kark da vean hi ho-unan o
 « chom enn ti a zo groet evit-he. Plijet gant
 « Doue kas ann donezon-man da vad, ha
 « rein ar vue a bado da holl vikenn d'ar re a
 « dougo dorn d'ehi. »

« Groet d'ar gwener war-lerc'h goel san
 « Per chadennet, e bla ann Otro, daouzek
 « kant seitek ha pevar-ugent. »

« Hag er pezh a zell ouz al loden-hont el
 « leveo a deu d'in abeurz ma zad ha ma
 « mamm, ma wio ann holl gristenien, on
 « perc'hen d'he gant grad Eskop Landreger—
 « bennoz Doue gant he inc — grad a oe roet
 « d'in, ne ket em hano-me, mes enn hano
 « ann iliz vihan, hag abalamour d'al leve
 « staget out-hi, ha ze holl pa oe groet ann
 « iliz vihan-ze, da c'houde eo, e bla ann Otro,
 « daouzek kant tri ha pevar-ugent. Rak-se
 « o viret ar berc'hennies-ze, kouls hag o
 « terc'hel ma vo groet gant-hi evel mac'h eo

« laret aze arok, ne fell d'in ober nep gaou
« euz hini euz ma c'herent nesan. »

Bec'h e oa da hano sant Ervoan bean eat war roll ar Zent, ma teuaz iliz vihan ann Itron Varia Gervarzin da vean chapel Sant-Ervoan. Eul lec'h e oa hen-nez, ha c'hoaz eo, gwelet gant ar bic'hirined, ne ket euz a Vreiz hepken, mes ive a-veur a vro, a deu di, hag a gav eno ar graso ho deuz goulennet e gloar Doue, hag enn hano he Zant a danva enn enno ann eyurusded a bado da vikenn, war-eunn-dro gant ann holl ineo eyuruz.

Testamant sant Ervoan a weler war unan a vogerio ar chapel. Kalz eo bet fellet d'he, evel ma lar ar Zant ec'h helled ober, lakaat ho zammik gant tamm braz ann hini en doa savet ar chapel evit kaout ho lod er graso hag er mad a zo groet enn-hi d'ann ineo. Er bla pevarzek kant triouac'h, e oa groet war ann tour a uz d'ann or dal, eur gorsen ar vravan hag ar skanvan; war-dro ar c'houls-ze ive e oa lekeet disparti etre ar santual ha korv ar chapel gant eur gleuden goad kizellet ar c'haeran, ken kaer hag ann dantelez hag ar zouezusan

brouderez. Tamm ha tamm ar chapel a greskaz hag a iaz da iliz. Tost d'ann iliz e oa groet eur chapelik kuruz karget holl gant skeudenno pic'hirined, hag hi gwisket evel ma oa gweach all ar c'hiz er vro; e-kreiz ar chapelik e oa eunn dol vin; war-n-ehi e vije lekeet relego sant Ervoan, pa deue Landregeriz e prosession da Gervarzin; harpet e oa ann dol gant daou vin braz, hag etre-he e oa eunn digor, ha dreiz-han e tremene ann dud o plegan ho fenn dindan eskern ar Zant. Er vered e zo c'hoaz eur groaz er stumm ar wellan; e tu enep da skeuden korv hon Zalver e weler skeudenno bihan ann Itron Varia, san Tual ha sant Ervoan. Treo koz e oa ar re-ze holl ha treo kaer.

Aboe ar bla triouac'h kant unan, chapel Sant-Ervoan a zo deut iliz parrouz Ninihi-Landreger. Bete neuze, hag a beb amzer e oa ar barrous-ze unan a daer farrouz kear Landreger, hag e oa hec'h ovis ouz unan oterio ann iliz vraz.

Mes n'e deuz ken a gorsen, dispennet eo bet; kleuden ann Oter a zo kouet e

poultr ; ar chapelik gant he mein kizelet a zo bet diskaret, hag ann dol binvidik a zo dizolo dindan ann holl amzerio. N'euz netra ken euz ann treo kosan. Evit kaout sonj, eo red da spered ann den en em das-tum, rak he lagad na gav mui roujo koz ann den santel-hont leun a furnez, a wiegez hag a garante; hen a droe he gein d'ann enorio, ha war he lerc'h e vije eur bobl tud o sevel o mouejo gant douj etrezek enna-han, ha neb hano na wient d'ehan nemed he-man : *Belek santel ann Otro Doue.*



PENNAD X.

Maro Sant Ervoan.

ENN divez sant Ervoan brevet ha kollet krenn he nerz gant-han, muioc'h kalz gant al labour hag ar binijen evit gant ar gosni, a wiaz e felle da Doue echuin he boanio hag hen lakaat enn he lec'h diskouiz. Hed he vue evit gwir, n'en doa bevet nemed evit mervel ervad, ha koulskoude, diwar neuze e tale'haz mui ouz mui he spered gant ann tremen divezan-ze.

Er bla trizek kant tri e oa kement-man, e deio divezan a viz Ebrel. E kastel Koatredan e oa ar Zant, enn ti ann itron Keranraiz : — Eur pennadik zo, eme ar Zant d'ann Itron-ze, en em gavan gwall falleet, hag e kred d'in on daro da vervel; joa vraz eo gan-in, mar d-eo Doue hen goul. — Tevet gant-se, a laraz ann Itron estlammet; goasan tra e ve hon-nez d'in

ha da galz all a zo gwell euz ho toareo mad hag euz ho kelenno zantel. — Dudi e ve gan-hac'h, e teuaz gant ar Zant, ha gant ann holl, ma ho piye trec'het hoc'h adversour pe hoc'h enebour. Ac'hanta, me ive eo joa gan-in mervel, rak kredin a ra dija gan-in em euz, a drugare Doue, goneet war ma enebour, ha ma vo ma maro ma gonid divezan war-n-ehan.

Abad Bear a deuaz d'he welet er zun gentan a viz Mae, hag heñ kavaz gourveet war he goz vallin, du gant ar poultr hag ar fank; dindan he benn e oa daou levr goloet ha keinet, evit he benn-wele. Ezom en doe sant Ervoan da ober eunn dro, hag e-keit ha ma oe er meaz, ann abad a dolaz eunn tamm plouz war ar gwele diyallo-ze, rak ne oa nemet nebeut ken war-n-ehan, hag eunn dornad a lekeaz el lec'h ma vije penn gwiridik ar Zant; ha sant Ervoan, pa distroaz, a lemaz ar plouz fresk, hag a lekeaz he wele adarre evel ma oa arok.

D'al lun, trizek a Vae, e teuaz ann Otro Jofroi Tournemin, Eskop Landreger, da Gervarzin, da welet ar Zant, ha gant-han eur

chaloni-bennak ha meur a den a iliz. Krozal karantek a eure ann Eskop d'ehan, d'he welet gourveet war ann douar he diliad holl gant-han hag he voto ler enn he dreid, hag a laraz d'ehan e oa re diez er stumm-ze. — Otro'n Eskop, eme ar c'hlanvour, ha me en em gav gwelloc'h amañ evit e nep lec'h all. — Evel-se a laraz c'hoaz da vestr Ervoan ar C'hognat, eet war he lere'h da varner iliz Landreger, hag hen pede brao da lezel kreskin ar plouz dindan-han : — Ne dalvean ket ann dra-ze, ha d'in-me eo trewalc'h ar pezh am euz dindan-on. —

D'ar merc'her, de diagent ar Iaou-Bask, e c'hoantaaz mont d'he chapel hag overnian; ken klan e oa ha ken fall ma ne oa ket evit chom enn he za, hag abad Bopor ha Dom Alan Bruk, Arc'hdiakr Landreger e oe red d'he hen harpan hed ann overn. E oa o paouez lemel he wisko belek, pa welaz er chapel groek Remond Grosill euz ar Roc'h, e oa o kovesaat gant-han, hag a oa daro da dispakan; goulenn a eure out-hi petra fellfoa d'ehi. — Klevet em euz, Otro, emehi, ne oac'h ket iac'h, ha koulskoude c'hoant

braz em he da govesaat. — War ze ec'h eaz enn he gwaze, hag e kovesaaз ar c'hroekze.

Perdiskaret e oe gant ann tol-ze; mont a eure d'he wele, adarre hep diwiskan neuden di-liad, eur min dindan he benn, he votoler enn he dreid evel ar beacher, hast war-n-ehan da welet goulou de evit echuin he hent, ha digoueout enn he vro. D'ar Iaou-Bask e reaz he govizion divezan gant Jofroi Loanno, Person ar Roc'h. Hed ann de-ze, ne baouezaz sant Ervoan da brezeg komzo Doue da gemend hini a oa enn dro d'ehan. Diwar he wele a varo, evel Jezuz-Krist diwar he groaz, e roe he gelenno divezan d'ar bed.

Adalek ma oe klevet e oa klan, — buhan e oa eet ar c'helo — ar re holl hen enore ha hen kare, hag er penn kentan, he barrisioniz a gouee gant hast hag a vagado e maner Ker-varzin; ar Zant, pa welaz kement-se, a gasaz raktal da Louannek Jabret, unan a vibien Rivallon, da difenn da Louannegiz dont d'he welet, ha da laret d'he e oa brao, a drugare Doue. D'ar gwener koulskoude daou

euz ar re gentan ar barrouz, Gwinavarc'h Haranen ha Derien Koadsalio, a deuaz d'he welet. Gwinavarc'h a laraz d'ehan : ne ket gwelleet d'hac'h, Otro, evel ma lare ho mevelien. — Doue a oar, eme ar c'hlanvour e par ar maro, ha neuze e savaz he daouarn juntret war-du eur grusufi a oa dirag-han.

D'ar zadorn, e klevet laret enn dro d'ehan e oa red mont da gerehet eur medesin : — Nann, nann, eme-han, bikenn medesin e-bed n'am bo nemed Hon Otro Jezuz-Krist. — Ar Zalver biniget a oa he holl fians.

Enn noz-se, e oe nouet gant Dom Hamon ar Gorek, person ar Vinihi. Bean a oa eno kalz a dud a iliz ha tud all; ar barner, Ervoan ar C'hognat; Jofroi ann Abati, prokuler ann iliz vraz; Ervoan Rachel; neuze Iann Gerangoz, mignon he holl vugale; mevelien he di; Dathovada hag hec'h holl vugale, ann tiad tud en doa kemeret ar belek kalonek evit he vugale. Gant eunn doujans kalonuz ha gant ar fe ar c'hrevan e kemeraz he zakramancho divezan. He zello leun a garante hag a fians humbl na distage ket diwar ar grusufi a oa

bet lekeet dirag-han enn digor diabarz toull ar prenest. Sikour a re he-unan ouz al lido pe seremonio zantel, hag ar girio divezan a laraz euz pep peden.

Raktal goude ann noüen e kollaz ar gomz. He daoulagad bepred war ar grusufi, gwech e juntre he daouarn, gwech a re sin ar groaz war boull he galon. Da strink kentan ann de, e oe gwelet evel o venel kousket. Maro e oa. Ar zul, naontek a viz Mae, e oa ann de-ze, er bla trizek kant tri. Hini eaz ar merko euzuz a skriv ar maro, evel he ziel war dremm ann dud all, hini na oe gwelet anhe na war he vuzello, nag enn he fri nag enn he daoulagad. Enn he veo e oa drouklivet ha treud he fas; goude ma oa maro, e teuaz da vean evel pa vije o vouse'harzin sioul, kaeroc'h ha muioc'h ru-roz evit e-keit ha ma oa beo.

Eur goel e oe he interamant. Hizvraz Landreger a c'houlennaz ann diwisko zantel-ze, evel eunn dra hag a oa d'ehi. Ar veleien a dougaz war ho diskoä ar c'horv, diliad paour hag all, hep kemer amzer d'hen archedin. Eur bobl divuzul a oa enn dro d'he gant goloio braz

koar ha gant piledo, hag a bep kammed e oa red d'ann dougerien paouez da gerzet, evit lezel ann dud da boket karantek da dreid ha da daouarn ann hini maro.

Enn iliz, e oe diwisket he vantel war-var hag he zae d'ehan, evit he lienan. Ar bobl a lekeaz ann diliad-ze a dammo, rak pep-hini a felle d'ehan kaout he releg. He c'houriz glan hag eur pezik bihan euz he roched ac'h eaz gant ann Itron Pestien. Ar roched hec'h-unan a oe klenket gant enor e tezor ann iliz vraz.

E-kreiz korv ann iliz e oe lest ann arched dirak daoulagad ann holl. Klevet a red difronk hag hircvoudo ar bevien, ar glaskerien vara, hag ann dud namet e oa kollet ho difenn hag ho fourveer gant-he. Re vihan a oa ann iliz evit ar bobl a deue a bep tu hag a greske bep heur. C'hoant ho doa holl da boket d'ann arched-ze, da stokan ho dorn out-han da vihanan, ha gwalinier, ha chapeledo, ha brabraoio, evit dre-ze ho sakran hag ho binigan; rak goude eur vue kel leun a obero zantel hag hini Dom Ervoan, ne oa den n'en doa

ar greden stard e oa dija er baradouz e-mesk ar Zent.

Goude, ann de-ze lezet gant ann dud a iliz, ann noblanso, bourc'hijen hag ar bobl, da rein ho enorio hag ho doujo d'ar Zant, e oe douaret ar c'hory biniget e kroec'h ann askel e-tu ann aviel pe ann hanter-noz da gory ann iliz, el lec'h ma enorer c'hoaz hirie he ve meuleuduz.

S

PENNAD XI.

BURZUDO

groet war ve Sant Ervoan ha dleet d'he beden.

Doue, evit mad ann dud, a ra burzudo pe miraklo, evit kennerzan prezegerez ar wirione, pe evit disklerian santelez unan bennag he zervijerien. Ac'hane ann iliz n'e deuz biskoaz skrivet hano den, ha pa vije merzer, war roll ar Zent, ken a c'houde eunn nebeut burzudo groet enn he hano, ha bet testeniet mad. Mes ma zo ezom burzudo evit rein gwir anaoudegez euz a vertuio ann holl Zent, brasoc'h ezom a larfe eunn den a oa c'hoaz anhe, evit diskulian d'ar bed holl santelez Dom Ervoan Helouri : Perak-ze ? Rak n'en doa ket bet ar vrud a zo oc'h heul pe ar verzerenti, pe ann obero braz, pe ar c'hargo huel ; hed he vue e oa bet enn eur vourc'ha-

den-bennag a Vreiz-Izel, hag he vertuio, kouls eo laret, n'ho doa skleriet nemet dre fors bean bet kuzet gant-han. Mes Doue en em gargaz da vrudan hano he zervijer, ha ken braz ha ken stang e teuaz ar burzudo war he ve, ma zo nebeud a Zent hag a ve digoueet kemend-all war ho hini.

Bec'h e oa d'ar be bean bet klozet war gorr sant Ervoan; e oad c'hoaz enn iliz vraz Landreger, dirag eur bern divent a bobl, o kanan he eizved, pa oe gwelet eur potrik iaouank a barrouz Langoat, Gion a read anehan, dall meur a vla oa, hag a bede a greiz he galon, pleget he benn a uz d'ar be. Enn eunn tol, e-kreiz ann oviz, e sao ann dall iaouank enn he za; deut eo ar gweled d'ehan. Ar bobl estlammet a dol aluzono braz-meurbed enn daouarn ar bugel gwelleet dre vürzud, hag lie-unan a ia d'ho c'has da droad ann oter, e-keit ha ma ver c'hoaz gant ann oviz.

Ar burzud-ze na oe nemed ar c'hentan a galz ar re all ken souezuz hag hen; dleout a rajemp marteze o skrivan holl aman; mes da re vraz ec'h afe al levrik-man, hag enaouuz

e oufe ze dont d'al lenner; trewalc'h e vo ober eunn dibab e pep rumm.

E rumm ar burzudo brasan, ar renk kentan a roer da distro tud varo d'ar vue. Ac'hanta laret a rear n'euz sant e-bed, bete vreman, hag en defe digaset kel liez den maro da veo, ha sant Ervoan. Bete pevarzek a zo diout-he.

Er bla ma varvaz hen Zant, da laret eo d'ar seiz a viz Gwengolo, trizek kant tri, e varvaz e parrouz Prat, war-dro eunn taer heur goude krete, eunn den iaouank e oa Alan he hano, goude bean bet eiz devez gant eunn derjen-hep paouez. Pa oe maro, e teuaz eur bern goad euz he gorr; reud ec'h eaz evel eur vaz ha ien evel ar skorn. Tennet e oe euz he wele, klozet e oe he daoulagad ha branello he fri d'ehan, hag evel mac'h eo ar c'hiz, ann amezeien a deuaz da dremen ann noz enn he gichenn. War-dro ann hanter-noz, mamm ann den maro, eur paour keaz intanvez kollet gant-hi he mab penner, en em dolaz d'ann daoulin ha war boez he fenn a laraz : — O sant Ervoan viniget, ma mab a c'houlennan digan-

hae'h. Roet anehan d'in, ha me, hed ma holl vue, a iuno pep merc'her ha pep sadorn; me a iuno pep gwener diwar vara ha dour, ha bikenn neuden lien na dougin nesan d'in. — D'ann de war-lerc'h ar beure, e oa enn ti tremen daou c'hant den deut d'ann intera-mant; ha pac'h ead da archedin ann hini maro, e welaz he vamm anehan o trein etrezek-hi, hag hen klevaz o c'houlenn eur bannac'h dour digant-hi. Neuze a laraz d'he vamm : — Eul labour denn ac'h euz roet d'in. — Dre c'halloud sant Ervoan e oa distroet d'ar vue. Pemzek vla e oe c'hoaz beo goude, hag evit merk euz ar burzud, e chomaz kloz ha prennnet unan euz he daou doull fri a oa bet gwasket war-n-he, goude ma oa maro.

Gant eur gwestl da zant Ervoan, e oe ive distroet d'ar vue, Tifen, merc'h d'eunn Alan, a barrouz Plouenan, enn eskopti Leon, taget d'ann oad a dri bla gant eunn derjen vouzar, hag Amis, merc'h da Iann Vriant, dijentil a Beurit, taget ive da dri bla gant klenved ar fall. Eul leve a daou diner pep pla

en doa laret ann dijentil a raje d'ar Zant. Beo e oa c'hoaz ann diou blac'h bihan er bla trizek kant tregont, ha Tifen a deuaz d'ober he lavar dirak kannaded ar Pab. Ar re-man a welaz ive Remond ar Rouz, a barrouz Bourfriak, bet brevet he gorv d'ehan gant milin Herri Duault, ha bet digaset d'ar vue gant sant Ervoan, diwar beden Jofroi Vorvan. Chomet e oa gant Remond meur a c'hrezen euz he c'houllo. Pevar dest a roaz evel gwir, goude bean gwelet gant he daoulagad, eur burzud henvel ouz hen-nez, groet e-kenver eur bugel hanvet Iann, kouet dindan rod milin Montroulez, hag e-touez ann testo e kaver tad Iann hag he vamm. Eur bugel, rak ar vugale, herve, e oa sant Ervoan trugarezuz-meurbed enn ho c'henvver, eur bugel a oe lac'het mik gant eur marc'h. Douget e oe ar c'horv bihan war ve ar Zant, pac'h ead enn eunn overn bred enn iliz vraz. Divend a dud e oa enn-hi; e oa ar belek gant ann Aviel divezan, pa deuaz ar bobl a eur wouez, evel eunn tenn, da grial a dolado : — Sant Ervoan ! Sant Ervoan ! — Evel divunet e oe ar bugel gant ar mouejo-

ze; digerin a eure he daoulagad, hag he-unan a laraz ne oa drouk e-bed ken war-n-ehan. Enn iliz vraz c'hoaz e c'hoarveaz dirag ann holl eunn henvel burzud gant Jenevret, merc'h da Rivallon, euz a barrouz Sulliak. Ar plac'h keaz-man e oa kollet krenn he fenn gant-hi, ha ken drouk e oa eet da vean, ma oe red mad erein he zreid hag he daouarn d'ehi, rak skrapat ha kregin a felle d'ehi ober evel eul loen goue. Skouiz e oa he zad o vont euz ann eil di Zant d'egile gant-hi, pa deuaz enn he spered he digas da ve sant Ervoan. Seiz devez war ho hed e oe he verc'h eno, ereet hec'h ilizi out-hi evel diagent. Enneizved devez e varvaz, ha neuze e oe disereet. War-dro eunn diou heur goude krete ec'h helle bean neuze. D'ann de war-lerc'h, goude ann overn bred, pa oad o lienan anehi, grwiet e oa zo-ken al lienan beteg hanter, e teuaz ann tad da westlan he verc'h da zant Ervoan, hag ar verc'h a distroaz d'ar vue, a zavaz enn he za sonn enn he lienan, hag en em westlaz ive hec'h-unan. Gant be ar Zant e lezaz, evit he gwestl, al lienan hag ar piledo koar e oa bet war elum e-kichen

he c'horv maro. He zesteni a reaz hec'h-unan kouls ann enklask; evit hec'h histor, ne wie anehi nemet dre vean he disket gant he zad; euz eunn dra hep-ken e doa sonj, da vean en em gavet enn noaz, rollet he lienan enn dro d'ehi, ha grwiet beteg hec'h hanter.

Eunn intañvez baour a barrouz Priel a bellae euz a Vreiz, rak kernez a oa enn-hi, hag a valee bro gant eur mab dek vla, hag eur verc'h eunn tammik muioc'h oajet. Ann intañvez e oa Sabinan hec'h hano. He mab Ervoanik a varvaz e kear Anger, gant ar boan hag ann dienez, enn noz ar Iaou-Gimblid. D'ann de war-lerc'h, ar vreiziaden, gant korv maro he mabik war he diouskoa, ac'h ee dre gear, o kestal hag o c'houlenn peadra da bre-nan eul lienan hag eunn arched da douaran ar bugel. Mes allaz! gant lido ar zun zantel e oa ann holl, ha den na zelle ouz ann dud paour ha glac'haret-ze; ha Sabinan geaz n'hellaz ket zo-ken kavout eur belek da interim he mab. Setu tremenet e-biou d'ehi Gwener ar Groaz, ar Zadorn Fask hag holl veurevez ar Zul Fask. Koulskoude, e-keit ha ma oad gant

ar gouspero, ha ma oa ann *Alleluia* enn' geno ann holl, ha joa gant-he, e teuaz enn penn ar vamm baour pedin Zant he bro a lekeed kemend a vurzudo war he hano : — O sant Ervoan, eme-hi, me a ro d'hac'h ma mab, hag a lar rein d'hac'h eur c'holaouen ken hirr ha ken teo hag hen. — En em lakaat a eure da ventan ar c'horvik maro, ha ne oa ket echuet mad gant-hi, ma welaz e teue tamm ha tamm bue enn-han. Distrein a reaz ar bugel d'ar vue, ha beo e chomaz bete goelio ann Nedelek er bla-ze.

Aimerik, mab d'ann Otro Hamon Kergezai, euz a noblans kear Lannuon, e oa eet d'en em woalc'hin enn gwaz-vor al Leger gant unan euz-he vinioned, krennad eunn daouzek vla, evel-t-han. Enn eunn tol e oe kuzet Aimerik gant ann dour. Eunn den a dremenaz hag a diwiskaz he diliad, hag a blunchaz war-n-ehan.

Poan gollet e oe he hini; dont a reaz enn dour evit diskouizan. Eunn eil gwech na dalveaz ket mui. Goude eunn drivet esan, e kavaz ar bugel, ha maro e oa. Pell e oa ac'hane

da di he dad. Lekeet e oe ar c'horv war eur c'hraz, ha douget gant kaon da Lannuon. Ne oa ket ar vamm er gear. Janned Kergezai, tintin d'ar c'hrennad, a zellaz piz, hi hec'h-unan out-han, hag o welet e oa maro mik, e oa o vont da lienan Aimerik, pa eruaz ar vamm. Ho-man ac'h eaz war benno he daoulin, en eur grial fors, hag e-mesk he daero : — Sant Ervoan, eme-hi, me a c'houlenn ma mab digan-hac'h, hag hen gwestl d'hac'h. — Ha raktal ar bugel a digoraz unan euz he daoulagad, a zavaz unan euz he daou dorn, hag a laraz : — Pelec'h eman ma mamm ? — Aman on, e kriad ar vamm; ha te, mabik, pelec'h e oaz-te eet ? — Hag ar bugel a laraz : — Me oa gant eunn Otro gwisket enn gwenn, hag en deuz tennet ac'hanon diouz ann toull e oann kouet enn-han. — Aimerik na oe ket he-unan da vean bet tennet euz ann dour hag ar maro, evit konfortin tado ha mammo glac'haret, gant ann Otro mad gwisket enn gwenn.

Setu-aman daou vugelik euz a barrouz Pleuvihan, bec'h d'he bean triouac'h miz :

Alan, mab da Ivon Kadio, a oa kouet enn eur poull; Iann, mab da Jannéd Vaur, kouet enn eur fanten a bevar droatad donder, torret he c'houk gant-han o kouean. C'hoaz e kavan: Gwill, mab d'ann Alan, euz a barrouz Garlan, beuet enn stank Porz-Meur, e-keit ha ma oad ho lakaat al lin da ogin; Roland, mab da Joffroi, beuet er Gendi, d'ann oad a c'houec'h vla; Herri ann Ollier, mevel eunn dijentil a Gerne, hag e oe diaviz awalc'h da vont d'en em walc'hin enn stang ar maner, goude bean tōmmet ar forn, hag a leuskaz eno he groc'hen. Dont a rejont ho zri dirag ar gannaded, ha gant ho geno ho-unan e rōjont testeni euz ho distro d'ar vue.

Evit klozan ar rumm burzudo-man, ne gomzin ken nemed euz a bevar elik bihan, mervet enn kov ho mamm, ha distroet d'ar vue dre bedenno sant Ervoan. Tri an-he ho deuz bevet pell, hag ar bevared, awalc'h da vean badeet.

Eur c'hroek dougerez a Gerand a deuaz da c'houde, dre verko anat mad, e oa maro he freuz. Er bla trizek kant seitek e

oa ze war-dro. Da zant Ervoan en em westlaz, ha laret a eure rein eur c'holaouen goar keit hag hi, mar teuje he bugel da hēlout kaout he vadeiant. Dont a reaz koulskoude war ve ar Zant, hag o tont enn iliz vraz Landreger, he bugel a verzaz pe a zantaz o tridal enn-hi, hag hi hec'h-unan a gwevnaz ken souezuz ma torraz prenn he gouriz, ha ma oe red regin he diliad a oa deut re striz. Daou viz goude, e c'hanaz beo-braz eur mab hag a hanvaz Gwill. Leun a vue e oa c'hoaz e trizek kant tregont.

Eunn Itron vraz euz a Eskopti Kemper a oa, pemzek te oa, e poan vugale, hep gallout ober he zro; ne oa nemed ar maro dirag he daoulagad. Ken skrijuz e oa ar gwentro gant-hi, ma oa eet du he c'horv; hag enn tu-hont, e doa c'hoaz droug ann urlo. He mamm he gwestlaz da zant Ervoan, hag eul leve a la-raz stagan ouz he chapel, mar c'hanje eur c'hrouadur da hellout kaout he vadeiant. Ar c'hroek iaouank a vanaz kousket, hag hep nep dorn den na poan e-bed, e teuaz gant-hi eur plac'h hag a oa beo, e kouls ann en-

klask; groet gant-hi eunn-dimi pinvidik, e veve er bed evel eur zantez, o iun, diou weach ar zun, diwar vara ha dour.

Eur c'hroek euz a Blouek a oa dougerez, ha maro, war a grede, e oa he freuz enn he daou goste; genel a eure eur potr hag o tont er bed na reaz nep sin a vue. Tremenaer heur e chomaz evel maro. Dont a reaz d'he zi eur c'hloarek, mignon d'ann dud-ze, hag a westlaz ar potrik bihan da sant Ervoan. Ha raktal setu ar bugel da ober he wic'h kentan; beo e oa c'hoaz da ober he-unan he desteni. — Eunn henvel tol a c'hoarveaz, enn Planiel, gant bugel Juzetan bet daou devez enn poanio braz, arok dispakan. Ar bugel maro, kent evit genel, a deuaz beo; na vevaz avad nemed eunnek te; rak na denaz, na netra all na debraz; ar vadeiant avad en doa bet, hag he vamm e teuaz he mennad gant-hi.

W

PENNAD XII.

Eil rumm Burzudo.

SANT Ervoan en doa minioned, e-keit ha ma oa war ann douar, Otrone Pestien, Keranraiz, Tournemin..... n'ho ankoaaz ket, eur weach eet enn evurusded, ha bet galloud ar Zent gant-han. Dudiuz-meurbed eo ann ere a vadobero, a bedenno hag a obero mad a stag ar re veo ouz ar re varo, hag Iliz ann douar ouz Iliz ann env hag ouz Iliz ar purgator.

Er bla trizek kant pemp, da viz Du, Iann Pestien, Païan Montevit hag eur pempzek a dudjentil all en em gave war-eunn-dro e maner Roskolor, kastel ann Otro Pestien, hag e troaz enn ho fenn mont da chaseal da enezen Teven, d'eul leo vor diouz ann douar. Stok e oa ar vag ouz ann enezen, pa zavaz eur gwall var-amzer. Ar sturier a wele e oa tost ar riskl; hag a aliaz distrein prim enn dro; he dremenedi e oe fae gant-he,

tud birvidik oa anhe; hi ho-unan a grogaz er reuio; terrin a rejont etre ho daouarn, gant nerz ar gwagenno. War greskin a ie ann avel; ar vag hep reuio a oa tolet ha distolet gant ar mor; eru e oa leun a dour. Ne oa nemed ar maro da c'horthoz. Neuze e teuaz ann dud-jentil da bedin Doue ha sant Ervoan, hag enn ho gwestl, e oa dont diroched ha diar-c'hen da ve ar beleg evuruz; ha war ann tol, e troaz krak ar vag a benn, hag enep mor hag avel, ec'h eaz war hec'h eeun a belec'h ma oa diblaset. Iann Pestien ha Païan Montevil a deuaz ho daou da destenian ar burzud groet enn ho c'henver, pemp pla war-n-ugent a oa.

Gwill Dournemin, Otro Hunaudai, ann hini e oa gwech all o sevel truajo ar Roue e Landreger, en doa od Hillion da dreuzin; eno e ve eur blenav vraz, pa ve bihan ar mor; mes ive ken prim hag eul luc'heden e teu ar mor war-n-ehi d'he goulouin. Ar mor a oa neuze o vrasaat. Kenseurted ann Otro Hunaudai n'ajent ket dre eno; re riskluz e oa. Hen a oe pennek, hag o rein eunn tol kentro d'he varc'h, setu-han war ann od; he varc'h ac'h ee prim, ha pri-

mo'h c'hoaz e rede ar mor d'he gad, hag abred e c'houtaz ann douar dindan treid he varc'h. Lintret e oe ann Otro d'ann traou ha beuet dindan ar mor, e-pad eunn hanter heur d'ann nebeutan; ar re oa o welet e krede d'he e oa kollet; he westlan a rejont da zant Ervoan; hen ive, e gweled ann dour, a bedaz a galon ann Otro Doue hag ann Otro sant Ervoan viniget. Diouz-tu kaer, hep ne oa evit goud penoz, e oe savet gant ar mor, digaset war var, hag azeet war dalbenn (lost) he varc'h a neuie anehan he-unan war-du ann douar; ann Otro a grogaz enn dibr hag a dapaz iac'h-mad ann od sec'h, gant ar greden stard, mar boa bet tennet euz ar riskl-ze gant Doue, e oa gras da bedenno ha da c'halloud ann Otro sant Ervoan eo e oa.

Eunn hevelep eurvad a c'hoarveaz gant Dom Herri Kergwenozed beleg, person Mantallot; he-man a koueaz gant he varc'h, diwar ar Pont-Losket, e rizier a oa don ha beuet ann douaro gant-hi tro-war-dro; gwestlan a eure da zant Ervoan eunn overn ar bla hag eul leve a daouzek diner, hag e oe soveteet. He-

man eo ann eil vurzud groet el lec'h-ze e-kenver Herri Kergwenozed hag he dud; rak n'euz ket ankoet al lenner e oa person Mantallot mab d'ann izinier-hont a reaz sant Ervoan, beo neuze, burzud treucho Pont-Losket enn he vad.

Ann Otro Alan Keranraiz a oa o veachin war douar Gwened gant Tifenan Pestien he itron, ha kalz a noblanso all. Eur wazik vor a oa da dreuzin. Ann Otro a reaz da gentan lestran he varc'h-brezel gant eur mevel; eur c'habel e oe aket da dol war daoulagad ann aneval, evit na spontje ket. Pell e oad dija euz ann douar, pa oe red, evit ren ar vag ervad, ober tol war dol meur a distro krenn. Spontet e oe ar marc'h gant ar strons; lampad a eure er mor, hag ar mevel ae'h eaz ive gant-han d'he heul. Ann Otro Keranraiz a oa chomet war ann od, hag ac'hane a bedaz sant Ervoan evit he vevel hag he varc'h. Ar mevel, o tont war var ann dour, a diaz kregin enn eur reu a oe astennet d'ehan gant ar verdidi, hag a oe kemeret er vag; ar marc'h, gant he dalgenn bepred war he daoulagad, a droaz war du ann douar,

evit ar mor hag ann avel da gas anehan war ann tu enep; hag a deuaz eeun da gaout he vestr adarre. Ann Otro Alan na c'houlaz ket dalein da diskoe he anaoudegez vad; gant he vevél kezek, e tigasaz he varc'h enn pirc'hirinach da ve sant Ervoan. Ac'hanta, bec'h e oe d'ar marc'h bean eet enn iliz vraz, ma stagaz da vragal ha da dansal enn he lec'h ha da c'hourrial gant ar blijadur, ha na baouezaz ket he c'hourriadenno, hed ann amzer ma chomaz enn iliz, ha koulskoude ne oa ket he c'hiz gourrial.

Bikenn ne echufemp, mar fellfe d'imp skri- van hini hag hini ar burzudo a reaz Doue dre alberz sant Ervoan e-kenver ann dud a vor. Digasomp hep-ken sonj euz al lestrik breiziad a oe paket gant eur bar-amzer, e-kreiz ann noz, e-kichen kear ar Rochel, ha ma oe gwelet, war he bount huelan, sant Ervoan gant eul letern burzuduz war elum enn he dorn; euz a vag Plonez a oe digoret, toullet gant gerrek rez ann dour; euz ar pevar den a oa war-n-ehi, daou hep-ken e teuaz enn ho spe- red pedin sant Ervoan, hag a oe soyetet ho

daou, goude bean bet peder pe bemp heur war var ann dour. Iann Gat, euz a barrouz Tredarzek, a oa gant pemp all, war eur vag vihan hag a oe fraliet gant ar gwall amzer, tost da borz ar leoded. He beden a reaz da zant Ervoan, ha dindan he dorn, en em gavaz eunn tamm koad euz ar vag dispennet, bec'h d'ehan kaout eunn troatad hed war daou veudad ledander, hag awalc'h e oe evit he barein, e-keit ha ma oe lonket he bemp kenseur. Enn eur vag leden euz a Gerneo, groet da dougen marc'hadourez, en em gave Judikael Omansi a barrouz Gwigastel, ha Gion Kubis euz a Bluskellek, gant pemp ha daou-ugent tremeniad all; re garget e oa ar vag, hag e-kreiz ar mor ec'h eaz d'ar gwelled. Ne oe da vean soveteet nemet Judikael ha Gion, rak hi hep-ken en em westlaz da zant Ervoan. Sklear e oa, eur burzud ho dal-c'haz war var ann dour tremen taer heur amzer, ha pesketerien a Leon ho c'hemeraz gant-he enn ho bag. Er bla trizek kant pevarzek, e miz Gouëlen, eur zadorn a oa, en em golle eur vag karket gant merl, etre enezen Vodez

ha Lezardreo, ha n'e oe soveteet nemet Ervoan ann Tesier ha Iann ann Tardif euz a barrouz Pleuveur; koulskoude ne wient ket neuial, ha ne oejont kemeret gant eur vag all, nemet d'eul leo vad diouz lec'h ho gwall digoue, dirak Kervouster; en em westlet e oant d'ann Otro sant Ervoan. Eur mi-cherour koarer, euz a gear Landreger, a desteniaz dirak kannaded ann Iliz en doa groet, hen he-unan, enn hano merdidi bet soveteet dre vurzud gant sant Ervoan, tri lestrik koar, da vean kiniget da ve ar Zant, evel merk euz ho anaoudegez vad enn he genver.

Koulskoude digoue mab Andreo Bonami, euz a barrouz Tredarzek, a fell d'in kountan war he hed, rak diskoe a ra, eur wech ouzpenn, pegen koz eo ar gizio hag ar stummo ac'h heulier bepred enn hon bro. Ma na larfenn eo ann tol-man c'hoarveet er bla trizek kant dek, e kreted'hae'h eo dec'h divezan e oa eruet. D'eur iaou 'ta, e miz Even, e oa Alan, mab d'Andreo Bonami ha tri bugel all, enn oad a dek vla evel-t-han, o tastum bizin pe o c'homonan war ar gerrek, hed gwaz-vor Landreger. Gou-

de bean groet ho bern, hel lekejont enn eunn tronzad stardet ha skoulmet mad; ruillan a rejont ho fakaden er mor, ha raktal setu Alan war-n-ehan d'he gas, gant he walen hirr, etrezek ti he dad. E oa dija ar bugel hed eunn tol min euz ann douar, pa lekeaz evez e oa ereet fall he vizin, hag e tistgaje ann eil damm euz egile. Kredin a eure gant-han e kavje troad beteg ann douar, hag en em dolaz enn dour; ia, mes eno e oa gwall don ar mor, hag o vean na wie ket neuial, ec'h eaz d'ar gwelad. He vaz hirr a dalc'haz koulskoude enn he daouarn; ha gant-hi michans e teuz aesoc'h war var, hag a chomaz gourveet war lein he gein; gant ann dour ec'h ee koulskoude en eur grial: Sant Ervoan! Sant Ervoan! ha mouejo all war ann od, he gen-seurted hag eur c'hroek a eruaz, a griev: Sant Ervoan! Sant Ervoan koulskoude, deut d'hen sikour. Nebeut goude e eruaz Alan ar C'hloarek da dremen dre eno gant he vag; tostaat a eure d'ar bugel; he gavout a reaz evel enn morgousk, luskellet gant ar mor; hag ar bugel, o welet he zalver, a hanter zavaz hag a astennaz he divrec'h d'he gad.

Dall Jofroi Ranno a Blouvouskant, a goueaz a bik war he benn er punz don, neve c'hroet, ha dam zec'h c'hoaz, war leuren gear, tost da groaz vraz bered Landreger er c'houlz-se. Ann dall reuzeudik a chomaz he benn a-walc'h gant-han, evit pedin sant Ervoan. Ann Itron Flor — Ranno a oa merer dindan-hi — a redaz gant hast d'ann iliz vraz da dol daou diner e kev ar Zant, hag enn avani d'eunn den iaouank a oa bet lac'het mik, nebeutoc'h evit eur bla oa, o kouean er punz-se e kriad ann holl war ar burzud, o welet e oa kouit ann dall euz he lamp gant eur giniaden-benpag war he dal.

Deudmad, groek da Ervoan ann Herve, e doa fiet he merc'hik eur bla a vec'h, da evez Agnez a oa amezeged d'ehi. Enn eunn tol e teu eunn anken ar gwasan enn he spered, ha ne oar perak; a greiz he c'halon e ped ann Otro sant Ervoan evit he bugel hag evit hec'h holl dud. Pa distroaz d'ar gear, e welaz e oa re a lec'h d'ehi da vean spouronnet; he zi a welaz ann tan krog enn-han, hag e-kreiz ann tan-gwall, kavel he bugel o tevin kouls hag he zreo all; devet e oa kemend a oa er c'ha-

vel, hag ar bugel a vouse'hoarze enn-han, ha droug e-bed ne oa c'hoarveet gant-hi.

N'on ket evit tevel war ann tol souezuz digoueeet e kear Niort gant eunn den barnet d'ar grouk. Ann den-ze a deuz da Landreger war-dro ar bla trizek kant seitek, hag ac'h eaz enn iliz vraz e korv he roched, gant he vrago hep-ken, hag eur pennad korden enn dro d'he c'houk. Laret a re da gemend-hini a gleve gant-han, ha dirak barner iliz Landreger ac'h ee bete touet e oa bet barnet, e kear Niort, evit eunn torfed, gwir pe c'haou, da vervel dre ar grouk, hag e oa neuze en em lekeet da bedin sant Ervoan. A-benn taer gwech, enn eunn devez, ec'h esaaz ar bourreo krougan anehan, ha taer gwech e torraz ar gorden, ha gant ar spont, ne gredaz mui ar bourreo adkregin. Evit testeni euz he gomzo, ann den bet ouz ar grouk a diskoe e ar pennad korden dorret, hag ar blonso a oa enn he c'houk.

Setu-aman, da glozan ar pennad-man, eunn tol ken souezuz hag hen-nez; eul laeronsi eo groet el Landreger, enn noz ar

c'houec'h a viz Meurz trizek kant daouzek, diwar goust eur vour'hizez a doare, mammzel Helenan Gwaskeder. Eunn nosvez holl e oa bet ho-man er meaz he zi; e-keit-se e oe poaniet-da laerez kement munud mad e doa. Pa distroaz ar plac'h keaz-se d'ar gear, e kavaz karzet he zi; hag hi da welan ha da hirvoudin, ha da c'hervel sant Ervoan, bet enn he veo eur gwir varner ken brudet. Mont a eure d'he ve, hag eno, war he daoulin, e pedaz kalonek, hag a laraz, evit adkaout he zreo, e roje d'ehan dek kwennek eur weach paeet, ha daouzek diner leve, e-pad he bue. Neuze e teuaz enn he spered disfianso hag a zellaz evel dent abeurz Doue, a enep tri den ha bikenn n'e dije bet disfi anhe. Mont a eure da glask ann archerien, ha furchet e oe enn tier ann dud e oa kouet he diskred warn-he; kavet e oe ann taer fevaren euz ann treo laeret ha distolet e oejont d'ho ferc'hen. Ar bevaren all a oa digouet d'eur bevared laer, ha ne oe kelo anehi nemet d'ar zul war-lerc'h. Eur manac'h a gouend Beauport eo a deuz da laret da mammzel Gwaskeder e kavje ar

pez a vane c'hoaz euz he zreo, er park-man park, el lec'h ma oa skoulmet ar baelan, ha gweet ann eil boud gant egile. Breur-kaer e oa ar manac'h-ze d'ar bevared laer e oa Ervoan ar Ponter he hano, hag e oa meo, pac'h eaz da laerez gant ann tri all. Ann tec'h en doa kemeret gant he lod ann treo; ia, hag e-keit ha ma oa o redek, e kollaz enn eunn tol ar gwelad. Keuz braz a deuaz d'ehan; en em westlan a eure da zant Ervoan; distol a raio he dra d'he ferc'hen, ha c'hoaz, eme-han, a roo daou wenneg ar bla d'ar Zant. Selaouet e oe he beden, evel gweach all hini al laer deo; goude bean bet dall e-pad peder heur war-n-ugent, e teuaz a-neve ar gwelad d'ehan; ha, den d'he c'hir, e kargaz, evel m'hon euz laret, he vrêur kaer, da ober enn kuz he distol evit-han.



PENNAD XIII.

Burzudo all.

Daou den dall hon euz laret, er pennado diagent, e oa bet gwelleet gant sant Ervoan; setu-aman eun drived hag eo mad ive komz anehan. Er bla trizek kant naontek e teuaz da Landreger eunn den koz ha ne wie den doare d'ehan, renet gant eur c'hi. Dindan pemzek de, e tistroaz d'he vro, bet ar gweled gant-han, hag hep neb ezom ken a gi. Euñ a Gersi e oa ann den-ze, diwar dro Rok-Amadour.

Gion Omansen a barrouz Langoat, Tifenan, merc'h da Derrien, euz a Brad; Perik, groek da Willarm, a Dregrom; Julik, merc'h da Lavini, euz a Goatreven, a oe ive gwelleet, dre vuzud, ho daoulagad euz a drougo, bep seurt a oa anhe, hag ho dalc'he enn poan

mui pe nebeutoc'h pell a oa, Ewen Eud euz a barrouz Plou-Neve, a dostaaz re d'ar rod vihan, e milin menec'h Bear; kregin a eure ar rod enn-han, hag hen sachaz dindan-hi; ar paour keaz e oe pladet he dal d'ehan, ha ten-net he lagad deo diouz he benn. Eur c'hroek fur en em gavaz eno, hen gwestlaz da zant Ervoan, ha war ann tol e paouezaz ann dour da gouean, hag e oe Ewen lemet a riskl; raktal ive ec'h eaz he lagad enn he doull, e oe gwelleet ar gouli, ha mann ne chomaz nemed eur c'hrezennik enn he valvenn, evel siel euz ar burzud. Arabad eo ankoat Marjilan, merc'h d'ann Otro Pieréz a barrouz Lanveur, mestr-skol el lezenno. Magerez Marjilan e oe ar Vahotan-hont groek da Rivallon Leizon, bet gant-hi ar c'hras da welet burzud ar c'habel, war hent Lannuon, roet d'eur paour, ha bet le-keet nebeut goude-ze war benn ar Zant, gant eunn dorn diskennet euz ann env. Er bla tri-zek kant c'houezek, e oe ar vrec'h gant Marjilan, hag ann tach a chomaz war he lagad; glac'haret braz e oa he mamm a gement-se. Ar vagerez e teuaz enn he spered michans ar

pez e doa gwelet Doue oc'h ober evit enorin Dom Ervoan, hag hel laraz da vestr Pieréz ha d'he c'hroek; da vihanan, d'eunn abarde, goude koan, e kriadz ar vamm: — O ma merc'h, gwell e ve d'in, war a gredan, ez gwelet maro, evit mac'haniet ha dic'henedet. Da zant Ervoan ez gwestlan, ha diarc'hen ec'h efomp, da dad ha me, da gaz da brof d'ehan. — Enn de war-lerc'h, pa dihunaz ar bugel, e oa eet ann tach diwar he lagad.

Ann tad Aufrai, abad kouend *Bon repos*, bet war ann holl enklasko, evit distrein ar brezonek enn iez kannaded ann Iliz, a oe test he-unan euz eur burzud war eunn dallez koz. Ar c'hroek-man a oe renet gant he merc'h da ve sant Ervoan; goude gortoz pell, e skouizjont, hag ar verc'h, diwar dreuzo ann iliz vraz, kent evit he c'houitaat da vont d'ar gear, a droaz war gad be sant Ervoan, ha war boez he fenn, ann daero enn he daoulagad: — O sant Ervoan, eme-hi, kalz burzudo a larer a red; evid-on, ne ouzonn doare d'he. — War ar gir, e stag da grial gant al levenez: — Ar gweled a zo deut d'am mamm! Ma

mamm a wel. — Hag evit gwir ar vamm a wele sklear, hag a distroe, hep den d'he ren, d'ann iliz vraz, da drugarekaat ar Zant.

Setu-aman eur burzud all c'hoarveet dindan daoulagad eur c'hannad all d'ar Pab. Eunn den iaouank triouac'h vla a barrouz Pedernek, Ervoan Gatian a oa en em walc'het er rizer ar Jodi, tost da vilin Sant-Efflam; raktal e koueaz war-n-ehan ar paralizi, e kollaz he spered, hag e krogaz eunn dinerzded hag eur c'hren hep paouez enn he izili. Daou vla a oe er stad truezuz-se. Er bla trizek kant tregont, da viz Gouelen, e tigasaz he dad anehan war ve sant Ervoan, hag e stagaz gant eunn naoved. D'ann dekved de, eur merc'her a oa, e oe ar c'hlanvour gwelleet enn eunn tol ha krenn, dirag eur bagad tud, ouz dor ann Otro Tournemin, en doa roet lojeiz da Eskop Limoj, unan a gannaded ar Pab, e-keit ha ma vije e Landreger.

Ne oa ket eur miz ma oa c'hoarveet eunn hevelep burzud, enn parrouz Louargat, e-kenver Iann Willot. Daou vla oa e oa ar paour

keaz-se ken mac'haniel ken ne oa nag evit kerzet, nag evit sevel enn he za, nag evit astenn he diwar; gweet ha skoulmet e choment out-han dindan he diou vorzod. Gwelet a reaz ar c'hannaded anehan iac'h pesk hag sonn enn he gerzed; moan avad e oa he izili ha treuteet, hag aez e oa gwelet e oa o sevel a glenved.

Herve Golohu euz a Blonez e oa ken kamm he c'har gle ma ne oa evit en em stlejan nemet war diou fla. Dont a eure da ve sant Ervoan, hag eno e vanaz kousket. Eur vouez a glevaz hag a deue evel euz ar be, hag a lare: — mar kinnigaz diou c'holaouen d'in, e wellao d'id. — Raktal e kinnigaz anhe, hag, enn de war-lerc'h, e-pad ann overn bred, e kavaz d'ehan e oa evit astenn he c'har, hag e oa gwelleet krenn.

Hon Zalver, e-keit ha ma oa war ann douar, a verkaz sklear ar skleran e oa Doue, o wellaat d'ann dud dall ha d'ann dud kamm; he servicher sant Ervoan a bareaz dre he beddenno kemend euz ann dud mac'haniel-ze, ken n'hellomp nemed henvel unan-bennag

anhe : Azou, intanvez Gwill David a Blou-berr; Iann, mab d'ann Alan a Blou-Neve; Alis, merc'h d'Olier Dhomaz a Pleuvihan; Iann mab da Nan a Lanveur; Mahot ive a Lanveur; Olier Sist; Herri Anjer euz a Eskopti Koutanz a lezaz he flaio e Landreger, enn gwestl; Gwill ar Balc'h a barrouz Kerrien, a bedaz sant Ervoan, en eul laret d'ehan hen anavee evit he Otro hag e tisklerie e oa dleour d'ehan euz a seiz diner leve ar bla da vikenn. Ann ansao-ze a blijaz da zant Ervoan; eul luec'heden a skleriaz enn dro d'ar c'hamm; hen e redaz eunn domderen c'houek enn he izili, ha diwar neuze e kerzaz eeun mad.

Setu-ni eru gant paralitikez Plistin; sellomp piz ouz ar burzud-man, rak kaer eo euz ar c'haderan. Eur c'hroek euz a barrouz Plistin, hanvet Katel, e oa ken paralizet hec'h holl izili, ken ne oa evit ober mann gant-he, nag evit sevel nag evit kerzet. Pleget e oa he divrec'h ann eil war eben; he daouarn serret e vije dindan he diou gazel, ha n'helle ket zo-ken ho dougen d'he geno; he diwar a oa stag ann eil war eben, hag he zreid kroajet e oa hep finv. Douget

e oe da ve sant Ervoan; e-pad seiz sun e oe eno dalc'h-mad, o pedin ar Zant a greiz he c'halon, ha ne deue d'ehi nep divec'h. Kemeret e oe, ha staget war eur marc'h evit he distrein d'ar gear. Tostaat a re d'ar Pont-Losket a zo eul leo euz kear Landreger, pa droaz he daoulagad war-du ann iliz m'eman korv ar belek santel enn-hi, ha ma laraz huel : — O sant Ervoan, lezel a refet 'ta laret e tistroin klan d'am bro? O sant Ervoan, groet ma vin dleourez d'hac'h euz ma frankiz! — War ar gir, e welaz enn dro d'ehi eur sklerijen ken kre ma teuaz da vean tomm d'ehi; displeget e oe he divrec'h, digoret he daouarn, distaget he diwar ann eil diouz eben, ha frankeet war he zreid. Ann ereo he dalc'he war ar marc'h a oe diskoulmet gant ar mevel a oa gant-hi; diskenn a eure hec'h-unan penn diwar varc'h, ha war droad e tistroaz da ve he Salver, da ginnigan he frof hag he zrugare d'ehan. Hi eo a deuaz goude-ze da ober he zesteni dirak kannaded ann Iliz, ha gant-hi meur a den all ho doa gwelet anehi klan ha gwelleet d'ehi.

Eunn den a Werand, paralizet he diou c'har ho diou, a reaz he dougen da Landreger enn eur c'harr, hag e oe pemp sun eno, o pedin dalc'h-mad sant Ervoan d'he barein.

O welet ne dalvee mann d'ehan pedin hag adpedin, e reaz he gount gant he hostiz, da distrein d'ar gear evel ma oa deut. D'ann noz arok he disblas, e oe ken karget he gampr a sklerijen, ha pell awalc'h e padaz ar burzud, ma kredaz gant ann hostiz ha gant he vugale e oa krog ann tan enn ti. — N'ho pet ket aon; eme ar c'hlanvour, eman sant Ervoan gan-in. — Hag evit gwir, d'ann de war-lerc'h vintin, e weljont ann den-ze sonn mad war he dreid, eet krenn ar paraliz diwar-n-ehan, hag hi gant-han pevar bla oa. Hi ho-unan eo a reaz ho zesteni goude-ze da gannaded ann Iliz.

Testo all a laraz ho doa gwelet o tont da ve sant Ervoan eunn den, hag a oa en em westlet d'ar Zant, evit bean gwelleet euz eur c'hlenved gwall boaniuz; ann den-ze e teuz diouz he gorr eur min ken braz hag u ar wa, hag a iaz iac'h pesk d'ar gear.

Eur c'hroek euz a Landreger e oa ar paraliz war-n-ehi, ha c'hoaz ken toullet he c'hoste ma weled he boello. Sant Ervoan a deuaz d'he gwelet, ha da laret d'ehi he gwel-laje, mar teuje war he ve. Dont a eure, ha gwelleet krenn e oe d'ehi, ha dreiz-hi hec'h-unan e wiaz e oa ar Zant den d'he c'hir. Kement-man a zo bet testeniet gant ann dud ho doa roet dorn d'he dougen d'ar be, ha gwelet he gwellaat eno.

Eur c'hroek all euz a Landreger a oa dalc'het gant ar c'hoevn tri bla oa. Enn eunn huvre e welaz ive sant Ervoan, hag a oe laret d'ehi e wellaje war he ve; ar peza c'hoarveaz gant-hi evel gant eben gentan.

E-mesk ar gwellaenno burzuduz all, e kavan groek eunn Hamon euz a Blistin, bet pemp de e poan a vugale, ha sellet gant ann holl evel kollet; eur c'hroek all a Blistin ive a wele he mab ho fallaat a weldremm, rak hep laez e oa d'he vagan; Breur Andreo, abad *Beauport*, a oa o vont d'ar bed all, taget gant eunn derjen hep paquez; eur vouez a glevaz hag a lare: — Ma mab, gouzanv c'hoaz ar

bar-man, ha pa distroin, me a lemo, da drouk diwar-n-oud. — Eur gridien a deuz d'ehan hag a badaz daou beder heur war-n-ugent, ha goude ec'h eaz ann derjen evit mad diwar-n-ehan. Person Mesker, enn eskopti Naonned, a danevellaz pe a gountaz daou vuzud groet e-kenver daou gloarek d'ehan, Simon ha Gwillarm, dirak skeuden sant Ervoan bet lekeet enn he iliz gant ar person mad, kent evit barn ann Iliz.

Komzomp c'hoaz euz a Alis ar Billon a Bleuzal. Ar baourez keaz-man e oa bet eunn aer krog enn he gouk e-pad ann noz; koevnet e oa eat kroec'h he c'horv kemend ha ma helle kroc'henn astenn. Goude eiz devez poanio skrijuz, e teuz da Hengoat, da di Katel Helouri, c'hoar da zant Ervoan; evel eur re-leg e vire ho-man kabel he breur evuruz. Lakaat a eure anehan war benn ar glanvourez, ha setu raktal frankeet war-n-ehi, ha gwelleet kreñn d'ann de war-lerc'h. Ha laret a re Katel ne oa ket ar burzud-ze he-unan da vean bet groet gant ar releg a vire gant enor enn he zi.

N'omp ket evit laret, er berran komzo zo-ken, ann holl danio-gwall bet lac'het, ann holl glenvejo bosennuz bet savet diwar al loened, ann treo kollet bet kavet, dre skoazel sant Ervoan, ha bet skrivet enn enklask. Hastomp digoueout gant ann dud diskiant ha gant ann dud trec'het gant ann diaoul, ha deut ho skiant vad hag ar zioulded d'he, goude bean pedet ar Zant a galon vad.

Lampomp dreist taer zodez bet gwelleet hep nep digoue brudet braz, ha komzomp euz eunn den diwar ar meaz a barrouz Plemi, Gwill Chovel, ha ne oa ket pevar den euz ar re grevan evit he derc'hel. Kaer e oa bet mont gant-han da zant Jagu, da zant Leonard ha da zant Gwillarm, ne oe gwelleet nemet tost da Zan-Briek, pa oad ho digas anehan etrezek Landreger, d'ar bevar a viz Gouelen trizek kant tregont, da laret eo, e koulz ann enklasko. Komzomp c'hoaz euz ar plac'h iaouank-hout, diskiant dam-beteg ar gonnar, hag a oe gwestlet da zant Ervoan gant Gwill Gersonzon, eskop Leon, ha koueomp gant ar mer-dead Spaniol, Mikel Pontarabi. He-man e

e'houlenne eur paour ann aluzon digant-han enn hano Doue ha sant Ervoan, hag hen eo skopan pe grachet enn dorn ar paour eo a reaz. — Doue ha sant Ervoan d'ho paeo, eme ar c'hasker. — Ha raktal setu ar Spaniol da rulial war ann douar gant ar gonnar, hag eunn eonen enn he c'heno : — Sant Ervoan, war a grieg, a oa gant eur vanden dud gwisket enn gwenn evel-t-han, ha golaouenno braz war elum enn ho dorn, hag a wallgase holl anehan, hag a skoe didrue gant-han. — Digaset e oe Mikel gant he gabiten da dremen ann noz ouz be sant Ervoan; ha d'ann de war-lerc'h, e oe groet profo braz evit-han, hag e teuaz ann den foll d'he iee'hed ha d'he skiant vad a-neve.

Danevel ar burzudo brasan a zo c'hoarveet dre bedenno groet da zant Ervoan, pe war he ve, hed ar seiz vla war-n-ugent a dremenaz adaleg he varo bete ma krogaz ann enklasko evit he lakaat da Zant, e klosfomp breman gant histor spontuz eunn den a barrouz Per-venan, bet trec'het gant ann diaoul. Iouank e oa ann den-man; naontek vla oa; he hano

a oa Ervoan, mab da Ervoan Andreo. D'eunn abardevez, ec'h aez he vamm, ne ouzonn perak, enn eunn euzen euzuz a enep d'ehan. — Te 'ta eo ma mez, eme-hi — hag o stouin d'ann daoulin, e krogaz enn he bruched pe estomak, gant he daou dorn, hag e teuaz ar c'hómzo skrijuz-man gant-hi : — Ma malloz gan-id; ma malloz gant ar bruched-man e teuz denet he leaz; ma malloz gant ann daou goste-man ho deuz da douget; kemend am euz a vete war-n-oud hen roan d'ann diaoul; ar c'horv-ze am euz krouet ha ganet, hen gwestlan d'ann ivern. — Ar bugel paour! Eur bar-konnar a grogaz enn-han; ar pevar den krevan ne oant ket evit hen derc'hel. Ereet e oe enn he wele, hag a uz d'ehan e welaz daou diaoul, ken huel ha tourio, hag hi du hag euzuz; henvel ouz daou vouc'h, ha kernio war ho fenn, hag a esae kregin enn-han, hag a lare : — D'imp oud; da vamm eo e deuz roet ac'hanoud d'imp. — Neuze e teuaz sant Ervoan, hag e azeaz war ar gwele en eul laret : — N'ez pe aon rak netra; bet oud war ma be, ha ma hano eo da hini; d'ez parein

on deut. N'eo ket bet da vamm evit da rein d'ann diaoul, rak n'e deuz ket muioc'h a vete war-n-oud evit n'en deuz ar zac'h war ar bleud a zo enn-han. — Gant ann de e teuaz ive sioulded d'ann den reuzeudik-man diwar he weladen, hag e pedaz he dad d'he gas da ve sant Ervoan. E oant o vont enn hent, pa deuaz d'ar vamm gwall c'hlar e haret en em diskoe d'he mad; he-man ac'h eaz neuze enn eur bar euzuz; terrin a eure d'ehan, adalek ma oe groet d'he vamm mont ac'hane. — Krevoc'h hag hirroc'h evit ar re all holl e oe ann euzen neve en doe c'hoaz o vont enn iliz vraz Landreger: — Forbaned, eme-han d'ann daou diaoul, n'in ket gan-hac'h, rak sant Ervoan a zo e tifenn ac'hanon. — Da goulz gouspero, e teuaz he dad a-benn da ober d'ehan poket d'ar zant Ervoan enn min a oa bet groet war ar be, ha raktal e paouezaz ar gwall heg, hag ar c'hlanvour en em gavaz pareet. Dre ma oa c'hoarveet ann tol-ze er zun goude ar Pentekost, er bla trizek kant nao war-n-ugent, e oe kannaded ar Pab enn lec'h da glevet holl gant ar paour keaz den iaouank-

ze he-unan, ha da laret stard e oa bet iac'het krenn.

Setu a-ze, ne ket 'ta, liez burzud, hag e pep rumm, groet gant sant Ervoan, hed he vue, hag adaleg he varo bete mac'h eaz he hano e roll ar Zent; gant kannaded ar Pab a larfomp ive e zo bet kemend euz ar burzudoze, ma hon euz dleet tremen dreist kalz anhe, gant aon da vean re hirr, ha re boaniuz d'ann dud a deuryeo lenn hon levrik. —



PENNAD XIV.

Sant Ervoan a zo lekeet e reng ar Zent.

He relego a zo savet ha douget el lec'h all.

IANN, ann driven enn hano, hanvet Iann. I ann den mad, a oa neuze Duk enn Breiz, ha ren e-bed ne oe siouloc'h ha peuc'husoc'h evit he-hini. Aesoc'h a ze e oa d'ar vro selaou ha dastum ar burzudo a lared a c'hoarvee e kear Landreger, hag a gase pell ar vrud euz ann den evuruz Ervoan Helouri Kervarzin.

Ann duk Iann 'ta, o welet e c'hoarvee burzudo braz enn he vro, dre zellido hag enn hano sant Ervoan, a hanvaz tud a doare vraz evit mont da gaout ar Pab Klemens pemved, ha pedin he Zantelez da gas unan-bennak evit kemer anaoudegez euz a vue, obero ha burzudo Dom Ervoan, ha goude - ze pleal gant he disklerian Sant. Ar Pab ne blijaz nemet nebeut ar goulenn-ze d'ehan; mervel a

eure prim goude, ha war he lerc'h e teuaz Iann eil war-n-ugent enn hano. Ann Duk a gasaz d'he gaout Ervoan Boisboesel, Eskop Landreger, ann Otro Gion a Vreiz, Kount Penthievr, he vreur, gant meur a Otro braz all euz ar vro. Holl Eskibien Breiz a oe a dugant ann Duk; enn tu-hont d'ar re-ze, Fulub Valoiz Roue bro c'hall, ar Rouanez Janned, he c'hroek, skolio Pariz, liez Arc'hoskop, Eskob hag Otro ha kouend, a bedaz ken stard ann Tad Santel da lakaat Dom Ervoan e roll ar Zent, ma troaz he Zantelez da labourat da gement-se,

Diwar-ze e oe roet karg da Iskibien Angoulem ha Limoj, d'ann Tad abad sant Martin Troran, eskopti Baieuz, da vont da vro Treger ha da ober eno eunn enklask ake-tuz euz a vue, obero ha burzudo sant Ervoan; war ann urz-se, e teujont enn Breiz. Etretant Eskop Landreger, distroet d'he Eskopti, a c'hourc'hemennaz eur iun da ober, d'ar merc'her goude sul ann Dreinded, gant kemend hini a oa enn oad hag enn iec'hed, hag eunn obern da laret ive, enn de-ze, enn holl ilize ann Eskopti, da c'houlenn digant Doue ma

teurveje ober burzudo neve dre bedenno ann Otro Ervoan, mab d'Helouri. Ar vro holl e oa 'ta gwiek euz ar pezh ac'h ee da c'hoarveout, pa eruaz kannaded ann Iliz e Landreger. D'ann dri war-n-ugent a viz Even, er bla trizek kant tregont, e tigoraz ann enklask enn kear Landreger, ha tri-c'hant test, bet klevet gant-he, ann eil goude egile, a douaz d'he e oa bet sant Ervoan eur c'hatolik mad ha feal, den santel, hag e-pad he vue koulz ha goude he varo, en doa Doue groet meur a vuzud braz diwar he bedenno; al leze a oe groet divezatoc'h gant tremen pemp kant test all. Goude bean en emglevet holl, hag astennet ho daouarn savet etrezek iliz vraz Landreger, e komzaz ann Tad Merien, abad kouend Sante-Kroaz Gwen-gamp enn ho hano holl, hag enn hano ha gant asant ar bobl en em gave eno, ha war he ine hag ine kemend hini a oa war al lec'h, e touaz, he dorn war levr ann avielo, ha testeni a dougaz euz ann treo-ze holl. Dre eno e oe klozet ann enklask-ze, er bevared devez a viz Est war-lerc'h. Ann eiz noter abostolik a oa gallaoued, ha n'intentent ket ar brezonek;

ac'hanta hag e oe roet d'he tud a Iliz Vreiz-Izel, abadien kouencho, chaloned pe bersoned parroujo, karget gant ar Pab kouls hag ar re gentan, evit trein d'he testenio tud ar vro-man, euz ar brezonek enn eunn iez hag a wie ar c'hallaoued.

Er bla goude, trizek kant unan ha tregont, d'ar bevar a viz Even, Eskop Limoj a lakaaz ann enklask dirag ar Pab hag ar C'hardinaled galvet gant-han evit kaout ho ali, hag he Zantelez a hanvaz tri euz he Gardinaled, evit lenn ha studian piz ann enklask. D'ann eunnek euz ar miz, ar C'hardinaled a lekeaz ar gagnaded abostolik war ho le, diwar-bennann enklask ho doa groet, hag ar re-man a douaz e oa gwir kemend a oa skrivet enn-han. Neuze e oe groet eur skrid euz ann treo-ze holl, hag eul lavar d'ann holl Gardinaled galvet e kuzul. Etretant e teuaz ar Pab Iann eil war-n-ugent enn he hano da vervel; enn he lec'h e oe hanvet Klemens c'houec'hved enn he hano. He-man a gasaz war-n-arok ar pezh a zelle ouz sant Ervoan. Dija, pa ne oa nemet Kardinal, en doa labourat kalz da ze, enn amzer ann dri

Fab divezan a oa bet arok d'ehan. O yean deut Pab he-unan, e lekeaz he holl aket da glozan ann dra vraz-se, da skrivan hano sant Ervoan war roll ar Zent. Laret a rear zo-ken e teuaz, eunn de ma oa o vale dre ar vro, sant Ervoan d'en em diskoe d'ehan, gant eur vaz enn he dorn, hag a laraz d'ehan hastan d'hel lakaat e renk ar Zent. Ann Tad santel hen groaz enn eunn doare berz-meurbed, d'ann naontek a viz Mae trizek kant seiz ha daou-ugent. Setu aman ar varn, evel ma oe douget gant hon Tad Santel ar Pab Klemens c'houec'hved enn he hano, pa diskleriaz Ervoan Helouri Sant :

« Enn enor d'ann Holl-C'halloudek, Doue,
 « Tad, Mab ha Spered-Santel, evit brasan
 « mad ar Fe ha kresk ann Iliz gatolik; dre
 « c'halloud hag enn hano ann Otro Doue,
 « Tad, Mab ha Spered-Santel, hag ann
 « Ebestel evuruz-meurbed Per ha Pol, hag
 « Hon-Hini Hon-unan, ha diwar ali hon
 « Breudeur ar C'hardinaled, e varnomp hag
 « e tiskleriomp eo dleet da zant Ervoan He-
 « louri, den a vrud vad, bet enn he amzer

« Beleg euz a Eskopti Treger, bean skrivet
 « he hano war roll ar Zent, ha gant ann holl
 « bean enoret evel Sant, hag evit gwir, e
 « tougomp anehan e roll ar Zent; e reizomp
 « hag e c'hourc'hemennomp ma vo, bep pla,
 « groet he c'hoel, d'ann naontek a viz Mae,
 « de he varo; gant ann Iliz, er bed holl,
 « enn eunn doare doujuz ha berz, ha savet
 « eunn oviz d'ehan, evel d'eur Zant ne oa na
 « Pab nag Eskop. Ouz-penn da ze, kemend
 « hini a govesao gant keuz, e de ma vo savet
 « he gorr, pe d'ann de ma vo groet ar goel
 « kentan enn he enor, hag a bedo enn Iliz
 « Landreger, dre ann hevelep galloud, e
 « roomp d'he induljanso a seiz vla hag a seiz
 « kwech daou-ugent de; hag a eur bla ha daou-
 « ugent de, e-pad eizvedo ar zao korv hag
 « ar goel kentan-hont; ha d'ar re a bedo
 « war be ar Zant, eur wech ar bla, e de ma
 « oa ganet, pe ma oa marvet, pe ma oe savet
 « he gorr santel, eur bla ha daou-ugent de;
 « ha d'ar re a deuio war he ve e-pad eizved
 « ar goelio komzet anhe diarok, kant devez
 « a c'hras ha distol euz ar binijenno gour-
 « c'hemennet d'he. »

Hon Tad Santel ar Pab, kent evit ma teuaz da diskleriañ Ervoan Helouri Sant, a reaz eur brezegen gaer; ne vo droug e-bed he lakaat aman, evel enn he gwir lec'h. Setu-hi aman : « Pobl Sion, trid gant levenez ha kan meulodi, rak enn ez kreiz eman Sant braz Israël. Ann Otro sant Ervoan, viniget, beleg a Eskopti Treger, a drid gant al levenez da vean er gloar; evuruz eo enn he stad, hag eur joa a zo ganthan dreist ann holl joaio; a diavez d'ehi, n'euz hini all e-bed; ne ket er c'hrouadur eo he c'hemerer, er c'hrouer eo, ha digant-han eo e teu. Ar joausded-ze, eur weach ma ve bet, ne c'holler kammed; enn he c'henv, pep joauzded all a zo trididigez, pep dudi all a zo c'hoervder, pep plijadur all a zo poan ha nec'h; eunn evurusded eo hag a laka sart ha joauz ar re muian glac'haret; sant Ervoan en deuz anehi enn env, ha gant gwir a hell laret, evel ar profed Isai : Enn evurusded me a drido em Doue, ha joauz e vo ma ine em Doue ! Rag gant diliad ar zilvidigez en deuz gwisket ac'hanon; gant diliad ar zantelez en deuz goulouet ac'hanon, evel eur pried gwis-

ket gant he gurunen, hag eur c'hroek gwisket gant ar pezh e deuz a gaeran. Hag o komz euz a Iliz ann douar a zo enn brezel : ar Roue, eme-han, en deuz lekeet ac'hanon el lec'h m'eman holl dezorio he vadelez.

Ni 'ta, a zo enn Iliz enn brezel, laromp d'ehan, da zant Ervoan, d'hon tro; enn-oud, gant envor euz da vuzudo, e tridfomp gant ar joa hag en em neveseomp; kaer oud ha dudiusoc'h evit ar gwin, ha karet gant ann dud vad hag eun. Hag e-gwirione, ma vo joa gan-imp, e tene-ridigez ar garante, ann eil evit egile; n'euz ken nemed eur garante, zo-ken er bed-man hag enn env, hag ar garante-ze na c'houit kammed. Miromp 'ta anehi, ni enn hon tu, ha gant ann Ele hag ar Zent, kemeromp hon lod enn he evurusded, herve ann ali a ro san Pol d'imp; hag ispisial c'hoaz abalamour mac'h eo unan ac'hanomp; hen en deuz sklerijennet ac'hanomp gant he obero santel, ha souezet ac'hanomp gant he vuzudo; ha kemeret renk gant-han e-mesk sperejo ann env, ec'h hell ober kalz a vad d'imp dre he dellido pe he verito, rein d'imp leaz he galon, da laret eo,

hon divec'hian gant he dudio santel, he drue hag he vadelez; meulomp Doue enn he Zant; meulomp he vuc gaer, he ren a beuc'h, he stad diriskl braz, goude kei liez riskl trec'het gant-han.

Meulomp ar sturier fur-ze da Jezuz-Krist, da vean miret he lestriek, e-kreiz kemend a varrio amzer, er mor ar bed, ha kaset anehan er porz evuruz ken c'hoanteet gant he ine. Meulomp ar c'habiten braz-se euz ann holl sio mad; kalonek eo bet er brezel, ha goude bean goneet war he enebourien, setu eman breman, ha da vikenn a vo er gloar. Heuliomp-han diouz hon nerz, evel mevelien vad ha sentuz d'hon Otro Jezuz-Krist a zo levenez divuzul enn-han gant silvidigez ann Ine-ze, bet skuliet he holl oad evit-han; rak ma zo joa gant-han euz a distro ar pec'her, skeudennet gant ar bugel trezer pe brodik, hag ar pec'her a ra pinijen da vean koulskoude sur war var euz ar gloar, hag euz ar c'hras da vont beteg ar penn divezan; gant kalz muioc'h a lec'h e zo stad enn-han, o welet ine ann den mad, o sevel diouz bro gollet ar bed-man, leun a c'hened, harpet

war he muiian karet, da laret eo, war dellido, poanio ha maro Jezuz-Krist he Zalver, ha dreiz-han, bet eur c'hloar gant-han ha na gollo ket ha ne echu'o bikenn. Ar pried e zo joa gant-han gant he bried, Doue e zo stad enn-han gant ann Ine-ze, hag e fell d'ehan e ve ive joa gan-imp. Eunn dudi a vo evid-hoc'h, emehan, ann treo am euz krouet; rak Israel am euz krouet levenez, hag he bobl, joa; ma c'halon a drido gant Jeruzalem, hag evuruz-meurbed e vin gant ma fobl, hag enn he zouez ne vo ket klevet mouez ann estlamm. Enn Doue 'ta e tridin, hag em Doue hag em Salver ma ine e vo levenez gan-in. C'houi ive, ineo mad, meulet ann Otro Doue; kemeret ebad enn-han, ha meulet anehan, c'houi he Zent, bihan ha braz war-eunn-dro; rak evid-on, me a veulo hano Doue gant gwercho santel, hag a vrudo he vrasder gant meulodi, ha muioc'h e plijo ann dra-ze d'ehan, evit ha pa c'hinnigfenn d'ehan goad eul loue iaouank, ne ve he ivinio hag he gernio nemet krok c'hoaz da diwan war he dreid ha war he benn.

Rak ar bugel santel-man d'ann Iliz gatolik en deuz impliet armo, ha gant-he goneet war hon enebourien, ann heretiket; ann armo-ze eo ar burzudo braz groet gant-han enn he veo ha goude he varo, hag ar re-ze a zo mad da drec'hin ho sperejo ac'heurtet; hag e de braz ar varn, ho zrec'ho c'hoaz, enn ho mez hag enn ho daonedigez da vikenn. Ann holl vertuio en deuz ive heuliet, ha dreiz-he, digaset ar gatoliked dianket war gwir hent ar zantelez. Eur Zant braz eo, ha seul vrasoc'h, ma eo eet he spered, e-keit ha ma oa er vue-man, kalz dreist ar re all holl, enn obero braz ha souezuz, herve ar peder doare henvel ouz peder ment ar c'horvo: huel eo eet dirak Doue dre he fe, fians, karante ha doujans; don enn-han he-unan, dre ar gwir dispriz hag izelded; ledan e-kenver he nesan, dre he aluzono; hag hir dre holl vertuio, dre vean bevet bepred enn-he. Breman eo evuruz, ha braz e peder doare all, hag a zell c'hoaz ouz mencho ar c'horvo, da laret eo: huel e-kenver Doue dre ar garante hen stag out-han; don enn furnez hag enn anaoudegez ar wirione;

ledan enn he c'halloud enn hon c'henver, hag hirr enn eur c'hloar hag a bado da vikenn. Sant braz eo enn Israel, da laret eo, Doue a wel, hag unan eo a brinsed palez ann env; enn hon touez eman, evit ma welo hon ezomo a dostoc'h, ha ma hon harpo primoc'h gant he bedennio. Enn eil levr ar Vakabeaned, pen-nad trizek, e komzer euz a Oniaz, bet belek braz, den mad ha seder, enn he zello, obero ha komzo, ha troet d'ar zantelez, adaleg he iaouankiz, hag a larer anehan e oe gwelet o sevel he daouarn hag o pedin evit ann holl bobl iudeo; ha neuze, e teuaz eunn den all enoruz hag oajet enn he gichenn, hag a laraz euz ann Oniaz-se evelhen: He-man eo a gar kalz he vreudeur hag holl bobl Israel; he-man eo a bed kalz evit holl dud ar gearzantel. Jeremi profed ann Otro Doue a oe gwelet ive oc'h astenn he dorn deo, hag o rein gant-han eur c'hleve da Judaz Makabe, en eul laret: kemer ar c'hleve aour-man: eur c'hleve santel eo; Doue eo hen ro d'id, ha gant-han e tistruji holl enebourien ma fobl Israel.

Sant Ervoan eman 'ta enn he dorn ar c'hleve aour, da laret eo, gras Doue, da dre-c'hin pecho hag ardo ann diaoul; kalz eta eped evid-omp holl; prim e toug dorn d'imp enn hon holl ezomo, evel ma weler er skrid a zo bet lekeet dirag-omp, hag a disk d'imp tri zra: da gentan eo bet sant Ervoan eunn den a wir fe; d'ann eil, en doa ann obero mad; d'ann drived, en deuz groet Doue, dre he dellido hag he bedenno, burzud braz el liez amzer, hed he vue ha goude he varo; ac'hane a dra red e teu diou wirione: ann hini gentan eo e zo er bed eur mestr hag a zo holl c'halloudek ha dre he furnez, hen ren, ha dre he holl c'halloud, a dro urz ann treo, pa blich gant-han; hag enn he vadelez vraz ar vrasan, a ra obero dispar ha souezuz, evit dre verko hag a welomp, en em rein d'imp da anaout, hen ha n'hellomp ket da welet; hag a ra kalz a dreo estlammuz, diwar beden tud hag eplich ho c'hreden hag ho buegez d'ehan, evit ma tiskfomp ac'hane ar stumm ma fell d'ehan bean enoret gan-imp. Ann eil wirione eo eman ann den santel-man er baradouz; ma

ne c'houlet ket ma c'hredin, kredet da vihanan d'he obero, evit ma kredfet ha ma wifet eo bet Doue gant-han, dre ar fe hag ann obero mad a oa er Sant-man kouls a diavez hag a diabarz; hag eman breman enn Doue, da laret eo, lekeet enn he c'hras da holl vikenn. Ar belek santel-man, bet kinniget aliez gant-han da Doue ann oan a ro ar peuc'h, war oterio ann douar, a zo eet he-unan da ober ann offrans dirak tron huel ann Otro Doue enn env; troet eo bet he daero enn joauzded hag enn dudi.

Biniget da veo Doue da vean bizited he bobl dre alberz eur belek ken mad; goude bean hen galvet da vont d'he gaout, ne baouez ket c'hoaz ann Otro Doue da gonfortin ac'hanomp, enn hon draouien a daero, gant ar zonz vad a ro d'imp diout-han. He spered a drid enn Doue; rak divec'hiet euz he gorv, ne d-eo stag ouz nep krouadur; ezom e-bed n'en deuz anhe evit bevan, pac'h eo gwir eo unvanet gant Doue, ha ma vo da vikenn eunn henvel spered hag hen, kouls hag eunn henvel ioul hag eunn henvel karante, da laret eo, ne c'houlo ha ne garo nemed ar pezh a zo gou-

let ha karet gant Doue. O kaout eta ar Zantman da lakaat e roll ar Zent, hen pedfomp evelhen : *Sant Ervoan* ! ma teuio ar veuleudigez ac'h eomp da rein d'ho vertuio, da dalveout d'imp, dre ho tellido, ar freuz-man : da gaout bruzunenko ar graso ac'h euz bet digant ar Spered-Santel ; ho pue a zo reoul eur vuegez vad, hag ho maro dor ar vue ; groet m'hon do hon lod er graso-ze ; bet d'imp digant Doue ma pellao diouz hon c'halono tevalijen ar gevier hag ann techo fall, evit pa echuo hon bue, ma veomp digemeret enn touez ar sperejo evuruz gant pere hoc'h enoromp hag ho pinigomp ! Enn hano ann Tad, hag ar Mab hag ar Spered-Santel. Evel-se beet groet. » Setu-hi aze, ar brezegen a roaz Hon Tad santel ar Pab, kent evit lakaat sant Ervoan war roll ar Zent.

Bec'h e oe da Rom bean laret he c'hir divyezant, ma en em dolaz Breiz holl a-bez da dreid ar Zant a oa o paouez da vean roet da batrom d'ehi.

Ne gred ket d'imp ec'h afemp e tu all d'ar pezh a zo gwir, o laret n'euz ket, er vro-man,

eunn iliz parrouz, pegen dister ha paour-bennak e ve, ne ve enn-hi qter pe da vihanan skeuden sant Ervoan. Biskoaz gant pobl ne oe enoret Sant gant mui a fiants hag a deneridigez. Ne oe ken na da Rom na da Zan-Jakez Spagn, eo ec'h eaz ar birc'hirined ; da Landreger eo e teujont a vagado stank. C'hoaz hirie e zo nebeud a diado tud, enn Breiz, na ve ann hano Ervoan-kaset a ren da ren euz ann tad d'ar mab. Enn holl gerio e zo ru pe leuren hag a zo hanvet ru pe leuren sant Ervoan. Deut eo ar Zant-ze evid-omp eunn difenner, eur fiants hag eul loc'h, ha n'omp ket evit tremen hep-han.

Q

PENNAD XV.

Sevel a rear relego Sant Ervoan.

Tud vraz hag luel a westl enor ha douj d'ar Zant enn Breiz, er Bro-C'hall, hag e pell-bro.

Relego ar Zant enn kerio Anvers, Malin ha Louvain.

Sant Ervoan ar Vretoned e kear Rom.

D'EUNN nebeut mijo goude ma oe Ervoan He-louri diskleriet Sant, d'ann nao war-n-ugent a viz Here, e oe savet ar relego santel; enn douar iliz vraz Landreger e oa aboe ar bla trizek kanttri. Meur a de e chomjont dirag ann holl, da bep-hini d'ho enorin; neuze e oe dispartiet penn ar Zant, ha lekeet e tezor ann iliz vraz. Kalz a vurzudo braz a c'hoarveaz; euz a gorr ar Zant e teue eunn nerz burzuduz. E desped ma oad enn brezel, e oe groet eur goel kaer neuze; hag er goel-ze; gwir goel ar vro, e weled holl Iskibien ha beleien Breiz, ann holl urzo menec'h, hag holl dud

vraz ar bed, adaleg ar varoned beteg ar bobl vihanan. Charlez de Bloiz, groet prizounier, d'ann driouac'h a viz Even ar bla-ze, ouz troad mogerio ar Roc'h-Derien, gant ar Zozon a oa e tu Monfort, a oe lest gant he jolierien da dont ive d'ar goel. Gwelet e oe o vont enn iliz Landreger, gant he diwar hag he divrec'h noaz; war benno he daoulin e tiskennaz ar e'hoec'h pazen a oa ouz dor ann iliz vraz, ha bepred war benno he daoulin noaz, en em stlejaz bete be ar Zant, hag eno e pedaz kalonek. Kalz a verko all a gaver, e bue ar Prinsze, euz he douj enoruz e-kenver sant Ervoan Landreger.

Ann den braz a vrezel, Bertram du Guesclin, e oa ive he spered hag he galon troet d'ann hevelep douj enoruz, pa c'hourc'hemenne, d'ann nao a viz Gouelen, trizek kant pevar-ugent, dre he destamant, ma vije kaset evit-han eur pirc'hirin e beach da di sant Ervoan enn Breiz-Izel, ha roet pemp kant livr goar d'ar Zant.

E-touez ar re doujusan da zant Ervoan, e tleer lakaat ann duk Iann, pemved enn he

hano. Ar Prins-man a dremenaz he vue holl o wellaat d'ann drougo a goueaz war ar vro gant ar brezello diagent. Iudazet ha kemeret e oe koulskoude gant bugale vihan. Charlez de Bloiz, d'ann drizek a viz C'houevrer pevarzek kant nao, ha dastumet enn eur prizoun enk-meurbed. Aon d'ehan da goll he vue, Iann a droaz a galon vad war-du Doue, hag hen pedaz dre dellido sant Ervoan d'hen lemel diouz ar riskl ma oa he deio. Gwestl war westl a re, evit kaout he frankiz digant Doue hag ar Zent; e tu all d'ar furnez ec'h eaz gant he; hag ar Pab a renkaz hen diskargan euz a darn anhe, rak na oa ket Iann evit ho akouitan holl. E-mesk ar gwestlo a viraz piz, merkomp daou, unan d'ann Itron Varia Garmez, da rein d'ehi he boezanz aour, hag egile da zant Ervoan, da rein ive he boezanz ar e'hant d'ehan. Iann, evit ober diouz ar gwestl divezan-ze, a reaz, raktal goude ma oe tennet a brizoun, sevel ar chapel gaer, ar gae-ran a weler enn iliz vraz Landreger, enn enor d'ann Otro sant Ervoan, hag ive goude-ze evit digemer relego ann Duk mad. Enn am-

zer-ze e krokjoud da gizellan he sant Ervoan. Da c'houec'h mil eiz kant skoed war-dro e save gwestl ar prins; ne oe ket awalc'h anhe, ha gwelet a reomp e oa bet roet ouz-penn tri livr aour, da alaourin tro ha zro d'ar be. Ar pezh labour-ze, ken kaer ha ken ker, a zo bet bruzunet er bla seitek kant trizek ha pevarugent; pe hen a zo bet tennet war baper, pe n'eo ket, ne ouzer doare; douget a veur da gredin n'euz chomet netra nemet keuz, e vefe bet eunn toullad soudarded, a Bariz ann darnvuian anhe, lest gant Landregeriz da derrin dorejo ann iliz vraz, da fralian he sant Ervoan, ha da dol ann tammo er mor. Eur c'holl eo hen-nez ha michans na vo bikenn dic'haouet.

Ar be-ze e oa groet gant mein gwenn, plen ha lufr evel ar marbr. Enn daou du hag enn daou benn e oa bet skeudennet gonido pe viktoario Iann Pevar enn he hano, evel evit merk euz ann anaoudegez vad e oa bet karget ar mab gant ann tad da lezel testenio anad anehi. War ar be goullou e weled skeuden pe statu ar Zant gourveet evel da gousket. A uz d'ar be e

oa eur stel pe dom enn mein gwenn ive, labourer euz ar c'haeran, ha douget pe harpet war bosto moan ha brao. Diwallet e oa ar penn-labour pinvidik-ze gant eur gleud houarn alaouret, hirr awalc'h evit mont diwar mein ann iliz beteg ar volz; e diabarz ar gleud-ze, ar be holl, adalek kroec'h bete traou, e oa gwelio lien gwenn enn dro d'ehan. N'ee kammed ar veleien enn diabarz ar gleud nemet gant douj ar brasan, ar rodeden, hag ar stol enn ho c'herc'hen.

Mes ann Duk ne oe ket awalc'h evit he rijion ober sevel ar be pinvidik-ze; fellout e reaz d'ehan bean interet he-unan e-kichen sant Ervoan, er chapel gaer ha braz en doa gwestlet d'ehan, hag a oa hag a zo c'hoaz hanvet *Keur ann Duk* gant ar bobl. He c'hoant a diskleriaz dre al lizero anat a roaz e kear Gwened ma talc'he he stado, evit barn enn eunn doare berz ar re hen doa iudazet ha tolet er prizoun.

Goulenn a ra anehan he-unan, eme-han, ha dre ar fiars vraz hag ar garante en doa e-kenver ar Zant enoruz-meurbed, ann Otro

sant Ervoan, ma vo interet he gorr el lec'h m'aman korv ann Otro sant Ervoan, enn iliz vraz Landreger; ma vo kanet bemde eunn overn, enn iliz-se, dirak be ar Zant, ha daouzek servich vraz bep pla, e de kentan ar miz, pa vo hellet; hag evit ann overnio-ze ha pedenno all, e ro pemp kant livr leve, da gemer bep pla war dleado mor he gear ar Roc'h-Derrien neve lemet digant enebourien ann Duk. Ar prins Iann a varvaz enn eur maner, tost da gear Naoned, d'ann eiz war-n-ugent a viz Est, pevarzek kant daou ha daou-ugent. Interet e oe enn Keur iliz vraz Naoned, e-kichen he dad; mes ne dlee ket chom eno, hag he vab Fransez kentan enn he hano, a roaz he c'hir war-ze, dre wir lizer, da Eskob ha da chalonied Landreger. E desped da lizero ha da destamant Iann pemved ha da skrid he vab, ne-oe nemet goude eur prosez hirr, nao bla, gant tud Naoned, eo e teuaz relego ann Duk da gear Landreger; er bla pevarzek kant unan hag hanter-kant, e oejoint interet enn iliz vraz, gant ann Otro Iann Blouek, Eskop Landreger, hag he chalonied, ha beleien all ann iliz vraz,

ha re ar c'herio ha parroujo diwar-dro, e dia-draou chapel ann Duk, izeloc'h eunn tammik evit be sant Ervoan.

Kemend a c'houlenne Iann Pemved a oe groet enn iliz vraz Landreger, beteg ann de ma teuaz ann heskin da gas kouit chalonied Landreger, ha da diskar kadeur Eskop san Tual. Evel-se d'ar c'houls skrijuz-se, e koue hag e varv holl c'hloario, pinvidigezo ha pendenno; ha bikenn ne vo gouvet pegemend a goustaz d'imp nao pe dek vla a fallagriez hag a distruch.

Red e ve lenn, (e nebeut follennô distag, bet soveteet euz a dispenn papero Landreger), listren ann treô kaer a oa e tezor ann iliz vraz; donezono a oant, groet da zant Ervoan, gant pirc'hirined kalonek a deuaz da enorin he ve, evel Charlez, breur da Roue Loiz eunnekved enn he hano, Duk Gienn, Milord Stuart, niz da Roue Bro-Zoz. Da gentan e oa ar voest arc'hant e oa penn enoruz ar Zant enn-hi: douget e oa war bevar leon bihan arc'hant alaouret, hag enn dro d'ehi e luc'he eur stol aour hag e steredenne ar perlez enn-hi: diou voest all

arc'hant ive ha perlez war-n-he, evit eskern brec'h ar Zant; c'hoaz ouz-penn e oa daour galei, ha skeuden sant Ervoan war-n-he, hag ardamejo pe armorio ti Gervarzin. Enn tuont e oa skeuden ann Otro sant Ervoan, o prezeg enn eur gadeur arc'hant aouret, ha pevar den o selaou anehan, holl war eur zol arc'hant; skeuden eunn den hag eur c'hroek, o tigas eur bugel dirag eunn oter e oa uz d'ehi skeuden sant Ervoan, holl arc'hant war eur zol goad; eur skeuden all hag e oa sant Ervoan enn-hi o rein ed euz eur c'houf, d'eur paour, gant eur c'hreur enn eur zac'h, holl arc'hant, ha war eur zol goad; c'hoaz sant Ervoan skeudennet enn he c'hourve war eur gleud, enn arc'hant arre, gant eul levr dindan he benn; eur skeuden all euz ar Zant, arc'hant aouret, ha pevar abostol braz evel-t-han; enn divez e oa skeuden eunn den a vrezel war eur marc'h greiet kouls hag ann den, holl arc'hant aouret.

Ma ne chomaz na be, na boesto relego, na kloc'h braz sant Ervoan war-lerc'h distrucherien ann heskin, da vihanan n'eaz ket ho

daouarn war he relego zantel; kuzet e oant bet enn unan a gavio ann iliz vraz. D'ann eiz war-n-ugent a viz Ebrel, triouac'h kant unan, e oejont tennet ac'hane, ha dalc'hët da wir e oant gwir relego ar Zant gant ann Otro Sant-Priest, yikel vraz enn Eskopti. Penn ar Zant, enn he bez hag e stad vad, a zo hirie enn eur voest koevr aouret, roet gant ann Otro Kelen, Arc'heskop Pariz. Ar voest-ze eo a douger bep pla, euz a Landreger d'ar Vinihi, enn eur gaer a prosesion, d'ann naontek a viz Mae, de bardon braz sant Ervoan, war dro eunn deg heur veure. Evel-se e teu ar Zant evel da zével euz he ve, evit bizitan al lec'h ma c'hanaz, ma reaz ar mad ha ma varvaz; neuze e tistro d'he gaer a iliz vraz, douget, evel enn de-mac'h eaz he ine d'ar baradouz, war diou-skoa ar veleien, e-kreiz ar pedenno hag ar-gwercho santel.

Dija hon euz laret e oa hag ec'h eo bepred enoret braz sant Ervoan enn hon Breiz. Eur gir a chom gan-imp da laret war ar pezh a zo groet a gaeran hag a vrasan, enn hon bro, enn enor d'he fatrom. Perak omp-ni hep

mann, koulz eo laret, da verkan war Dredrez ha Louannek diou barrouz hag eo ho gloar bean bet eur Zant da berson?

Enn Rahon, e oe savet er bla trizek kant eiz hag hanter-kant eur c'hlandi pe hospital gant eur belek ganet enn Eskopti Landreger, ha lekeet gant-han dindan patroniach sant Ervoan. Brasaat eo bet aboe, ha kaeret gant he chapel vrao, groet war-dro eur pevar-c'hant vla so, hag a zo c'hoaz enn he sa; ha miret en deuz hano enoruz ar Zant a oe roet d'ehan da gentan. Lez braz Rahon en don kemeret ive sant Ervoan evit he batrom, hag he difenner. Lezio all ar vro a heuliaz al lez brasan, hag hirie c'hoaz, dam dre-holl e veo ar zonz euz ar patroniach-ze; d'ann naontek a viz Mae, e welfet ann dud a lezen ouz en em glask, da nevein, enn hano sant Ervoan, ann unvaniez hag ar gwir garante etre-he.

Enn Naoned ar Vreuriéz vrezonek savet evit ar vestro skol gant Fransez Eil enn he hano, gant skor ar Pab, na gavaz ket eur patrom enorusoc'h evit sant Ervoan, hag a vouez huel ec'h hanvaz ar belek gwiek-ze da batrom da dud wiek Breiz.

Enn kear Gwerand, Eskopti Naoned, e oe savet eur gouend da vugale San-Dominik gant ann Duk Iann Pemved, hag evit he douj braz da zant Ervoan, e fellaz d'ehan ma vije roet ar Zant da batrom d'ann Iliz; Eskop Naoned, Gwill Maletroit, he gwestlaz d'ehan d'ar c'houezek a viz Gwengolo, er bla pevarzek kant unan ha daou-ugent.

Setu-ni o tigoueout war eur pezh labour ar c'haeran, groet gant aluzono pirc'hirined Breiz-Izel, michans, enn enor da vrasan Zant euz ar vro Arvorik, ha deread mad ouz ann Otro sant Ervoan. Mar d-oc'h bet biskoaz enn ti sant Matilin Moncontour, e tleet bean gwelet, e traou-traou ann iliz, eur c'haer a bre-nest hag en deuz lekeet dirag ho taoulagad bue sant Ervoan, enn he digoueo brasan da vihanan. Da gentan gwech e refet ar veach santel-ze, bet sonj euz ar prenest a laromp d'hac'h, tosteet d'ehan, hag evit plijadur, chomet eur pennadik dirag-han, ha gant eunn tol ho po groet daou, bizid da zant Matilin Monkontour, ha gweladen da Zant ho pro, d'ann Otro sant Ervoan Landreger.

Eomp er meaz a Vreiz, baleomp Bro-C'hall, ar Beljik; boutomp bete kear Rom, ha dre holl e kavfomp eo anaveet sant Ervoan hag enoret evel unan a wellan minioned Doue hag ann dud.

Er bla war-lerc'h diskleriadur sant Ervoan da Zant, ann dud a Vreiz a oa e Pariz, a lekeaz enn ho fenn sevel eur vreuriezh, hag ober eunn iliz vihan enn enor d'ho Zant. Eskop Pariz a kavaz mab d'he hen ober, ha bean eman c'hoaz al lizer a skrivaz evit-se, d'al lun goude goet ar Werc'hez da hanter-Est, er bla trizek kant eiz ha daou-ugent.

Savet e oe ann iliz vihan-ze e karter ar skolio; eno e oa beo-buek c'hoaz ar zonz euz ar Zant. Ann iliz a digore war ru San-Jakez, hag a re korn ru ar gwe kraou. Ar vreuriezh hag ann iliz vihan ho doa ann enor da vean bet kemeret gant Rouane Bro-C'hall dindan ho skoazel ho-unan. Eno en em dastume ken-vreudeur ar vreuriezh, tud a doujans Doue hag a doare; tud a iliz ispisial hag a lezen, holl unvanet ann eil gant egile e spered ho fatrom santel, da dennan, dre bedenno ar Zant, war

ann daou rumm tud-ze, bennozo ann env, ober ho c'hargo diez gant enor ha koustians vad. Breuriez sant Ervoan a badaz bete deio fall ann heskin, ha na adsavaz ket goude. Tamm ha tamm e oe dilezet ann iliz; hag er bla triouac'h kant tri war-n-ugent, e oe diskaret krenn. E Pariz e oa relego euz a relego sant Ervoan enn iliz leanezed santez Elizabeth, enn hini leanezed Val-Gras, hag enn hini menec'h San-Dominik e ru San-Jakez. Relego ar re-man a oe bet roet d'he, er bla c'houezek kant tri ha daou-ugent, gant ann Otro Delandez, Eskop Landreger, ho c'hoz kenvreuer; menec'h Trede-Urz San-Fransez, e Pariz, ho doa ive, enn diou euz ho c'houdencho, daou askorn braz euz ar gorr sant Ervoan; enn ho zi hanvet Pikpuz eunn askorn brec'h enn he bez serret en eur gaer a vrec'h arc'hant, hag eunn tamm askorn skoa, enn ho zi anaveet dindan hano ann Itron-Varia-Nazareth.

Kent evit kouitaat Bro-C'hall, n'ankoamp ket iliz vraz kear Chartr e oa enor enn-hi evit hanter-c'houriz-reun hag hanter-zae sant

Ervoan; hag enn tuont da-ze, evit eunn tamm askorn brec'h e doa bet di gant Adrien Ambroaz, Eskop e Landreger breman 'zo daou-c'hant vla; hanvomp c'hoaz ilizo vraz kerio Auser hag Evreu; hini Noyon; Chapel santel Dijon, hag ann Itron-Varia ar Bourk; el lec'hio-ze holl e oa, hag enn darn anhe e zo c'hoaz merko anat ho deuz enor evit sant Ervoan, ha fians vrazenn galloud he bedenno dirak Doue. Ti Skol al lezenno enn kear Orléan hen enore evel he skolaer hag he difenn. Lez braz kear Pau a re he oel gant eur gaerder souezuz: he brosesion a re ann dud a lezen gouisket gant saeio ru, hag arok d'he e kerze daou geur muzik, da ganan ha da zoun gant bep seurt binvio.

E Rouantelez Beljik e welomp enor braz o sevel e-kenver sant Ervoan adaleg ar bla c'houezek kant daouzek ha tri-ugent diwarbenn tri damm mad euz a eskern hon Zant. Ar relego-man, goude bean tremenet dre daouarn Rouane ha prinsed, e tigouez d'he bean lekeet enn abati Sant-Salver kear Anvers. Eno e oe kaer ar goelio a reaz ann dud a lezen

evit enorin sant Ervoan. He gemer a rejont evit ho fatrom, evit diskin gant-han heulian, enn ho barno, lezenno ar wirione heb ankoat lezenno ann drugare hag ar vadelez. Daou vla goude, e oe savet e kear Gand, eur vreuriezh barnerien, tud a lezen, ha tud all a bluen, dindan Patroniach ar Zant breiziad.

E kear Louvain e oa ann tier skol, hag ispisial ti skol al lezenno, en em lekeet pell a oa, da gemer hon Zant evit ho fatrom. Er bla c'houezek kant c'houec'h ha tri-ugent e welomp eur skolach, o rein da iliz San-Per Louvain, eur zant Ervoan arc'hant a bemp troatad. Ar skolach en doe ive digant abad San-Salver Anvers, ennn tamm-euz a relego sant Ervoan, hag a oe lekeet gant enor braz enn heveleb iliz Sant-Per, d'ann naontek a viz Mae c'houezek kant daou ha pevar-ugent.

Enn Rom, ar breiziad a lakao enn he spered gwelet ann ilizo a zo hep niver en gear-ze, ne goueo ket marteze he daoulagad, o vont euz leuren *del Popolo* da Zant-Loiz-ar-C'hallaoued, e tu deo, eunn tammik arok eruout gant San-Loiz, war eunn iliz vihan;

ha koulskoude ann ilizik-ze a zo unan euz ann enorusan testenio a fe hag a c'halloud hon tud koz. A uz d'ann or, e lenner ar c'homzo-man : *Er bla pemzek kant eiz ha tri-ugent, eo bet kempennet a-neve gant pobl Breiz, ann iliz-man bet gwestlet dija da zant Ervoan Landreger, advokad ar bevien hag ann intanvezed.*

Ann iliz-se, kouet re izel, siouaz, diouz ma oa huel zavet gweach all, hon euz eur gir da laret war ar penn kentan anehi, ha war ar pezh a deuaz da vean.

Er bla pevarzek kant eunnek, e reaz pobl Breiz e kear Rom, eunn ti-repu, dindan hano ha patroniach sant Ervoan, evit pirc'hinied paour ho bro. Savet e oe ar c'hlandi bihan-ze tost d'eunn iliz hag a oa dilezet; nag overn nag oviz na read ken enn-hi; goulenn a eure ar Vretoned anehi digant ar Pab; hag er bla pevarzek kant eiz hag hanter-kant, e oe roet d'he, gant karg d'hec'h adlakaat enn stad vad, ha zo-ken da iliz parrouz e oe savet. Diwar-neuze e teuaz da vean iliz Sant-Ervoan-ar-Vretoned.

Er bla pemzek kant pemzek, diwar beden

Annan Dukez Breiz, Robert Gibe, bet Eskop e Landreger, ha Kardinal goude, ha diwar beden meur a Eskob hag a den a iliz all, ganet holl e Breiz, Léon dekved enn hé hano, neve c'hroet Pab a zavaz enn iliz sant Ervoan eur vreuriezh evit plac'hed ha potred a bep stad ha doare; kalz a c'hraso euz ar re vrasañ a stagaz ouz ar vreuriezh-se, hag ouz ann iliz, eunn induljans vraz pe blenier da c'honid, de oel ar Zant, da biou-bennak a deuje enn de-ze da bedin enn-hi, hag a raje eunn aluzon, e mad ann iliz, evit sikour ouz ann dispinio a oa da ober enn-hi.

Er bla pemzek kant eiz ha tri-ugent, evel ma lar skrid ann or, e oe adsavet ann iliz. Neuze e vije groet bep pla, goel sant Ervoan, hag euz ar c'haeran; ann dud a lezen a deue d'ann overn bred a ganed enn iliz, ha d'ar brezegen gaer, groet war batrom ar varnerien, gant eur prezeger brudet-bennak. Kaout a rear c'hoaz unan-bennak euz ar prezegennoze, moulet e Rom. Pa baouezaz Breiz da veañ eur bobl distag, ha goude maro ann Dukez Annan ispisial, e oe lemet hec'h hano a bar-

rouz digant iliz Sant-Ervoan e Rom, ha staget hec'h holl c'hraso ouz iliz vihan San-Loiz-ar-C'hallaoued.

Kaer ho doe stado ar vro ha dukach Breiz pedin hag adpedin, ha digas koun pe sonj e oa bet enn kear Rom eunn iliz parrouz savet ha pinvikeet euz a dremen pemp mil livr leve ar bla, gant fe ha rilijion vraz tud a reng huel a Vreiz, hag e oa bet e peb amzer, e penn ann iliz-ze beleien a Vreiz, evit he ren hag he goarn er pezh a zelle ann ineo, hag he leveo hag all; poan hag amzer gollet a oe, michans; eet e oa e penn ann dud e selle ann dra out-he, e tleed he dilezel; ha diouz he gwelet er stad paour m'aman, eo eaz kredin e oad troet d'he lezel krenn. Bep peure koulskoude e zo overn enn-hi, ha gwech ha gwech all eur vreuriezh, ne ouzer pehini, a ia da laret hec'h oviz, ha d'en em glevet enn iliz-se. Enn touez ar Vretoned mui pe nebeutoc'h brudet a zo bet douaret enn-hi, eo red henvel Robert Gibe, Eskop Landreger, Rahon ha Naoned, Kardinal belek, stag ouz iliz Santez-Anastazi e Rom. Ganet enn eunn ti

bihan zoul e kear Vitre, eskopti Rahon, e teuz Gibe da vean savet d'ann enorio huelan gant eur breur d'he vamm en doa tiet bean unan a vinioned keran Roue Bro-C'hall. Diskaret e oe he donton ; hag hen ive, ne oe ket neuze raktal, a gollaz graso mad ar Roue, ha gant-he he holl enorio ha danveo ; ha goude bean bet pinvikan den a iliz a oa e Bro-C'hall, e varvaz enn Rom, d'ann nao a viz Gwengolo, pemzek-kant trizek, ken paour ha ma oa deut er bed-man ; n'en doa da vevan nemed ann aluzono a roe Kardinaled Rom d'ehan.

Breuriez ann dud a lezen enn Rom, a zo bepred enn he sa dindan patroniach sant Ervoan ; breman ayad, eo enn iliz Sant-Charlez eo e ra hec'h oviz bep sul. Goude-ze en em denn ann Otrone mad-ze enn eur gampr nez da welet piz ar c'hojo en em gav pevien leuiet enn-he. Mar teuont da anaout ar wirione e tu ar paour, e kemer unan anhe karg d'hen difenn abalamour da Doue ; ha difennet mad eo ar paour ; rag a viskoaz e zo bet gwelet advokaded euz ar re gentan er vreuriez-se.

Sant Ervoan a gomz 'ta bepred, evit-han da vean maro tremen pemp kant hanter-kan vla 'zo. Ia, ha komz pell a raio c'hoaz ; hag e-keit ha ma vo tud war ann douar, ne baouezoda gomz ouz ar re hen pedo gant fians, hen enoro hag a labouro a greiz kalon da gemerskouer diwar-n-ehan ; evit ar re-ze ive ne baouezoda gomz ouz ann Otro Doue ; mignon eo sant Ervoan da Doue, ha Doue a zo mignon da zant Ervoan ; lekeomp eta holl, koz ha iaouank, paour ha pinvidik, ni broiz sant Ervoan, lekeomp hon Zant da gomz evid-omp ouz ann Otro Doue ann Tad, ouz Jezuz he Vab hag hon Zalver hag ouz ar Spered-Santel, gwir Doue evel ann Tad hag ar Mab ; komzomp eta aliez ouz hon Zant, hag e teuo d'imp dre hon Patrom mad, sklerijen, karante ha nerz da ober, evel sant Ervoan, ar pezh a zo mad, da dec'hel euz kemend a zo drouk ; da vevan ha da vervel enn gwir gristenien, ha da gaout hon lod euz evurusedd sant Ervoan enn env.



LID-HANOIO SANT ERVOAN

PE BEDEN ENORUZ

groet da Zant Ervoan gant ann hanoio a dere out-han.



Otro, ho pet true ouz-imp.
 Otro, ho pet true ouz-imp.
 Jezuz-Krist, ho pet true ouz-imp.
 Jezuz-Krist, ho pet true ouz-imp.
 Otro, ho pet true ouz-imp.
 Otro, ho pet true ouz-imp.
 Jezuz-Krist, hon zelaouet.
 Jezuz-Krist, hon zelaouet.
 Jezuz-Krist, roet d'imp hon goulenn.
 Jezuz-Krist, roet d'imp hon goulenn.
 Tad a zo enn env, hag a zo Doue, ho pet
 true ouz-imp.
 Mab, Salver ar bed, hag a zo Doue, ho pet
 true ouz-imp.
 Spered-Santel hag a zo Doue, ho pet true
 ouz-imp.
 Treinded Santel hag a zo eunn Doue hep-ken,
 ho pet true ouz-imp.
 Santez Mari, Rouanez ann Holl-Zent, pedet
 evid-omp.

Sant Ervoan, tad ar bevien, pedet evid-omp.
 Sant Ervoan, den souezuz,
 Sant Ervoan, sklerijen ho pro-c'han,
 Sant Ervoan, birvidik evel eur zerafin,
 Sant Ervoan, forniz a garante,
 Sant Ervoan, skouer a wir izelled,
 Sant Ervoan, enor ar govesored,
 Sant Ervoan, karanteuz ouz ar groaz,
 Sant Ervoan, kalonek evit ar binijen,
 Sant Ervoan, enor pep santelez,
 Sant Ervoan, mizilour a werc'hded,
 Sant Ervoan, enebour ann techo louz,
 Sant Ervoan, mizilour a barfeded,
 Sant Ervoan, skouer ann holl vertuio,
 Sant Ervoan, trec'h d'ann demptationo,
 Sant Ervoan, trec'h d'ar bed,
 Sant Ervoan, trec'h d'ann diaoulo,
 Sant Ervoan, den enoruz,
 Sant Ervoan, den didamall,
 Sant Ervoan, den ar zioulân,
 Sant Ervoan, difenner ann dud dic'haou,
 Sant Ervoan, harp ar gwerchezed,
 Sant Ervoan, tad ann intanvezed hag ar
 vinored,
 Sant Ervoan, oberer burzudo,
 Sant Ervoan, spouron hag argaser ann
 diaoulo,
 Sant Ervoan, lagad ann dud dall,
 Sant Ervoan, teod ann dud vud,

Pedet evid-omp.

Pedet evid-omp.

Sant Ervoan, a wella ann dud klan,
 Sant Ervoan, a-ro buë d'ann dud varo,
 Sant Ervoan, mirer ann dud a vor e riskl,
 Sant Ervoan, dic'h lac'harer ann dud an-
 keniet,
 Sant Ervoan, mager ann dud faminet,
 Sant Ervoan, repu ann holl dud-reuzeudik,
 Sant Ervoan, skoazeller kemend hini ho ped,
 Sant Ervoan, hon patrom hag hon difenner
 ar gwellan,

Oan Doue, a lem pec'hejo ar bed, distolet d'imp,
 Otro.

Oan Doue, a lem pec'hejo ar bed, hon zelaouet,
 Otro.

Oan Doue, a lem pec'hejo ar bed, ho pet true
 ouz-imp.

Stard eo lekeet he obero mad dirak Doue, hag holl
 vanden ar Zent a laro he aluzono.

Evruruz eo ann hini a doug dorn d'ann den ezomek
 ha paour.

Doue a lakao frank war-n-ehan e de ar wask.

Sant Ervoan a varnaz e tu ar bugel diberc'hen;
 harp a roaz d'ann den bec'hiet, difenn e reaz ann
 intanvez.

Sant Ervoan, pedet evid-omp.

Evit ma vefomp lekeet mad ma talc'ho Jezuz-Krist
 d'he c'hir enn hon c'henver.

Pedet evid-omp.

PEDEN.

O Doue, ann Otro sant Ervoan, ho kovesour, ae'h
 euz roet evit dad d'ar bevien, advokad d'ann intan-
 vezed, evit harp d'ar vugale diberc'hen; roet d'imp
 ive, dre he bedenno, ar c'hraas da vean entanet gant
 eunn hevelep karante, ha da lakaat a uz da dreo
 ar bed-man, a dremen prim, perlezen talvoudek ar
 vue a bado da holl vikenn. Enn hano Jezuz-Krist Hon
 Otro eo hen goulennomp digan-hac'h. Evel-se beet
 groet.

LITANIES DE SAINT YVES.

Kyrie, eleison.

Kyrie, eleison.

Christe, eleison.

Christe, eleison.

Kyrie, eleison.

Kyrie, eleison.

Christe, audi nos.

Christe, audi nos.

Christe, exaudi nos.

Christe, exaudi nos.

Pater de cœlis Deus, miserere nobis.

Fili, Redemptor mundi Deus, miserere nobis.

Spiritus sancte, Deus, miserere nobis.
 Sancta Trinitas, unus Deus, miserere nobis.
 Sancta Maria, Regina Sanctorum omnium,
 ora pro nobis.

Sancte Yvo, pater pauperum,
 Sancte Yvo, vir admirabilis,
 Sancte Yvo, lumen tuæ patriæ,
 Sancte Yvo, seraphim ardens,
 Sancte Yvo, fornax caritatis,
 Sancte Yvo, humilitatis exemplar,
 Sancte Yvo, gloria confessorum,
 Sancte Yvo, amator crucis,
 Sancte Yvo, poenitentiae amator,
 Sancte Yvo, decor totius honestatis,
 Sancte Yvo, castitatis speculum,
 Sancte Yvo, impudicitiae persecutor,
 Sancte Yvo, speculum perfectionis,
 Sancte Yvo, exemplar virtutum omnium,
 Sancte Yvo, victor et triumphator tenta-
 tionum,
 Sancte Yvo, victor et triumphator mundi,
 Sancte Yvo, victor et triumphator dæ-
 monum.
 Sancte Yvo, vir honorande,
 Sancte Yvo, vir incontaminate,
 Sancte Yvo, vir mansuetissime,
 Sancte Yvo, innocentium defensor,
 Sancte Yvo, virginum protector,
 Sancte Yvo, viduarum et pupillorum tutor,

Ora pro nobis.

Ora pro nobis.

Sancte Yvo, operator miraculorum,
 Sancte Yvo, dæmonum effugator,
 Sancte Yvo, cæcorum illuminator,
 Sancte Yvo, mutorum eloquium,
 Sancte Yvo, infirmorum curator,
 Sancte Yvo, mortuorum resuscitator,
 Sancte Yvo, in mari periclitantium salus,
 Sancte Yvo, consolator afflictorum,
 Sancte Yvo, saturator famelicorum,
 Sancte Yvo, miserorum omnium refugium,
 Sancte Yvo, omnium invocantium adjutor,
 Sancte Yvo, patrone et defensor noster dul-
 cissime,

= Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis,
 Domine.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos,
 Domine.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere
 nobis.

†. Ora pro nobis, sancte Yvo.

℟. Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS.

Deus, qui beatum Yvonem, confessorem tuum,
 pauperibus patrem, viduis patrum, pupillis tutorem
 dedisti; da nobis ejus intercessionem, simili caritate
 flagrare, et temporalibus, quæ cito transeunt, pre-
 tiosam æternitatis comparare margaritam. Per Chris-
 tum Dominum nostrum. Amen.

Ora pro nobis.

KANTIK ZANT ERVOAN LANDREGER.

Tón : *Goude bean communiet, pe, Zantez Anna.*

Dimeus an Otro zant Ervoan
Diskleriomp ar burzudo ;
Meurbed anaoudek peb-unan
A greiz kalon a laro :

DISKAN :

Otro zant Ervoan vinniget ,
D'hon ine goulét graso ,
Digant Doue c'hoaz goulennet
D'hon douar gliz an Envo.

Hon mam, kent evit hon genel ,
D'ar zant-man d'oa hon gwestlet :
Diboaniet, joaus, he buguel
D'ar zant e deus digaset.

D'an den iaduank en he studi,
O pidi en he chapel ,
A n'eus laret : lak ta zoursi
Ma vi eur belek zantel.

Ia, gwir eo eta : zant Ervoan ,
Goude bizit ha-peden ,
'Vit stad buez, da beb-unan
Bepret a ro sklerijen.

Hag a wech, ho tra burzudus!
Hon douar oll skarinet,

Gand eur glao meurbet talvoudus,
He a neus bet distanet.

Pegen liez c'hoaz, hon parko
Gand an dour evel beuet,
Deus he c'halloud kaëran merko!
He a neus bet dizec'het.

Dimeus ar paour gwasket ar c'hlem
Gant-han zo bepred kleoet :
Ha gand nerz he speret ken leñ,
Ar gwasker a zo trec'het.

Bezan eo, hep mar, zant Ervoan
Ar gwir skoër ar Veleien,
Difen ha nerz an dud a boan
Ha kuzul tud a lezen.

Deus a ben pellan Breiz-Izel
Ar beajour souezet,
A len, en Rom, oar eur chapel,
Zant Ervoan ar Vretonet.

Meurbet karet gant hon tado
Ni hen karo n'hon buez :
Ha kent hen meuli en Envo
Ni laro liez bemdez.

Kavet-mad.

† AOGUSTIN,

Eskop a Zant-Brieg hag a Dreger.

17 Mae 1864.



TOLEN.

Aotreadur.	2.
Girio skrivet fall.	4.
D'ann Otro' David, Eskop San-Briek ha Landreger.	5.
Kent-skrid.	7.
PENNAD I. — Lavar war Kervarzin, etc.	9.
PENNAD II — Sant Ervoan e skolio, etc.	16.
PENNAD III. — Sant Ervoan den a Iliz.	23.
PENNAD IV. — Sant Ervoan Barner, etc.	30.
PENNAD V. — Sant Ervoan Advokad.	42.
PENNAD VI. — Sant Ervoan Person.	54.
PENNAD VII. — Karante sant Ervoan.	78.
PENNAD VIII. — Bue guzet St. Ervoan, etc.	100.
PENNAD IX. — Sant Ervoan a laka Iliz vraz Landreger e stad vad, etc.	118.
PENNAD X. — Maro Sant Ervoan.	129.
PENNAD XI. — Burzudo groet war ve Sant Ervoan ha dleet d'he beden.	137.
PENNAD XII. — Eil rumm burzudo.	149.
PENNAD XIII. — Burzudo all.	161.
PENNAD XIV. — Sant Ervoan a zo lekeet e reng ar Sent.	176.
PENNAD XV. — Sevel a rear relego ar Zt.	
Enoret eo ar Zant e pell bro.	192.
Lid-Hanoio sant Ervoan.	212 — 215.
Kantik zant Ervoan.	218.